

YOUENN DREZEN



skol-louarn veig trebern

Lodenn gentañ

I

AL LIAMM

1972

YOUENN DREZEN

skol-louarn
veig trebern
hag e "frai"
paotr - teo

Lodenn gentañ

I

AL LIAMM

1972

MOULET EZ EUS BET EUS AL LEVR-MAN
MIL PEMP KANT SKOUERENN, EN O ZOUEZ
DEK HA TRI-UGENT WAR BAPER KAER
« LAFUMA » NIVERENNET EUS 1 DA 70.

Pep gwir miret strizh gant Al Liamm

K I N N I G

Setu ma teu er-maez, a-benn ar fin, romant diwezhañ
Youenn Drezen, un nebeut mizioù war-lerc'h e varv.

Youenn Drezen hag a blije dezhañ kalz al levrioù kaer,
en doa c'hoant e vefe moulet « Skol-Louarn Veig Trebern » en
ul levr hepken. O vezañ ma vije bet anezhañ ur pikol levr,
ker-tre, hor boa kinniget e embann e div lodenn, en doare
ma vefe bet dereat priz pep levrenn.

Evel ma n'edo ket a-du, en doa graet e soñj embann an
oberenn e-unan ha klask rakprenerien a-walc'h evit paeañ
ar mizoù. Goulennet en doa digant Per Helias, hag a oa ur
bigoudenn eveltañ, sevel ar pennad-digeriñ a vo kavet amañ
da heul.

Buan, avat, hag e yec'hed o fallaat, e welas ne c'hellfe
ket dont a-benn, hag un nebeut mizioù 'zo e c'houlennas
diganeomp ober war-dro al labour hag embann al levr evel
m'hor boa kinniget.

A-benn neuze e oa prest ur c'hant bennak a bajennadoù
hag ar golo. Ar vent a oa bet dibabet gant an oberour e-unan.
Reizhet en doa ivez ar pajennadoù-se, kemmet zoken, pe lamet
frazennoù 'zo.

Ur blijadur vras e vije bet evitañ gwelout al levr-mañ o
tont a-zindan ar wask. Aet eo, siwazh, da anaon un nebeut
mizioù re abred. An eurvad en deus bet koulskoude, kent
mervel, da welout edo boulc'het mat al labour hag hor c'hui-
taet en deus o c'houzout e oa sur da zont er-maez hepdale
ur romant m'en doa lakaet ennañ e holl galon hag e holl
garantez da liveañ ur wech c'hoazh, en ur yezh dezhañ e-unan,
e gêr c'henidik ha tudigoù e vro, en ur beurechuiñ evel-se
un oberenn a chomo « saga » ar vro vigoudenn.

Ronan Huon.

An Tad Ujen, eus Kenvreurezh Kalonoù Sakr Pikpus, ma n'en dije ket dibabet ur Bigouter yaouank anvet Youenn Drezen da vezañ misioner goude c'hwec'h vloaz studi e Ondarribia ha Miranda de Ebro, al lennegezh vreizhek he dije douget, moarvat, kañv ur vouezh dreist, ha ni, n'hon dije ket graet anaoudegezh gant Veig Trebern. N'hon dije ket graet Drezen mont da brezeg ar feiz dre ar bed. En harlu, avat, en anaoudegezh ganeomp hon-unan. Ne oa ket tonket da Youenn deus dizoloet dezhañ ur c'halvedigezh all ma n'eo ket bet gouest da herzel outi ha ma'z eo dalc'het ganti brepred : kanañ e vro en e yezh ha war beb ton warn-ugent. Er-maez ar peurrest ha ne dalvez ket ur vrennigenn. Klaoustre e varvo dibec'hed betek ar fin. Evel-se bezet graet !

Ganet gant ar c'hantved pe dost, paket oa gantañ e unnek vloaz pa bignas en tren, e Kemper, da vont d'an tu all d'ar Pireneoù. Gantañ e pella diouzh e vro c'henidik Jakez Riou, a zeuas da vezañ e genlodeg touet, e vreur gevel en eneberezh hag en hirnez, e « ziskaner » evel ma lavar paotred ar pachpi, dezhañ ur pouez-mouezh izeloc'h hag a vo mouchet a-wechoù gant ur vorenn fromus. Ne baouezint ket, hiviziken, da lemman o spered etrezo evit stourm ouzh o ranngalon. He mezviñ gant o bugaleaj breizhek ken brav ha gant ur gwin-hud. Hogen, peurc'hraet e oa santerezh an eil hag egile evit mat pa loc'hasint kuit, gourlañchenn skoulmet. Hiviziken, netra ne c'hell bezañ dreist dezhi nag he zreiñ e feson ebet. Ne raio an harlu spagnolek nemet gwashaat an tamm outi en ur ziwall ar pezh anezhi. Evel Tangi Malmanche o tilezel Maner ar Rest, Youenn ha Jakez a gaso ganto o bed en o fenn da bourveziñ o buhez holl. Eveltañ, hag a vouete war e vugaleaj e stal-labour Krommhent, an daou-se a zaskirias Lotei ha Pont-n-Abad d'en em zifenn ouzh pep bosenn a-ziavaez. Eveltañ atav e fellas dezho teurel ar bed priziose war ar paper kenkas e kollfent o fenn. Ha setu ma teu deomp hiriv Veig Trebern da zizleañ al liard diwezhañ.

Merk ar gwellañ skrivagnerien e brezhoneg eus ar c'hentañ hanter kantved a zo goulenn dalc'hmat testeni digant bloa-

vezhioù o yaouankiz. O vezañ an traoù evel m'emañ, e Breizh, eus peseurt mammenn all e c'hellfent tennañ o awen, gouestlet ma oant d'an daou harlu el lec'h hag en amzer kerkent ha lonket ganto o fask kentañ ha desket ne oa yezh o mamm tra all nemet trefoedach tudachoù iskresket war-bouez mont da netra ! Hep sevel kaoz eus an doare forbannerezh dibad-se, derc'hel er c'hloz, etre mogerioù ur skolaj, kouerigoù, brezhonegerien anezho, hag a oa outo, dre stad, kanfarded ar seizh avel. Peorien, moarvat, met o terc'hel ganto ar galloud da zrailhañ o fun e pep korn ar park pa rae dezho un dro-spered bennak digeriñ frank o fronelloù. An emlusk-se d'ar frankiz a ya da heul kalz a Vretoned penn-da-benn gant o buhez ha, ma koust ker-du a-wechoù, n'em eus klevet hini ebet o klemm gant ar priz. Ar skolid-louarn a c'hoariont alies betek ar maro, un doare dezho 'ni eo d'enebiñ ouzh ur bed a zo divuzul-kaer en o c'heñver. Un digoll 'ni eo evit an divrudoù dister hag ar glac'harioù bras. O zrec'h meur, war an diwezh, kea ! Youenn Drezen, o vale gant ar gozhni, en deus savet levr Veig Trebern, eizh vloaz, eus ar Waremm Mên, mab da Herve Trebern, ar mañsoner, ha da Vari-Gorantina, e wreg, eus Menez-Piked, da walc'hiñ ac'hanomp eus pep saotradur ha pep skiant-prenet (ar memes tra eo), ni hag ez eus bet ouzhomp al lamponed aelek, distrujet dezho o baradoz gant ar re vras, evel ma ra dalc'hmat ar re-mañ. Sec'h da fri, Veig, ha bevet ar skolid-louarn !

Arabat deoc'h krediñ, evit kement-se, ez eus er gaoz ul levr melkonius. Ar prederennoù emañ o paouez magañ, ar re-se ez eus outo dres prederennoù un den en e oad-gour. Veig Trebern ne ra forzh ebet ganto. Ne c'halv ket e vugaleaj da goun, e-barzh emañ betek e doull-kil ha lipat a ra anezhañ a galon digor ma'z eo ur spont, ennañ naon ur bed paket en un hanter kanton. Ijinañ ra e vuhez dre e oberoù hag e huñvreoù. E gelennadurezh a ra da bep mare dre ma ya. Gantañ, pep bleñchenn a ra tan, pep c'hoari a restaol dezhañ e spilhenn. An disterañ arvest a zo termaji evitañ, an disterañ krouadur ur penn-meur, den pe loen, an disterañ tra un digarez da vizieta ar bed krouet evit gouzout petra dalvez ha pebez dudi a c'heller kaout diwarnañ war an tomm : un teir-gwern skandinavek, ur c'harr-dre-dan ha ne vramm nemet ouzh e benn, un taol-koronk a gorf ken noazh ha palv an dorn, un afer gistin, ur burev polis, ur c'hañval a ouenn warantet, ur peroked divergont, ur waz-noz e stern ur postilhon, ul leue bihan dispac'her, ul laouenn dizano, ar mor, an heñchoù don, seizh gaou warn-ugent, ar voereb Katell, ar c'hoar Gaidou hag evel-just, a-raok un tolpad c'hoarierien vunut, da bep aotrou e zigoroù, ar c'hamalad Paotr-Teo da dalvezout da razhig-gwalc'her.

A-dreuz kement a reuz, Veig a glask e duioù, ennañ starti-jenn ur c'hreunenn vigouter penn-da-benn e go. Moneizañ ra e frankiz-da-c'hortoz evit prenañ ar pezh na zegas ket ar fals-skol, an hini 'z eus ganti c'hwez al liv. Ar skoliad-se a zo e vestr-skol. Dezhañ da ziskleriañ ha da glevout war un dro. En em silañ ra dre doulloù buhez ar re vras en ur ziwall da vont a-benn ganto. Pa c'hoarvez an dra, ar re vras o deus disoñjet sellout war un tu all, pezhioù vil ma'z int. Ha Veig a gas da vat ur bennoberenn da sec'hañ war o zreid ar skolidi vat o revrioù strizh : « derc'hel ar maki » e-pad ur miz, a-wel hag a-ouez d'an holl, ha gonit ur bloaz d'an nebeutañ d'e gelennadurezh. Piv a lavar gwelloc'h ?

En ur vont ganti, Youenn Trebern a ra dasorc'h resis ha pizh d'ar Vro-Vigoudenn war-dro 1910 dindan lagad furcher Veig Drezen. Adkavout a ra jestroù ha komzoù an dud, adsevel a ra kinkladurioù aet da get ul lodenn outo. Ha divoriñ Ker-Iz en he buhez pemdeziek a dalvez gwelloc'h, moarvat, eget he mojenn. Setu aze ur c'hoari-patrouilh en un amzer dremenet a zegas war evezh, da gentañ penn, an holl skianchoù. Ar wirionez-se, avat, ken pervez ha ma'z eo, a daol c'hwez un iskis a varzhoniezh : darvoudoù an Daol-Grenn e skeul ar Meudig. Bez e kaver a-wechoù un diabell meur en divizoù-se, m'ana-vezer enno kraban dichek an hini a skrivas « Karr-kañv an Aotrou Maer » ha « Youenn vras hag e Leue ».

Paket, soubet, bouetet eo ar pezh outo en ur spered fentus, dibar e stumm, hag a gav ez-eeun un tamm eus e vad er yezh. Un notenn eus ar skrid-pluenn a ra deoc'h da c'houzout n'eo ket degemeret kalz a c'herioù er geriadurioù. Ar geriadurioù ne zegemeront nemet gerioù en o dilhad sul, gwalc'het pep c'hwez diwarno ha prest da vont, tiegezh ha tiegezh, d'an oferenn lennek. N'eus lennegezh ebet e levr Veig. Dre gomz penn-da-benn. Pell d'ober fae war ar rannyezh, doujañ ra dezhi krenn evit hor plijadur. Penaos e fell deoc'h, a-hend-all, e truchfe gant ar yezh ur paotrig eizh vloaz ? Disac'hañ ra warnoc'h an doareoù-lavar ijinet, skeudennadurioù o tarzhañ enno e bleuñv. Ar « chon », gregach iskis micherourien Bont-'n-Abad, a ra e c'hoari ken bero hag an diaoul. Ul levr didroüs, a dra wir, nemet en em gav pep brezhoneger a ouenn e-tailh d'e glevout, dre welout prim, da zistrishañ e felc'h ar muiañ posubl.

Youenn Drezen, frei, gra deomp da glevout da c'hoarzhadenn vras, renet brav gant da vos-lagout ! Ha te, Veig, fri-kreien, sav da vragoù ha torch da fri war da vañch a-raok kontañ da droioù a vouezh sklaer.

Per-Jakez HELIAS.

Tchekov emañ ar gwir gantañ, pa lavar :

*« Me, ma zisplegan emañ daou laer o laerezh pennoù-kezeg,
n'eo ket ur ret din lavarout eo fall ar pezh a reont. Da vestr ar
polis eo d'hel lavarout.*

« Me a zispleg danevell al laeroñsi, traken. »

(F. Fellini, diwar-benn, « La Dolce Vita ».)

Da Riwall, Gurvan ha Maela an Drezen, o zad-kozh.

Y. D.

« Echu ar skol, Vev ? » eme C'haid, eus tal an oaled, hep
treiñ he fenn a-ziwar he fillig. Oc'h aozañ krampouezh e oa.

« Me 'm eus naon, eme Veig... Tad n'emañ ket aze ?

— Te oar mat 'n eus kaset e verenn gantañ, er pod
goloet.

— Ha mamm ?... Mamm 'mañ ket aze, ivez ?

— Gwelout a rez, mechañs. Mamm 'zo aet e kêr.

— Mat an traoù ! » eme Veig dre e soñj.

... Ne oa ket bet er skol.

AR FAGOD KEUNEUD DERV

Evit komz heñvel ouzh ar wirionez n' eo ket ar paotrig-se — hag e gamarad — eo a vije bet da damall abalamour d' ar skol. Ur skol-louarn, a fell din lavarout, hag a badas ur miz. Mes Jakez Konan, ar bouloñjer, hag an Dimezell Blev-Griz — burev-butun ha kelaouennoù — eus ar Ru-Vras.

An dud war an oad, evel Jakez Konan hag an Dimezell Blev-Griz, o vezañ m' int bet, evel an holl, krouadurien, d' ur mare bennak eus o buhez, a dlefe gouzout n' eus digarez mat ebet da zistreiñ ar vugale diwar hent ar skol ; rak ar vugale ne garont ket ar skol. An daou-mañ, dreist-holl, ne c'houlennent ket gwelloc'h eget chom hep mont di.

Dres a-walc'h, n' eo ket diouer a skoilhoù o doa d'o lakaat da jourdal 'hed o hent, dre ma oa ti o zud, er penn all da gêr, e bord al lenn, war ar Waremm-Mên. Skritell e potin glas korn o ru e oa merket warni « Voie Romaine ». Brezhonekaet a oa bet an anv dic'hiz-se gant an dud, ha distaget e veze « Waremm-Mên ». N' oa ket bet lazhet c'hoazh Jean Jaurès, ha n' oa ket keal en amzerioù-se, da zistroadañ ar « Voie Romaine », ha lakaat en he lec'h anv an Teodeg Meur, evel m' eo bet graet abaoe.

Ha neuze « Jean-Jaurès » pe « Voie Romaine », ken hir ha ken hir eo forzh penaos, hent ar skol — Sant-Gabriel — gant teir blasenn ha ruioù, n' oar den pet, da dreuzañ pe da hedañ.

Re verr, memes tra, zoken evit divesker paotredigoù eizh vloaz, n' oa na mall na c'hoant ganto bezañ degouezhet. An daouig-mañ ne vourrent ket er skol, evel ma 'm eus lavaret, ha ne lakaent ket nemeur a dizh da vont dre an hent ar berrañ da zastum deskadurezh digant ar Frered, du-hont, er penn all da gêr, war Hent ar Vered, e-tal ar parkeier.

Graet o doa an dro vras, evel kustum, ha chom a raent da ruzañ o botoù-koad war ar Marc'hallac'h. Gwir eo n' oa nemet eizh eur nemet kard, pe war-dro ; hag heolig gwen-golo a oa ken sart war ar pavez lintrus !

Edont o tic'henaouiñ dirak boutig bravigoù Per Berc'hirin, pa zegouezhas, dre an dorn, fistilh ha c'hoarzh ganto, ha prim o filtrot, daou grennardig eus o oad, Herri ha Leon, hag a oa evelto e klas M. Karadeg.

« Ne zeuez ket d' ar skol, Veig ? » a daole Leon da unan eus an daou stlejer, dre ma rae outañ ul luchadenn a vignoniez. Leon a oa poud un tammig, hag er c'hlas an hini a oa bet anvet Veig a zivanke dezhañ e fazioù, dre guzh.

« Eo vat ! » a responte hemañ, o tistagañ e fri diouzh gwerenn ar bravigoù : « amzer 'zo c'hoazh ! ».

En ur loc'hañ en em lakae Veig da c'hoarzhin :

« Ha ma yafemp dre an dorn, ni ivez, Paotr-Teo ! » emezañ d' e geneilg.

« Lâr 'ta, te ! » a responte egile, gant ur vouezh a glaske bezañ dirukel. « N' on ket mui ur papabig. »

E tiegezhioù ar vicherourien, e vezer dizonet abred diouzh ar sev. Hag an daou-mañ, chigarderien evel ma oant, a oa muioc'h boazet o jodoù ouzh ar flac'had eget ouzh ar bouchoù. Ret eo lavarout ivez e veze prenet dezho er gêr ur breur bihan pe ur c'hoar vihan ar bloaz, ha n' oa ket teneridigezh da zigalzañ gant ar re goshañ.

A oad e oa Herri ha Leon gant an daou all, hag en hevel-lep skol, mes pas eus ar memes kouch. Pinvidik e oa o c'herent.

Hag o bugale, n' eus ket da nac'h, a oa bugale fur d' o zad ha d' o mamm. Redek a raent d' ar skol, war-eeun, ha n' eo ket « korntroi », evel an daouig all, eus ar Waremm-Mên.

Talvoudegezh he deus ar skouer vat, hep ket a var, rak en em lakaat a rae an daou stlejer da c'haloupat war-lerc'h Herri ha Leon. Hag e c'hwitellent. Brav-bras e vijent bet d' an eur er skol panevet unan eus an diaeled-se a skoilhoù, a veze strewet evel a-ratozh dindan o zreid.

An taol-mañ, e voe ur pezh bern fagod derv, nevez-diskarget dirak ti Jakez Konan, bouloñjer ar Ru-Vras. Ur bern uhel, a save betek prenestr kambr al laez, hag a stanke ouzhpenn an hanter eus an hent. Dres a-walc'h ivez edo Jakez Konan war dreuzoù e zor, o kemer an aer, en ur dennañ moked diouzh e sigaretenn, diskramailh, diarc'hen en e spadrilhoù laosk, gwenn e otoù, e flanelenn, e vousta-choù hag e vlev gant ar bleud.

Leun oa ar ru, un dudi, gant c'hwez ar bara tomm.

« Hep ! ar c'hwitellerien », a c'halve ar bouloñjer, « n' ho peus ket c'hoant kaout pep a zaou wenneg ? Deuit da lojañ din va c'heuneud ! »

N' oa ket e gomz peurlavaret, evel ma vez kanet er sonioù, ma oa Veig o hejañ ar bern fagod — « Deus ta, Paotr-Teo ! » — ha, krog a-dro-vriad en e samm kentañ, ma fuste, dre an aître, a oa don ha teñval, davet porzh an ti-forn. Edo Paotr-Teo war e seulioù gant e fagodenn ivez.

Evit bezañ skañvoc'h, e taole Veig, ha Paotr-Teo a rae eveltañ, e votoù-koad hag e sac'h-skol war bavez ar riblenn-straed, hag e sache ur fagodenn all diouzh ar bern.

« M' o dije goulennet o mammoù diganto mont da ger-c'hat ur sailhad dour, me bari ne vije ket bet kement a bres war o zoull », a lavare ar vouloñjerez d' he gwaz.

« An arc'hant ! Maivon, an arc'hant !... » a responte Jakez en ur c'hoarzhin.

Ur vigoudenn fonnus e oa Maivon, flour ha livrin, ha blev melen dezhi. Pezh ne vire ket outi da gontañ mat-tre. Pep a zaou wenneg ! An dra-se zo koll bugale.

An arc'hant, ya !... Ar re vras n' ouzont ket petra a c'hell ur paotr bihan prenañ gant daou wenneg : limaigoù, regalis, fisel, kanetennoù, paper dekalkomani, un doupig, ha meur a defñzor all, sur...

Ar baotred, eta, a zouge fagod, hag ar mevel-baraer, er porzh a vernie.

« Pet eur eo bremañ ? » a c'houlenne Veig ur wech bennak.

« Re ziwezhat evit ar skol, ha re abred evit merenn », en doa respontet ar mevel-baraer. Hag e skrogne, an azen-se.

Ur wech bennak all, hag hep ehanañ da biltrotat, e lavare Paotr-Teo da Veig :

« T' eus ket gwelet ar bouloñjer ? 'Neus ket ur vlevenn war e zivrec'h na war e grubuilh...

— An toaz an hini 'ra an dra-se, te !

— ...Ha 'n eus bronnoù e-giz ur « voizenn ». Hi ! hi !... »

Ne voe ket pell a-barzh ma voe diloret ar pavez betek diouzh ar vleñchenn diwezhañ.

Gwisket o botoù ganto en-dro, sammet o sac'h-skol war o skoaz, ur rufl d' o fri, ha pep a daol-torch dezhañ gant o milgin, ruz o c'hlipenn diwar an difrae o doa graet, ha bliv o lagad gant ar blijadur, ez ae an daou voust da doull an nor, Veig dirak, Paotr-Teo a-dreñv. Toc'hal a rejont :

« A ! echu eo ? » eme Jakez Konan. « Gwazed oc'h. Foga-siñ a rin ac'hanoc'h da verc'hed an Enez... Setu ho kopr !... » Hag e tennas un dornadig pezhioù diouzh e chakod. « Gast ! emezañ. 'M eus ket moneiz rouz. Dalit ur pezh pemp kwen-neg ! C'hwi a genlodo...

« Ha troc'hit d'ar skol, bremañ ! »

Mall e oa, sur, redek d' ar skol. Tremen mall zoken. Ne vez ket lojet evel-se, un dorgennad keuneud derv, amzer ur c'hwitelladenn... Mes brasoc'h mall oa c'hoazh daouhan-teriñ pemp kwen-neg !...

N' oa dalc'h ebet er gudenn evit ur paotrig dilu, evel ma oa Veig. Edo ar pezhig nikel en e zorn, ha ne voe ket roet amzer dezhañ zoken d' ober anaoudegezh gant e cha-kod. Dor ouzh dor e oa ar bouloñjer gant an dimezell Blev-Griz, — burev-butun ha kelaouennoù, — ur plac'h yaouank kozh hir ha sec'h, e giz kêr, faeüs he beg. War hent ar skol, atav, gant temptadurioù trellus ar c'helaouennoù skeuden-net. Ha Veig tre e baradoz al lennegezh hep na salud na deiz-mat :

« *L'Intrépide*, 'mezell, ha *L'Epatant* ! »

Hag e taole Veig e « arc'hant » war daolig-marbr ar valañs-butun. Rentet e voe dezhañ ur gwennek war e brenadenn. N' oa ket deut, e mod ebet, en e soñj goulenn e ali digant Paotr-Teo. Soñjet en dije hemañ, da gentañ, en e gof. Kontant-bras e oa memes tra. Gouzout a ouie lenn, eñ ivez. Hag aze 'oa plijadur da gaout : Krokignol, Ribouldeñgn ha Filochar, an tri baotr-termaji farsus, eus un tu ; ha tridkalon, eus an tu all, gant tirvi moueek ar Far-West, hag emgannoù taer ar C'hof-Boied ha Buffalo-Bill ouzh ar c'houezidi ruz, lostoù kilhog war o c'hlopenn. Ha kezeg d'ar pimperlamm, ken a findaone, ha strakadeg an tennoù fuzuilh.

Ur pochat boñboñ kreñv e boutig poultrennek an dimezell Kintin gozh, e ru Kereon — ken nemet evit lavarout e oa bet foeltret ganto betek o « graf » diwezhañ : ur gwennek ne vez ket arboellet — hag e pennadas Veig hent ar skol adarre, Paotr-Teo atav d' e heul. Ur bugel tev divolontez e oa Paotr-Teo.

Goude treuzet ganto plasenn an Amann, hon daou Yan-nig Diwar-Lerc'h a chome a-sav e korn Hent ar Vered. Sant-Gabriel a oa aze, sko, e-tal ar Vanell-Zu ha gwez bras Koad Karmez. Ne ouient ket pet eur 'oa. Mes gouzout a raent mat-tre e oant diwezhat, ur vezh, o vont d' ar skol.

« Chomomp da c'hoari ! » eme Veig, krenn. « Pa sono kloc'h ar skol, ni 'yal d' ar gêr da zebriñ merenn. Ne ouio den netra. »

Kentelioù M. Karadeg, o mestr-skol, a c'hortozo.

Skoachet e voe ar seier-levrioù, a-dreñv kleuz ar vanell, e parkad kaol-saout ar C'hoseg Ruz, hag e c'hortozjont kloc'h unnek eur, azezet bravik ouzh traoñ ur wezenn fav, e-kreiz ar c'hoad, en ur zebriñ boñboñ kreñv hag o lenn *L'Intrépide* ha *L'Epatant*.

« Echu ar skol, Veve ? », he doa lavaret Gaid. Ne voe dioutet netra, pa voe distro Veig d' e di, war-dro kreisteiz. Diwezhat, evel boaz.

Bravoc'h ! Lammet he doa, ouzh e fronell, ur c'hwez tomm, ilbouedus, — kaletéz ed-du e oa da verenn, evel da bep gwener — ur c'hwez da zigeriñ kalon ur c'hristen marv. Ha ne oa ket marv Veig, ma oa o vervel gant an naon, da heul ar seurt abadenn lojañ keuneud.

Ne zeufe ket e dad diouzh e labour a-raok an noz, rak kaset en doa gantañ e verenn en ur pod goloet. E vamm ne oa ket distro eus kêr. Ha Gaid, e c'hoar gozh, e oa re a gefridi war he zammig spered, oc'h aozañ kaletéz d'an tiad, evit soursial gant ar pezh en doa graet pe n'en doa ket graet he breur e-doug e vintinvezh. An « echu ar skol ? » he doa taolet, pa oa dilammet hemañ en ti, ne yae da neblec'h. Un doare saludiñ e oa, mar karer, ha n'eo ket ur goulenn. Mat an traoù eta, betek-gouzout.

Ar paotr, avat, ne oa ket pell diouzh krediñ e oa merket war e dal : « N'on ket bet er skol ! » Diwar goustiañs fall e oa, ha chom a reas war evezh, hag, evit lavarout ar wirio-nez, war e du tagnous, prest da dalmañ, ma veze meneget ar skol adarre.

Krapañ a rae war ar skabell hir, da azezañ e-kichen Channig, unan eus e c'hoarezed — Vovon a veze graet eus eben vihan — hag e harpe e chink war an doal fetis, mall gantañ kargañ e vouzelenn voan. N'en doa ket naetaet e zaouarn zoken. Ha kramenn e oa warno m' hel lavar.

Un drugar e oa gwelout Gaid vihan o tifretañ dirak he fillig.

Unnek vloaz, d' an hirañ. He bigoudenn a-dreuz, un dis-terañ, war he fenn, huzil ouzh he fri togn, heñvel ouzh hini Veig, he lostennig ruz o skeiñ ouzh he c'hofigoù-kar rouz, merañ a rae an toaz ed-du, er bodez, gant he loa-bod, c'hwezhañ a rae war an tan delioù pin, en-dro d' an trebez, en oaled izel, hag e lede an toaz war ar billig gant ar rozell. Pa oa poazh a-walc'h un tu e tistage ar galetézenn gant he spanell, hag e cheñche tu dezhi ken brav ha ken klok ha ma vije bet ur grampouezherez a vicher.

O gwalc'h o doa bet an div vihan, ha sevel a rejont, gant o jolori laboused, da vont da c'hoari er-maez.

« Del ! Debr ! » eme C'haid da Veig, goude bezañ lakaet dezhañ ur begad amann war e galetézenn. « Diwall da zeviñ da flac'h ! » Pezh a reas hemañ, eveljust, gant ar prim ma oa aet an tamm kentañ en e c'henou. Ruilhal a rae an tamm ouzh e staoñ gant e deod. Bez' en doa e volennad laezh-mesk dirazañ, war an daol.

Ar verc'h henañ e oa Gaid, e tiegezh an Dreberned. Tennet e oa bet diouzh ar skol a-raok klas ar sertifikad, — an testeni a studi, — evit chom er gêr da reiñ an dorn d' he mamm da zerc'hel an ti a-ratre. N' eo ket peogwir e oa bras lojeiz an Dreberned : peder moger gwenn-razet, un oaled maen, un nor war an trepas, ur prenestr war ar ru, ul leur-di douar. Mes labour a oa eno evit div, rak leun e oa evel ar vi : daou wele bras, gant ridojeier livet, ispilhet ouzh ar solier gant ur c'helc'h koad gwerniset, ur gwele strishoc'h, e-tal ar prenestr, ur c'havell e-tal gwele ar vamm, gant ur babig e-barzh, ur pezh armel, ur ganastell gant he listrier, un daol gant div skabell hir, ur gador bennak. En ur c'hogn, e-kichen an oaled, an toull-keuneud.

Ouzhpenn soursial ouzh ar re vihan, ne weled penn diwezhañ ebet d' an aozañ boued da gemend-all a c'he-naouioù, skaotañ, skubañ, dresañ ar gweleoù, lakaat koar an arrebeuri da lintrañ, ha gwriat memes, a-wechoù.

N' it ket da grediñ, dreist-holl, en dije peget Veig en torch pe er valaenn. Pa ne veze ket gant e fri en ul levr, pe o chigardiñ e c'hoar vras, e tec'he da c'hoari er-maez. Gwelloc'h e oa evel-se. Marteze, avat, p' eo bet meneget ar valaenn, eo koulz lavarout diouzhtu n' oa ket Veig re vignon d' ar benveg-se, kennebeut ha d' ar c'hrog-yod, dre ma oant

aze, dindan an dorn, re brest da flourat dezhañ e zargreiz, da heul sotonî pe wall-deodad. Hogen boazet e oa.

Ul lojeiz micherourien, — mañsoner e oa an Herve Trebern, tad Veig, — heñvel ouzh kant all e kêr Bont-'n-Abad. Evit e fichañ, e oa bet lakaet a-ispilh ouzh treustoù ar solier gant un neudenn, bouloù gwer livet e glas, gwer, ruz, melen, eñvorioù eus ar pardonioù. Ouzh ar voger, etre an armel hag ar prenestr, patrom un Aotrou en e stern goad : Sadi Carnot, a oa bet, d' ur mare bennak, Prezidant ar Republik, e Pariz. Veig a grede dezhañ e oa poltred an Ao. Milcent, rener skol ar Frered, abalamour d' e varv.

E-tal gwele ar vamm, e oa c'hoazh, e-kichen an tach da ispilhañ eurier an tad, ur piñsinig e pri Kemper da lakaat dour benniget, ha, dindanañ, ur c'havell. Goullo e oa ar piñsin dour benniget a-viskoazh. Er c'havell, avat, e veze atav ur babig.

Reut e gofig gant laezh sukret ha begadoù yod pasket dezhañ gant e c'hoar vras, bidoc'hig an Dreberned, Gwenole — eus Penn-Marc'h e oa e baeron, — a oa, gant e chukenn ouzh e jodig kuilh, war e bennwele, o poazhañ en e c'hwezenn, kement a c'hloan a oa warnañ. Ur babig fur e oa Gwenole bihan. Ne zihune nemet evit kaout bronn.

« Petra 't eus desket er skol ? eme C'haidig, en ur lakaat ur galetezenn all dirak he breur. — Rimitik ? »

Rimitik !... Ar mestr, er skol, a zistage fraez « arithmétique », ur ger ken diaes e skrivañ ha ma oa hegas ar skiant klozet ennañ da sankañ en e voulienn. N' oa ket bet Veig er skol, ha ne gare ket ar « rimitik ». N' oa respont vat ebet da ober, ha ne reas respont ebet. Ha neuze, re vras tamm kaletaz a oa gantañ adarre en e c'henou. Karget en doa e forn evel ur paour-kaezh o vougañ gant an naon.

Forzh penaos, petra he doa honnezh da guriuziñ diwar-benn e skol ?...

Hama ! Tonket e oa d'ar skol dont war an dachenn ; ha setu penaos. Edo ar plac'hig o ledañ toaz war he fillig, ha Veig o tic'houezañ diwar e walc'h, pa reas bekez. Dre zievezh. Komprenit e oa difluket diouzh strad e gof d' e gorzailhenn ur breugeud reut, sonn, nerzhus, a strakas ez-vagol,

evel ma plij d' ar pacha Mohamed o distagañ, p' en deve debret re gouskous. Ma rae Gaid ul lamm.

« O, an diloñgnez ! 'T eus ket mez ? »

— Ar mez 'zo mat d' ar moc'h. Roit din ur galetezenn all ! »

Lavaret am eus e oa Veig kizidik e groc'hen abalamour d' e skol-louarn. N' oa abeg all ebet d' e respont divergont. Chichantoc'h paotr e oa dre natur. Gaid, avat, a voe kavet togn an dra ganti. Treiñ a reas ouzh tu he breur, en ur sec'hañ, gant hec'h arzorn, he daoulagad aet ruz gant ar moked. Suc'hellat a reas. Hag ar mourouzeg ha sachañ ivez ar c'hi d' e loñch.

« Trawalc'h 't eus debret, eme C'haid.

— Naon 'm eus c'hoazh, eme Veig. Me 'm o ur galetezenn all.

— 'To ket 'vat ! Brammer dre da c'henou, dismegañs !

— Larit 'ta, koef an oraj ! »

Daou gilhogig, tal-ouzh-tal, savet trumm war o elloù, prest da bokat.

Ar c'hoshañ e oa Gaid, ha fellout a rae dezhi lezennañ. Veig, evit se, a oa ur paotr, hag, evit un tenn, n' en dije ket filet gant e c'hoar.

« Trawalc'h 't eus debret, 'm eus laret dit. Ha, da gentañ penn, poent eo dit mont d'ar skol... Pe e larin da vamm...

— E larot petra da vamm ? N' on ket bet er... — Darbet voe dezhañ leuskel : — ...n'on ket bet er skol ? »

Re brim e oa Veig, — e-giz ur marc'h sot ma oa, — ha setu eñ ha fuc'hañ, evel ma vije bet diskleriet ar wirionez d'e vamm.

« Larout dezhi, ya ! n' on ket bet er skol... Topinerezh !... Gaouierez !... »

Dilugerniñ a reas plac'h ar c'haletaz ouzh he breur gant ur sell a zegasas pistigoù e kein hemañ. Ouzh e skeud eo e kemere aon, rak eben ne ouie netra. Mes kravat a rae

dezhañ, evel m' he dije gouezet, dres el lec'h m' en doa debron :

« Hag e rin, ya !... Feneant er skol !

— Rastell-doull ! »

Distaget oa chas ar Sabad, ha skourjez ebet d' o didaerañ.

« N' am eus ket aon ouzh ho skilfoù hir.

— Na me 'ta ouzh da zent kolvazh.

— Teod bilim ! Gwespenn !

— Koll-boued ! »

Fiñval a reas Gwenole bihan en e gavell ; leuskel a reas ul leñvig. Divorennet oa bet gant talabao an daou all, ha n' eo ket souezh. Redek a reas Gaidig davetañ. Lakaat a reas dezhañ e chukenn en e vegig. Hag e luskelle ar babig goustadik, en ur vousekanañ dezhañ komzoù flour :

« Kousk, va aelig ! Aze eo tomm, va ranig ! Kousk, va logodenn ! Hennezh eo Noleig Gaidou. »

E-keit-se, e oa an tan o vervel dindan ar billig ; ne bad ket an tan delioù pin. Ha Gaidig, difrae warni, ha brochañ ar regez hag aozañ ur gurunennad delioù pin en-dro d' an trebez, ha c'hwezhañ. Ha, raktal, e traske adarre, en un tantad sart, an nadozioù hir, rouz ha kras, tra ma pourchue ar plac'hig en dro d' he c'haletéz, goude bezañ tufet war ar billig.

Veig, avat, — petra an diaoul a oa peg en e doull ? Sur, e oa diwar wall-goustiañs, abalamour d' ar skol ! — Veig 'ta n' en doa ket disternet. E galetezenn e ranke kaout. Teñsal a reas etre e zent : « Roit din ur galetezenn !... » hag e chuchumuchu : « Baja ! Beuleugenn ! Chostrom ! Dremedallenn ! »

Gaid a oa tanav he skouarn.

« Chañbo ! e fuc'has. Goulenn boued diganin en ur reiñ din anvioù ?... Kerzh da glask kaletéz e traoñ an aod !

— Keuz ho po ! Tamm teil ma 'z oc'h !

— Tamm teil, me ?... O va Jezuz !... » Sevel a rae ar plac'h he spanell, diwar he feuk... « Tamm teil, me ? Ha te, koll-boued ! Tres kroug ! »

Pignal a rae he mouezh, skiltr, ha put e-giz irin glas. Piv en dije kredet e oa kement a anal en ur c'horf ken munut ? Yudal a rae. Pa 'n em lakaas Veig da ziskisal leizh e zent. Merzet en doa, trumm, e wic'he e c'hoar dres e-giz moc'h bihan mamm-gozh Menez-Piked, pa veze frapet dezho war o lost.

« Sik d' ar foar ! Sik d' ar foar ! » a huche ar paotr fall, en ur lammikat, a daolioù revr, war e skabell. An holl vugale a oar n' eus ket evel c'hoarzhin goap war ur bugel da lakaat anezhañ, — Gaid koulz hag ar re all, — da sodiñ gant an imor. Hag e sode Gaid :

« Tamm teil, me ? Ha te, chouan eus ar Vañde ! Staoter en e wele ! Penn tach, penn laou, fri karn, loen goañv !

— Inosañtez, katell vrokenn, genaouegez !

— Tourmant ruz, lavagnon, tres-kroug !

— Genaouegez !

— Askell-groc'hen, kac'h-otoù, daoulagad laer !

— Krabiserez ! Chistrouenn !

— Penn ballog, geunseg !

— Keben Lokorn ! Toull kafe !

— Toull kafe, me ? Ha te, laer sukr, laer bara !... Tad ar vosenn, penn-bombard, penn-peul, marc'h-loar, boc'h bidi Botigao, genou gwelien, torc'h togn, hoc'h-gouez Plovan, ampoezon, droch ar pardon, leue geot, mab Kain, muzelloù kig-sall, chug biz, jañ-blev diforlinket !...

— Genaouegez ! »

N' hoc'h eus ket klevet morse podoù ha boestoù houarn-gwenn goullo o vididingañ, pa vezont diskarget, diouzh karr an uzin, e delestaj ur vengleuz kozh ?

Dres an hevelep jolori sklintin a save gant hon daou jibidoull. Ha tost ken bouzarus. Ha kement a ravolt, abalamour d' ur galetezenn !...

Gwir 'ta ne vez ket ezhomm muioc'h, pa soñjer, da lakaat an dud vras da c'hwezhañ tan ar brezel etre ar broioù.

Ouzhpenn skarnilet e oa an hini — ar galetezenn — a oa war ar billig. Sevel a rae c'hwez al losket en ti leun a voged. Ne raent van ebet.

« Genaouegez ! » a adlavare Veig, e glipenn o vont ruz-oc'h-ruz diwar e vroc'h. Rak war goll e oa. Aet e oa da hesk e sac'had gerioù drouk. E-keit-se, Gaid, gant he spanell da arm zifenn, e vije bet lavaret ne rae nemet komañs. Honnezh he doa teod, 'vat, paotr paour ! Hag e flape, hag e flape, hag e tibune meuleudioù an diaoul, — gouzoug kerc'heiz, don kichot, kuign !... — ur baduell.

Gwir eo e oa tri bloaz koshoc'h eget he breur, ha, d' an oadoù-se, e tesker buan — ar merc'hed, dreist-holl hag evel-just, rak ur bern teod o deus — kalz gerioù, mesk-ha-mesk enno ar mat hag an divat. Hiziv, va Doue, omp kouezhet war an divat. Ha c'hoazh, eo bet c'hwennet pizh ha gant aked, flemmadoù, n' emañ ket o flas war ar paper moulet. Gwelet e vo bet, koulskoude, ne oa gour Veig, e-keñver e c'hoar, war dachenn ar Gomz, a zo anezhi, gant hini an ivinoù, domani ar merc'hed.

« Genaouegez !... »

Ne gave ken. Petra 'chome dezhañ da ober ? Serrin e veg ha redek d' ar skol gant e vezhekadenn ? Mont diwar-dro he c'hoar, hervez ali brudet Napoleon : « An trec'h war ar vaouez ? — An tec'h. » Un ali fur, ma 'z eus ! Veig, avat, n' anaveze ket ali Napoleon, hag a rae foultre-kaer gant e alioù. Ha n' eo ket furnez eo a vage en e gorf. Malis ruz, ne lavaran ket. Pa ne dalve ket ar Gomz, ez implijfe an Nerzh, a zo anezhañ hêrezh ar baotred. An taolioù.

« Bremaik ho po diganin !... »

Heñvel e voe, neuze, Veig ouzh ar valafenn, a ginnige, ma ranker krediñ Kipling gozh, distrujañ Babylon, ar gêr ramz, ken nemet o lopañ war an douar, ur wech, gant seul he zroad.

Gaid an hini a voe he zro da c'hoarzhin leizh he genou bras. Ha diwar fae, mar plij ! Gant he c'hoarzh hegas. Hag en ur dennañ dezhañ he zeod, ar vopenn anezhi !

« Deus neuze !... Deus 'ta !... Kis ! kis !... Sell ouzh ar c'hi blech ! »

Edo Veig, prennet e vuzelloù, gant un dorn ouzh harp an daol, hag an dorn all, war ar skabell hir, o vont da lakaat e dreid war al leur-di, pa zigoras an nor da reiñ plas da

gompezour, a-raok ma voe krog, un emgann a c'houlenne ober dismantr bras er blev, er jodoù, er frioù, hag en dilhad ivez.

Edo erru mamm er gêr, evel kaset, dres war ar pik, gant Providañs Doue. — Doue ra mat kement a ra ! — Ne oa ket hec'h-unan. He c'hoar yaouankañ, moereb Katell he dorn dir a oa ganti.

« Na moked 'z eus en ti-mañ ! » a voe kentañ ger a lavaras moereb Katell.

Ken pinous e oa en em gavet an daou vestrig-a-bevar, ma n' o doa ket lammet, evel boaz, ouzh kerc'hen o moereb, na Veig goulennet diganti, evel boaz :

« Petra p' eus degaset din a-berzh mamm-gozh ? »

Aet e oa an div vaouez war-eeun da gavell Gwenole bihan.

« An aelig ! Na mignon eo ! » a denerae moereb Katell.

An « aelig », serret klocz gantañ e zaouarnigoù roz munut, ha roz e jodoù ront en e voned, a oa kousket ken c'hwek en e gavell — « hunet sioul ha dousik », evel ma kan an eostig er son vrav, « Kousk, Breizh-Izel ! » — ma ne gredas ket moereb Katell bouchañ d' e dal. Chom a reas, ur reuziadig, stouet a-us dezhañ, o spial e anal diheverz. Mamm a oa aet d'an armel da cheñch tavañjer, mall ganti kenderc'hel gant labour an ti.

Heñvel-vi e oa an div c'hoar, Bigoudenned o div, bras — evit Veig — kiget-start, ha livrin o divjod. Nemet moereb Katell a oa atav plac'h yaouank, — tri bloaz warn-ugent bennak, — hag un tamm mat fichetoc'h, evel just.

Deut e oa e kêr da zegas vioù hag amann fresk, ha goullo e oa he faner du, d' an ampoent. Kavet ganti, dre zegouezh, mamm Veig, da vat ivez gant he c'hefridioù, e oa deut ganti « betek an ti », evel ma lavarer, « da welout ar vugale ». Chichant e oant o div, ha marvailh fentus ganto, — moarvat o doa piket e chupenn d' unan bennak, — homañ diwar-benn Menez-Piked, eben war sujed darvoudoùigoù kêr, an amezeien, hag ar vugale, dreist-holl.

Taolet en doa Veig kont ne zeue morse ar re a-ziwar ar maez e kêr, gant o dilhad pemdez. Atav e vezent gwisket e-giz da sul. Moereb Katell a oa war he fenn ur c'hoef tul brodet, ha ken sonn ha ma oa gwenn. Nij-dinijal a rae diouzh fiñvoù he fenn, war he skoaz, ur gokardenn seiz a liv, spilhennet ouzh he c'hoef-blev. Brodet e oa he jiletenn neud ruz, hervez ar c'hiz bigoudenn ; he zavañjer a oa splann, ha voulouz ledan he doa ouzh traoñ he c'hotilhon mezher du. A-barzh pell e vije dimezet.

Dirak he sokoù eo e vame Veig. Du-pod e oant, ha lufr evel pennoù ar vorianed, a oa deut, e Gwengolo, war ar Vadalen, gant ar Sirk Pinder hag e seizh olifant.

Tra ma stage e vamm da rannañ kaoz gant he merc'h : « Ha neuze, Gaidou, va merc'h kozh, e oamp da vat o fardañ merenn d' ho mamm ? », edo moereb Katell o c'houlennata he niz diwar-benn ar skol. Eveljust !

« Ha neuze, va niz Herve, n' out ket bet dalc'het e pini-jenn, ar mintin-mañ ? »

Evit farsal, eveljust. Ne gavas ar paotrig blaz ebet d' ar seurt doare fars'al. Anat perak. Sachet e oant, holl, gant an tamm gagn a skol-se, evel an houad gant ar poull-dour. Gant ma n' he devo ket kanet pig pe vran e kêr !... Nann ! N' oa ket a seblant.

Veig : « Hi ! hi ! » hag e c'hoarzhe e zaoulagad bliv en e fas brizhoù.

Mamm : « O, met, Gaidou, homañ n' eo ket ur grazenn eo, mes un tamm glaou. »

Tapout a rae prim ur gontell gozh da rasklañ ar billig.

Mamm : « Ne vez ket desket en un taol ar vicher a gram-pouezherez. »

Gaid : « N' eo ket dre benn din, mamm. Veig an hini eo. Ne fote ket dezhañ mont d' ar skol. »

Veig, dezhañ e-unan : « O, an doupig fall ! Ar judaz anezhi ! Ar gaouierez, an dopinerez treizh ha disleal anezhi ! »

E-lec'h respont d' e voereb, atav, e youc'he :

« N' eo ket gwir, mamm, Gaidou an hini ne fote ket dezhi reiñ din da zebriñ. »

Ur vaouez a youl-vat kenañ e oa o mamm. C'hoarzhin a reas adarre.

« Ha setu perak e oa kement, a reuz ganeoc'h ho taou ? Klevout a raen ho taboulin adalek ar Vadalen. Ma krede din e oa deut holl vrini ar Menez Frubi da gludañ e-barzh va zi. »

Moereb Katell : « Ur marzh zoken n' eo ket bet dihunet ganto hor moutig, aze, siwazh d' e galonig vihan mignon ! Ma vije bet an daou-se din !... »

Veig, feuls atav : « Marteze eo bouzar Noleig. »

Ken droch e oa ar bomm, ma sailhas moereb Katell da c'hoarzhin, ken e ouie.

« A, feiz ! Paour-kaezh Kaourantina. Ne glevit ket ho ten yaouank ? Marteze eo bouzar Noleig !... Te, atav, n' out ket ganet mut. Te eo aet tout da gorf da ober teod. »

Lakaat a rae e vamm dirazañ, war an daol, ur galetezenn, amanennet druz, ar wech-mañ. N' oa ket pizh e vamm e-giz ar skrañgnadenn-se a C'haidig.

Mamm : « Karg da vouzelloù, va faotrig. Ma teui bras ha kreñv. »

Moereb Katell : « Ha neuze, paotr Herve, bourrañ a rez er skol ? Petra 'n eus desket dit da vestr-skol, ar mintin-mañ ? »

Veig a oa leun e c'henou, ha berv oa ar galetezenn.

« Rimitik !... emezañ, en ur c'hagouilhat ; difrom-kaer, avat. Ur gaou plaset mat ne ra droug da zen, n' eo ket gwir ?

Pa daole moereb Katell ur garmig diwar hec'h estlamm.

« O ! Itron Varia Garmez benniget ! Pelec'h eo bet hemañ gant e zaouarn ?... Kaourantina baour, deuit da welout daouarn ho mab kozh ! Da vont da eured piv eo bet hemañ o prenañ manegoù ?... Gaid, va flac'hig vihan, degasit din ur skudellad dour, ur mell hini, ar soavon hag ar broust

neuc'h !... Er skol out bet ar mintin-mañ gant daouarn ken lor ? Pe o reiñ an dorn da Ber Pilhaouer, en e c'hignol, da skarzhañ e neud orjal dreinek mernglet ? Diskroc'hennet-fin eo e zaouarn gantañ !... »

Me 'lavar deoc'h ne voe ket Veig en e vleud, e-pad an asazenn « digrasa kouez ». Soavonañ ha frotañ a rae dezhañ e voereb e zaouarnigoù, evel ma vijent bet un otoù kotoñs : — Aiou ! — Ha, kement hag ober, ha ken taer all, e voe gwalc'het dezhañ e veg hag e ziskouarn, ha graet, ma c'heller lavarout, un taol krib d' e benn touz. Hag an « tamm teil » a C'haid o c'hoarzhin atav, o tennañ dezhañ he zeod bilimus, hag oc'h ober chistroù dezhañ, a-dreñv kein o mamm, oc'h ober van da zibluskañ buan-buan biz-yod he dorn dehou gant biz-yod he dorn kleiz, rak kleizerez e oa, evel Veig.

Moereb Katell : « La ! Bremañ out mab da dad... Ur bouilh da vont da c'haloupat en-dro. Mes gwelloc'h, un tamm mat, e vefe dit chom amañ da sikour da vamm ha da c'hoar. »

Mamm : « Che, ivez ! Katrinig baour. Ar c'hrouadur-se n' eo nemet eizh vloaz. Er-maez eo emañ e blas o c'hoari hag o tispign e vev-vuhezegezh, gant ar baotred eus e oad, a-raok mont d' ar skol, ha n' eo ket chom da gatellat en dro d' an toull ludu. Diaes a-walc'h a gavan dija, pa 'm eus ranket diwall Gaid ganin.

« Gant ma tesko mat er skol ! — hag e ra !... — N' eo ket penn a ra diouer d' am faotr bihan. »

Gant plijadur en dije bet Veig bouchet d' e vamm, panevet oa re vras hiviziken. N' emañ ket ar c'hiz du-mañ, evel m' eo en Naoned, da skouer, d' en em lipat, p' or deut en oad. N' or mui ur papabig da eizh vloaz ; n'eo ket gwir ?

Nag e karas e vamm, avat, d' ar poent-se ! Gwelloc'h e veze gantañ, a-hend-all, bezañ pradet ganti — ne dane ket e feskinier, evit dezhañ blejal forzh e vuhez — eget klevout skandal ingal e voereb. Ya !... met m' he dije gouezet homañ — hag e vamm 'ta — n' oa ket bet er skol !... Oi ! va c'horf !...

Mamm : « Torch da zaouarn, naet, ouzh korn va zavañjer. Sec'h da fri, ha red d' ar skol bremañ, va mab bihan ! Ha diwall da vezañ diwezhat ! »

Biskoazh n' en doa bet Veig kement a vall da zigêriñ. Hag eñ er-maez. E toull dor an trepas, e yae a-benn e Paotr-Teo, a oa ouzh e c'hortoz. Paotr-Teo a berlezenne ar c'hwezenn war e dal. Dianalet e oa.

Paotr-Teo : « Veve ! Me zo o tont eus ar Vanell-Zu. Hor sier-skol a zo bet laeret. »

Eveljust, e oa ar sier-skol en o flas, eeun-hag-eeun el lec'h ma oant bet skoachet gant hon daou gampinod, e park ar C'hoseg Ruz. Gleb un tammig gant ar glizhennoù a zivere diwar-c'horre delioù ledan ar c'haol-saout.

En ur c'hortoz, avat, Veig a oa bet savet divaskell dezhañ. Un toull en avel. N' oa na bern fagod na Sirk Pinder a vije bet gouest d' e harpañ war hent ar skol. An hent ar berrañ, dre laezh ar « Voie Romaine », hed ar C'hoc'hu Nevez, dre gorn plasenn ar Vadalen, ha penn-da-benn ruioù Marikig-Vihan, treuz-didreuz, Kereon, Karmez, ha plasenn an Amann, betek penn-hent ar Vanell-Zu, du-hont, e-tal gwez kozh kant vloaz koad Karmez.

Klevout a rae an avel en e ziskouarn, hag ivez galvoù Paotr-Teo, o c'haloupat ponner war e lerc'h, daoust m' en doa tapet e votoù-koad en e zaouarn :

« Veig ! Gortoz ac'hanon ! »

Laeret ar sier hag ar pezh a oa e-barzh !... Al levrioù-skol !...

Al levrioù-skol ?... Ya ! al levrioù-skol, mes ivez ur bern traoù all : e ganetennoù, e doupig beuz, gant he fiseleñ « aren », e greionoù a liv, holl deñzorioù bet troket, ampres-tet pe c'hounezet war ar baotred ; ul levr avañturioù, kelaouennoù skeudennet ivez, hep kontañ an *Intrépide* hag an *Epatant*, nevez- prenet, ha n' oa ket bet amzer d' o hanter-lenn, ar mintin-mañ — lenn a raent, evit c'hoazh, gant o biz — ; ha, dreist-holl, dreist-holl, ur voestig plat du, merket war he c'holo : *Imprimerie*, a oa bet fiziet ennañ, « evit keit a garfe », da lavarout eo roet dezhañ gant Leon Gwi-chaoua, evit ar skoazell degaset dezhañ er c'hlas, ar Groaz-

Doue — an A B K D — en he fezh, ur voestad lizherennoù, e kaoutchou kalet, dispar da skrivañ e anv, hini e ru, hag anvioù forzh piv, gant lizherennoù heñvel ouzh re al levrioù...

Ober a rae un harp, e korn hent ar Vered, da c'hortoz e gamarad. Pelloc'h, e tiskorne Paotr-Teo diouzh ru Garmez, hag e treuze a-dizh hag a-dren plasenn an Amann. Ne vijen ket bet souezhet o klevout en doa kollet un hanter lur eus e lard, kement e c'hweze.

Veig ivez a oa aet berr e anal. Dic'hwezhañ a rae e-giz souffletez ur govell vihan. Ur pistig en doa en e gostez. Lammat a rae e galon en e greiz. Ouzhpenn ma oa pell-bras diouzh bezañ dienkreiz. Diazezet e oa bet, evel ma lavarar, e verenn kaletrez gant ar c'heloù.

An tiez-skol, — re ar Vistri, merc'hed ha paotred, ha re ar Frered —, a oa sko aze, paotredigoù, krennarded, merc'hed o hastout daveto, naren, avat, hep c'hoari, hopal hag en em hegal.

« Ne zeuez ket d' ar skol, Veig Trebern ? »

Penaos mont d' ar skol hep e sac'h ? Koulz goulenn digantañ mont d' an oferenn hep e votoù pe war gorf e roched.

Veig : « Neuze, n' emañ ket mui ar sier en o flas ? »

Paotr-Teo : « N' oant ket bremaik, atav.

— Tapet omp brav, m' eo kollet ar sier-se.

— Ya !

— Bez' out sur ?

— Sur ha serten.

— Aze omp tapet brav, avat. Klasket 't eus mat ?

— Laeret int bet, me zo sur.

— Mat 't eus klasket ?

— Pa laran dit, Veve !... »

Prest e oa ar paotrig da zifronkañ. Pebezh darvoud, koll ar sier-se ! Skrabat a rae Veig e doull-kil, en ur ruflañ.

Paotr-Teo : « Graet 'm eus mont ha dont, er Vanell, div pe deir gwech. Pignet on war ar c'hleuz, dre-holl lec'h e

oa ribouloù da vont er park ; ha 'm eus lakaet memes va botez en ur gac'hadenn. Sellet 'm eus dindan an delioù kaol, ken na 'm eus gwelet un den o vont eus ar Pennkêr da Geratur, dre an estrebet, du-hont. Aon 'm eus bet da vezañ kemeret evit ul laer, hag on redet kuit da zont da laret dit.

Veig : « Sed aze, avat ! Amañ 'maomp brav ! Petra vo laret deomp, pa 'z aimp d' ar gêr !... »

Ma ! Deomp da welout en-dro adarre ! »

Kuit an daou baotrig, hep tamm tout a zifrae. En ur ger, krenañ a raent en o bragoùigoù gant an nec'het e oant.

Setu ode ar guzhiadell. Krapat a rae Veig war ar c'hleuz, ha lammat er park.

« Anduilhenn ! » a youc'he Veig, en tu all d' ar c'hleuz.

Evel dibradet gant un dorn bagol, edo Paotr-Teo en e gichen, dirak ar strouezh. Hag eno e oant, eno e oa an daou sac'h, dres el lec'h ma oant bet lakaet, d' ar mintin, e goudor drez ar c'hleuz.

Taerñ a rae Veig :

« Inosant, leue-geot, penn-tach ! E c'hellez fogasiñ 't eus graet aon din, marc'h gell ma 'z out ! » (N' oa ket kouezhet e skouarn vouzar « langach » ar c'hoar Gaid.) « A, te ! Te oar anezhi, te ! »

Digor e c'henou, krak e zaoulagad ranig, chom a rae Paotr-Teo en alvaon.

« A, feiz ! » emezañ.

Tapout a rae Veig peg en e sac'h, hag ez en em sile war e graboñsonoù, dre douez an treujoù kaol, un tammig pelloc'h, er park. Paotr-Teo d' e heul, gant e sac'h ivez.

Skoachet brav, gant ar c'hleuniad drez, ouzh ar vanell, a zo darempredet a-walc'h, hag astennet war douar blot park ar C'hoseg Ruz, ez en em lakajont da sevel roll o finvidigzhioù. Ne vanke netra. Ouf !...

« Ha, bremañ, d' ar skol ! »

— D' ar skol, mar karez laret, sur ! »

An *Intrépide* hag an *Epatant* a oa aze en o gloar gant o fajenn gentañ livet splann. Hon daou lavagnon a c'hello an Ao. Karadeg sellout ouzh o flasoù goullo, er c'hlas. Ne voe ket klevet ganto zoken na kloc'h ar Frered na c'hwitell ar Vistri.

Disammet o c'halonoù eus ur pouez ponner, edont, din-dan doenn glas-gwer an delioù kaol douget war o zreujoù sonn hag uhel, — e skoaz ment an daouig, — evel priñsed almoravidat, etre pileroù mistr ha diniver, e marbr ruz, an Alhambra. Du-hont, c'hwí oar, e liorzhoù mezevennus Granada, leun a stivelloù o strinkañ dour sin, a vleunioù c'hwezvat, hag a eostiged o telennañ. Pe, tostoc'h ouzh traoniennoù glas Breizh-Izel, hag heñveloc'h ouzh ar wirionez, kalz, evel daou gonikl o frioù fiñv-difiñv, kavet ganto bod hag aoz e park brokus ar C'hoseg Ruz.

En tu all d' ar parkad kaol-saout, e oa ur renkennad tiez, stag-ouzh-stag, kêrig ar Pennkêr, anavezet mat gant skolidi Sant-Gabriel. Mes ne ziskouezent nemet o zu enep, ur vur penn-da-benn, e mein teñval-louet, hoal ebet dezho, hep dor na prenestr, nag ul lagad da spiañ ouzh ar pezh a dre-mene war ar Vanell-Zu. An digoroù hag al leur hir a oa war ar c'hostez all, troet ouzh an heol. Ne c'helle ket an dañjer dont eus an tu-se.

« Veve, n' out ket aet skuizh o lenn ? Me gav hir va amzer. »

Paotr-Teo ne gare ket lenn. Lennet en dije egile betek hanternoz, ma vije bet ul lutigenn o sklerijennañ dezhañ al lizherennoù, ha ma ne vije ket bet e vamm o tennañ al levrioù a-dre e zaouarn.

En em lakaat a rae ouzh e sav, koulskoude, mes...

« Ma, ivez ! » emezañ. « N' am eus ket sellet ouzh an *imprimerie*. »

Amzer da Baotr-Teo bodoc'hañ e vizied gant al liv violez ha sked-disked evel skant pesked, lakaat un tammig liv war e fri hag ur jod : « Oi ! ar penn-maskaradenn ! » a c'hoapae ar Veig fall. « Kerzh d' en em walc'hiñ ! » ha kuit davet an dour, a weled o luc'hiñ, du-hont izeloc'h, dre douez ar gwez evlec'h.

Ma oa bet mat kuzhiadell ar sier-skol, ar mintin-mañ, e vo mat ivez, da c'houde kreisteiz. An daou sac'h en toull-strouezh, hag an daou baotr war-eeun da draoñ ar porzh, dre ziri mein ledan Keratur.

Lanv e oa. Edo an dour o lipat goustad pavezioù tomm ar c'hal Fereg hag ouzh o c'holoiñ unan hag unan. Boull ha treuzwelus e oa an dour war ar mein, hag e verzed ar c'hranked munut o vont war o c'hamm, ar chifretez oc'h ober tizh ha pelloc'hik skouadronadoù ar meilhed o kas en-dro o ebatoù prim-tan.

Hag heol hinon. Unan eus an devezhioù-se a fin Gwen-golo, brav e-giz kreiz an hañv, ha klouar, un dudi. Koad Karmez ha koad Sant-Lorañs, aze a-dreñv o c'hein, n' o doa ket kollet c'hoazh un delienenn.

Stlapet gantañ botoù, chosonoù ha loeroù, ha troñset e otoù an uhelañ m' en doa gallet, Veig an hini voe en dour ar c'hentañ, eveljust. Tapout a rae an eonenn wenn a-vozadoù, da c'hoari poufañ warni. Ar chobar — Veig eo a roe dezhañ an anv divalo-se, hag a dalv kement a pod-kambr, da lavarout eo stlejer, ruz-revr — ar chobar all, e-keit ha m' edo Veig o soubañ gant stlabez e zaouarn hag e gofigoù-kar rouz, ar chobar eta — ur grib din, mar plij ! — hag a veze, evit ar wech, ur skoilh bennak war e hent, ne echue ket stourm ouzh lasenn ul loer, a oa luziet he skoulm. Ken na torras al lasenn. Ha dour d' al liv violez ! Druz ha spegus e oa ar flaer a liv-se, ur spont. Mes n' en doa ket Paotr-Teo diegi d' an dour : er gêr, ne vije ket bet heñvel, sur.

N' aent ket da ebatñ re bell diouzh bevenn an dour ; dres betek kramenn o daoulin, peadra, evelkent, glebiañ traoñ o oteier. Rak, evit dezho gouzout neuñ un tammig, gouzout a raent ivez pegen flibouz e oa al lec'hid war vein traoñ ar c'hal, ha pegen don e oa ar ganol. Ne vefe ket brav ober lamm e-barzh. Uhel oa ar mor, ha kas gantañ, o vont, en e red kompez ha diharzus, a-hed an daou gae uhel ha serzh, war-du ar Veilh-Vras, du-hont, e laez ar porzh, ha, pelloc'h, dre zindan ar Veilh-Vras ha palioù Penn-ar-Pont, betek lenn ec'hon ha broenneg Kerdrenn.

Tarzhañ a rae trumm ur youc'hadeg, en tu all d'ar c'hoad. Tregerniñ a reas trouz galoupadegoù botoù-koad.

Peder eur. Dija !... Buan he doa troet an amzer. Echu oa skol ar baotred ha, war un dro, ar skol-louarn. — Ha ne oant bet gwelet gant den !... — Poent oa mont d' ar gêr da glask merenn vihan. Naon o doa. Mes biskoazh n' o dije bet kredet Veig ha Paotr-Teo e oa ken bourrus ar skol-louarn.

Ha n' oa ket echu o berr-amzer.

Du-hont, a dreñv torgenn ar c'horn-tro, a ra hent ar c'halaj, dirak meilh-mor Porzh-Moro, a zo en tu all d' ar ganol, e voe gwelet, gwintet en oabl, uheloc'h eget gwez pin ar Menez-Bihan, pennoù-laez teir gwern, gant o gouelioù digor, daoust ma ne oa, koulz lavarout, banne avel ebet. Ul lestr o tont er porzh !

Diskornañ a rae un den, war ar chaoser, gant ur penn-kordenn war ur skoaz, eus a-dreñv torgennig ar c'horn-tro. Hag un eil den o frapañ ivez war ar gordenn war e skoaz. Hag un trede, heñvel. Ha pevar, c'hwec'h, dek, pemzek... Un ugent gwaz bennak e oant, an eil war-lerc'h an hini all, o halañ war ur fun hir, hir ha ken tev ha penn Veig. Dont a raent evel-se, adalek an Ti-Gwenn, sur a-walc'h, penn-da-benn ar chaoser, a-hed kildroennoù ar stêr, betek ar c'hal Fereg, er porzh.

Ha setu o 'n em ziskouez d' o zro, stag ouzh ar penn all eus ar fun, beg a-raok ul lestr teir-gwern, hag e gorf bras.

Douget gant al lanv hag, ouzh e ramokiñ, ur jav — ar chapeledad-se — a ugent den kreñv, a lakae traezh hent ar c'halaj da zraskal gant o zreid o tont war-raok gant ur c'herzhed mentet ingal, e tibouke al lestr, e-tal Porzh-Moro, a-wel d' ar porzh, hiviziken.

Ur vatimant marc'hadourezh e oa, hir, ledan, gwenn he moñselloù. Don a-walc'h e oa en dour gant pouez he c'harg : ur fred koad eus ar broioù-krec'h, evit chañterioù hesken-nerezh ar Mobras pe ar Mogn, moarvat. Sammet e oa, pont hag all, gant plenk hir, ur frond — c'hwec'h balzamek ar rousin — d' o heul, ha gwrezus, da grediñ edo holl wez pin ar Menez-Bihan o pourmen gant al lanv, e sked an heol laouen. Ur c'haer he gwelout o tenesaat, war he gorregezh

c'halloudus ha sioul, ouzh saflig an dour roget, hep ket a boan, gant he staoñ, chourig ar c'herdin diniver, ha gwigour an delezioù dindan lien.

Derc'hel a rae reizh kreiz ar stêr, evit mirout mont da skeiñ war al lec'hidegoù, dindan vor, d' an ampoent, mes anat mat, en dour boull, o domani du-louet nec'hus, en daou du d' ar ganol.

Aes a-walc'h e c'hellas Veig lenn anv ar vag : *Inga Harner*, a oa merket war an a-raok gant melloù lizherennoù kouevr, a lintre e-giz an aour.

N' o doa daoulagad ar baotredigoù nemet evit ar gwer-nioù o vrañsellat goustad, heñvel ouzh bannieloù divent o skediñ en oabl dic'hoabr, gant o gouelioù war stign, hag ivez, ha muioc'h c'hoazh, evit un dra souezhus-dreist ouzh beg-a-raok ar vatimant dindan an adwern : ur skeudenn souezhus, a dra sur, korf ur vaouez, skultet ha livet splann, noazh betek he begell, bronnoù fonnus dezhi, hag ul lost pesk e lec'h an divisker. Sellout a rae eeun dirazi e-giz evit lavarout da vestr ar vag mont atav eeun gant e hent. Mont a rae va daou abostol e genou o sellout outi.

E bourzh al lestr, er penn a-raok, e oa un den barvek, gant ur gasketenn kabiten, ha galoñsoù war e vañcheier. Unan all a oa en ul lochennig plenk ha gwer, savet uhel a-zioc'h ar pont, ur gasketenn kabiten war e benn ivez. Martoloded a zifrete e korn pe gorn eus ar pont. Hag ouzh ar rod-stur, o treiñ hag o tistreiñ hep ehan, ur ramz e vlev hag e varv melen, war gorf ur roched divilgin, barennet gwenn ha ruz, ha divrec'h dezhañ e-giz d'ur roñfl. Ur ramz o vle-niañ ur vag ramz.

Unan all a oa gantañ un doare founilh mentek, a gase, pep ar mare, d' e vuzelloù, evel ur c'hleron. Hag e tenne dioutañ harzhadennoù, evel re ar c'hi Fri-Du, a gave da Veig : « Aou !... Aou !!! » Urzhioù, mechañs. Hag ar re all a gompene.

Ober a rae : « Aou ! Aou !... Aou ! Aou !... » pa voe ar vatimant o vont e-biou da feunteun ar Skudell, hag an holl ramokerien ha lezel ar penn-fard da gouezhañ. Ober a reas plouf ! en dour. Ha setu ar gordenn fetis o 'n em lakaat da filañ, da filañ, dre zindan an dour, ha da sevel e bourzh al

lestr dre ur riboul houarn, er penn a-raok. Lavaret e vije bet ur sarpant. Hag evel ur sarpant, eeun-hag-eeun, ez en em guilhe en he bern. Gwir eo e oa ur martolod o reiñ an dorn dezhi da aozañ he c'helc'hioù e doare.

Kenderc'hel a reas al lestr da vont war e herr, meur-dezus, hogen goustad-oc'h-goustad. Daou vartolod a oa deut d' ar c'hal Fereg, gant ur c'hanod bihan, en ur bolinat. Redek a rejont gant o botoù-kenoù — Klok, klok... klok, klok ! — war ar c'hae, tra ma tostae al lestr da akostañ. Diouzh ar penn a-dreñv, e oa bet taolet dezho ur bos, ur fard, mar kavit gwelloc'h, gant ur pikol lagadenn er penn. Ken buan ha tra e voe lakaet al lagadenn en-dro d' ur maen-harz, ha martoloded all, er bourzh, en ur stardañ muioc'h-mui ar fard laosk en-dro d' ur bellenn houarn berr ha goñs, a dorre dre gaer lañs diwezhañ ar pezh monumant-se, uheloc'h, gant e ouelioù, eget iliz Karmez. Ken a chomas difiñv, e rez ar c'hae. Kaset e oa bet da vat ivez an hevelep kefridi, er penn a-raok. Ha lakaet e oa bet, a-ispilh ouzh pep a benn-kordenn, pevar pe bemp treust fetis, etre ar vag hag ar c'hae, da virout ouzh ar voñsell da stokañ ouzh ar mein rust ha da ziskroc'hennañ he gwiskad peñtur gwenn.

« N' eo ket diaesoc'h eget se, a soñjas Veig. Dav vo din mont da vartolod, pa vin bras. »

Veig : « Ha te, Paotr-Teo ? »

Ne lenne ket Paotr-Teo e soñjou e gamarad. Respont a reas, memes tra :

« Ya ! »

Neuze, e serras e c'henou, a oa chomet digor, abaoe m' en doa gwelet al lestr — *Inga Harner*, Bergen — o tiboukañ eus a-dreñv ar beg-douar, e-tal meilh-mor Porzh-Moro.

Ouzhpenn an daou gabiten, a oa war ar pont, setu daou pe dri all o tiskoachañ, dre un toull, — ur skoutilh, — eus strad ar vatimant. Galoñsoù aour dezho war o mañcheier, ha pep a gasketenn kabiten war o fenn. Honnezh a oa ur vag kran, klaoustre ! Tud hir, va c'hristen paour, ha dezho blev melen, evel ur parkad gwinizh azv. Rannañ a raent etrezo komzoù iskis, tre ma pennadent an hent a sav da gêr, etre ar gwez bras hag an tiez-skol — skol nevez-flamm ar vugale vihan ha skol ar merc'hed.

« Saozon ! » eme Veig da Baotr-Teo.

« Ya ! » eme Baotr-Teo. Paotr a youl-vat e oa Paotr-Teo.

Veig e oa Parizianed evitañ an holl estrañjourien a zeue galleg ganto, ha Saozon ar re a gomze ur yezh diveizus.

Nann, Veig ! N' eo ket Saozon e oa ar verdeidi mentek-se, o blev melen. Norvegiz, ne lavaran ket, gouenn ar Vikinged, Veig, rederien-mor touet evel paotred da vro.

Diskouez a rae unan anezho n' oa ket ur Saoz, rak, en ur vont e-biou d' an daou gomper bihan, e reas outo ur mousc'hoarzh mao.

Ha Paotr-Teo a lavare :

« Gwelout a ra unan traoù, avat, pa ne ya ket d' ar skol ! »

AN TEIR-GWERN
" INGA HARNER "

« ... Hiziv e lakaomp ar boked war siminal penn-ti Lezka-touarn. 'Benn arc'hoazh e chomin er gêr, peogwir emañ ar sul, hag en hentoù, kerkent ha 'benn dilun vintin, etrezek bro ar jistr c'hwerv-brizh, da sevel o ziez-hañv da « druchoned gran » Kemper.

— N' emañ ket Fouesnant e toull hon nor.

— Nann ! Keit ac'han da Gemper, pemp lev damdost. Mes ne chomomp ket er vourc'h. Mont a reomp, ul lev bennak pelloc'h, da Veg-Meilh, war vord ar mor, dres dirak Konk.

— Ne vi ket gwelet alies er gêr, e-doug ar goañv.

— Bep sadorn da noz, mechañs.

— Tri di da sevel !... Un taol-kaer eo bet d' ar Struilhou frapañ ar marc'had-se gantañ. Mes n' eus ket mañsonerien e Fouesnant ?

— Ul loa-vañson eus Pont 'n Abad, Kaourantina, a dalv teir pe beder all.

— Ya ! va gwaz. Dreist-holl, p' eo ur mañsoner eus Pont 'n Abad an hini a fogas... » a droc'he gwreg hemañ en ur c'hoarzhin. « Mat a gavez ar pour. »

« Forzh penaos, aze 'z eus labour evit ur reuziad. Mes diwall da frotañ re da wenneien en ostaleri. Amañ 'z eus bugale da vagañ ha da wiskañ.

— A, oah !... Terriñ ar sec'hed, ur wech an amzer. Hag evet e vez aliesoc'h hini bouzar.

— A !... Pa zeu soñj din, Herve, botoù ar paotr. Sed e pe stad int bet lakaet gantañ adarre. Ur rumm votoù 'm eus ranket paeañ triwec'h gwennege n' eus ket teir sizhun.

— Gast ! ya 'vat ! Penaos ar gurun e ra an torc'h bihan-se e gont evit treuzañ e votoù e-giz-se ? 'Benn henozh, e tachin anezho, hag e lakain un tamm ler amañ. Lakaat a rin dezho ivez ur c'helc'h kouevr melen, hep gortoz ma vint faoutet gant ar mazaouer bihan-se.

« Mes n' eo ket a-walc'h uzañ teod. Poent tostaat da Lezkatouarn... Va muzetenn gant va merenn... Ken a vo fenozh. Kaourantina ! Ken a vo, Gaidig ! Bezit fur d' ho mamm !

— Ya ! tad. »

N' oa ket kalz muioc'h eget seizh eur, hervez ar skleri-jenn a zegouezhe en ti dre ar prenestr. Traoù lein a oa c'hoazh da skaotañ ha Gaid, war he fenn-kuch, a 'n em lakaas da skubañ gant ur valaenn uheloc'h egeti, da c'hortoz ma vije dihun ar re vihan.

Er c'hontrol eus ar c'had, a gousk, digor ganti he daoulagad, Veig a oa dihun en e wele, daoust ha kloz e valvennoù. Ha dihun mat. E fri sko er speurenn, kropet ken na oa kropet, gant e dreid ouzh e feskinier, hag e zivrec'h kroaziet en-dro d' e gerc'henn, n' en doa ket kollet ur begad eus ar gaoz, edo e dad hag e vamm oc'h echuiñ dibunañ, ha, nebeutoc'h c'hoazh, lakaet e deod enni.

Ne welit ket en dije goulennet e dad digantañ « resita » dezhañ e gentelioù ?

Nann !... Ober a rae an ezvan da gousket. Setu a oa bezañ fur. Evit ur wech !...

Klask a rae ivez pe c'haouig livañ, pe zigarez tennañ da M. Karadeg, evit skol-louarn an derc'hent.

Un dra c'hounezet e oa atav. Ne vije ket e dad er gêr, e-pad ur miz, pe zaou, pe dri. Memes ma teufe da c'houzout, pa vije distro, e oa bet manket, ur wech, ar skol gant e benndolog, an dra-se ne gontfe ket mui.

Hag evit M. Karadeg, gwelet e vo. N' oa ket Veig paotr da drikamardiñ e voulienn re en a-raok. Kouskomp c'hoazh !

Skaotet e oa bet loaioù ha skudilli gant e vamm, ha Gaidig a oa oc'h echuiñ lakaat he c'hoefoù, dirak he mele-zour harpet ouzh ur volenn, war an daol.

« Alo ! Veig. Poent sevel ! » eme e vamm.

Boud.

« A 'ta ! Veig. Te zo o c'horiñ vioù ? »

Fiñv ebet er gwele.

« Nann, c'hwî, mamm ! Kentoc'h emañ o c'hortoz ma virvo e gouez dindanañ. »

O, ar c'hagn a C'haid ! Ober a rae Veig ul lamm en e wele.

« Nann 'vat ! gaouierez. 'M eus ket staotet 'barzh va gwele, mamm. »

Ne voe ket seizhdaletoc'h o lakaat e otoù hag o 'n em wiskañ, ha soubañ korn an torch er sailh dour da « zibikouzañ » e zaoulagad. Pas re ; dres en-dro d' e fri. Yen eo an dour.

« Aze 'maout ivez, Ifig bihan ?

— Ya ! » eme hemañ, lentik.

Degouezhet e oa Paotr-Teo en ti, didrouz. Teurel a rae Veig outañ ur sell vil, tra ma lonke buan-buan loaïadoù diwezhañ e soubenn gafe.

Disoñjet 'm oa betek-hen lavarout en doa Paotr-Teo un anv kristen, evel an holl. Paotr-Teo n' oa nemet ul lesanv, dre benn d' e c'hobari, a roe dezhañ Veig hag ar vourouzeien eus e oad. A-hend-all, e oa anezhañ Ifig, Ifig Korku, mab da Lan, — Corcuff, war rolloù an Iliz hag an Ti-kêr, — ur paotr Kombrid, devezhour eus e vicher en uzin soud. Evid kaout labour en uzin, e ranke an tadoù kas o bugale da skol ar Frered, memes ma oant debrourien beleien. Hogen, pa veze grev, ar C'horku eo a zouge an drapo ruz.

« Dont a rez, Paotr-Teo ?

— Ya ! » eme Baotr-Teo.

Ha kuit prim an daou gantolor, gant o sac'h-skol war o c'hein.

« Goi 'vat ! » a fuc'he Veig, kerkent ha war ar straed. Te 't eus graet aon din, avat, o tont e-barzh va zi.

— Evit petra ?

— Evit dec'h.

— Te grede dit em ije gwerzhet ar vechenn ? N' on ket ken azen-se c'hoazh, mechañs », en em zifenne an Ifig, feuket. « Nemet... aon 'm oa e vije bet redet kuit d' ar skol hep gortoz ac'hanon. »

Ne badas ket o fennad tizh pelloc'h eget korn ar Waremm-Mên. O treuzañ ar Vadalen, e kavjont amzer da sellout ouzh daou gi, unan bihan hag unan bras, o c'hoari en em gannañ. Hag, a-benn neuze, e oa aet ponner o botoù da stlejañ.

« Chañs hon eus bet » a lavare Veig, en ur vont, « n' eo ket bet diouetet netra evit dec'h.

— Ganin ne vez ket goulet morse netra », a respontas e gamarad.

« Me, me 'm eus ranket stankañ he beg da *ma fraiez* kozh, a glaske gouzout re a draoù. Ha, panevet eo degouezhet va mamm gant va moereb, em ije plantet ar yenn enni. Gant M. Karadeg, ne vo ket heñvel, bremaik. Petra ' responti da M. Karadeg evit dec'h ?

— Netra. »

Treuzet o doa ar C'hoc'hu Kozh, ar ru diamzeret-se, goloet en he hed, ha kostezet, en daou du, gant boutikoù plañch ha boutegadoù legumaj, frouezh, podadoù gwer madigoù, ha me oar... hag, abalamour da se, darempredet ingal gant lamponed ar skolioù, « falzigerien », holl, koulz lavarout.

Dor vras an uzin soud a oa dirazo, en tu all d' an hent.

« Aze emañ va zad o labourat », eme Baotr-Teo. « Mont a ran da welout va zad. »

Hag eñ tre. Eñ er penn, an taol-mañ, ha Veig d' e heul, evit ur wech. N' o doa ket merzet zoken ar skritell, er porzh : Difenn mont tre.

Hentoù tenval, du, mogerioù du, solieroù du, rouantelezh ar glaou hag an huzil sklerijennet, du-mañ du-hont, gant lutigennoù melenek. Safar boud. Dorioù houarn o tigeriñ hag o sarriñ war fornioù spontus, flammoù an ifern o tañsal hag o roc'hal enno. Hag, o vrochañ an tan gant bizhier houarn hir, diaouloù du, ne weled en o dremmoù nemet gwenn o daoulagad hag o dent.

Tad Paotr-Teo a oa unan eus an diaouloù-se.

« Tad ! » eme Baotr-Teo en ur darlaskat.

« Sell !... Ifig !... » eme an den, souezhet. « Dre belec'h out deut ? »

— Dre an nor.

— Ma ! Tec'h kuit en-dro dre an nor ! Amañ eo difennet dont.

— Dit eo an daou-se ? » a lavare un diaoul all, harpet war e vazh houarn, evel war ur forc'h. Ne vije ket bet Veig souezhet o welout dezhañ kerniel war e benn, ha treid marc'h e-lec'h e votoù-koad. Ha, ken buan, en dije klasket gant e sell Choudourenn Veur ar re zaonet.

« Nann ! Hemañ ken », en doa respontet an den, en ur ziskouez Paotr-Teo, a yae e gleuer o sellout ouzh e dad. « Egile zo mab d' an Trebern, un amezeg.

« N' eus nemet an daou-mañ eus ar Waremm-Mên, hag a ya da skol ar Galotined », emezañ c'hoazh en ur c'hoarzhin.

« Ifig vo ur republikan, memes tra. N' eo ket gwir, Ifig ? »

« Eo ! tad. »

Ur bugel aes kaout afer outañ e oa an Ifig-se. Atav e lavare : « Ya ! »

Kantren ha korntreiñ a reas an daouig bihan, dianket e milendall teñval an uzin, a-barzh degouezhout dirak un nor-wer, a daole sklerijenn an deiz. Er-maez, e oa ur jardin tommheoliet, gant ur manerig en he c'hreiz. Treuziñ a rejont ar jardin, en ur ober tro ar bodennadoù hortañsia, naren, avat, hep bezañ saludet, en ur dennañ o boned, un itron yaouank hegarat, a oa o pourmen en alezioù.

En tu all d' un norig houarn, gant barrinier heñvel ouzh goafioù, e oa plasenn an Amann, ha, war o dorn kleiz, sko aze, an tiez-skol, penn ar Vanell-Zu, hag ar C'hoad, gant e wez bras sioul.

Na ki nag ene war ar blasenn. Na trouz. Eo ! Mouezh ar merc'hed, en o c'hlasoù, o lenn a-gevret, a vouezh uhel, ha reolenn an Dimezell o skeiñ war daol he burev ; ha jolori ur bagad filiped o 'n em dagañ, evit greun kerc'h, en-dro d' ur bern kaoc'h marc'h fresk.

Sellout a rejont an eil ouzh egile gant ur vourrenn. Ne ouient ket pet eur oa. Sklaer oa un dra, evelkent : dale du-mañ, dale du-se, diwezhat e oant adarre evit ar skol.

Sell amañ, vat !... M. Karadeg !... Peseurt digarez fentañ da M. Karadeg ?... Lakaomp n' en dije ket skandalet re evit un devezh mank. Mes degouezhout diwezhat er c'hlas, ker-kent hag an devezh goude ? Aze oa pinijenn da gaout, ha mezh 'ta, dirak ar baotred !... Gast ! gast ! gast !...

« O, met !... » a daole Veig, trumm, tra ma treuzent ar blasennig, hep hastañ nemeur. « Hiziv emamp ar sadorn.

— Ya !

— Hama ! N' eo ket dav mont d' ar skol.

— N'eo ket dav mont d' ar skol ?...

— Memes goude kreisteiz.

— Memes goude kreisteiz ?...

— Nann ! Kompren ac'hanon, « frai choj ! » Ma 'z eomp bremañ d' ar skol, e klevimp pater, hag e vimp lakaet e pinijenn. Ma ne 'z eomp d' ar skol nemet goude kreisteiz, e vo goulet ganeomp, memes tra, perak n' omp ket bet er skol, dec'h hag ar mintin-mañ, ha pinijenn kaletoc'h deomp. Ma ne 'z eomp ket tost, ne vo goulet netra diganeomp ; n' eo ket gwir ?... Ha, 'benn arc'hoazh, *frai* bihan, emañ ar sul. Ha, 'benn dilun, M. Karadeg n' en do ket mui soñj. Hennezh zo kozh.

— Koulskoude, me garfe gwelloc'h mont d' ar skol. »

...Pezh ne viras ket ouzh Paotr-Teo. — ha stad ennañ a vezañ kavet ar riboul, e-unan, — da grapat ar c'hentañ dreist kleuz park ar C'hoseg Ruz, ha da sankañ e sac'h en e skoachig, e toull ar strouezh.

Ha dao, o daou, d' ar c'hoad en-dro, da lenn an *Intrépide* hag an *Epatant*, e-harz traoñ ar wezenn faou, en ur c'hortoz kloc'h unnek eur.

Peadra o doa da lenn evit ur sizhunvezh, d' an nebeutañ.

A-benn nemeur, ne voe mui, dindan bolz deliaouek ar gwez glas, na Veig na Trebern-Doue ebet. Hogen Texas-Jack e-unan hag eeun-hag-eeun. Sombrero ledan war e benn, kentrou lemm ouzh e heuzoù, ur rifle war gein e chupenn

ler, hag ur c'holt war bep a groazell, loc'het oa, ouzh daoulamm ruz e varc'h prim-tan, e Foenneg Vras ar Far-West, war roudoù an *outlaws*.

Skrapet e oa bet, gant an difallidi-se, merc'h ar c'horonal Callaghan, ur plac'h yaouank he blev hir, brav e-giz an deiz, ha karet gant ar Gomanned valc'h zoken. Ret groñs e oa tapout an *outlaws* da brizonidi, kent na vije tizhet ganto kevioù ar Menezioù Roc'hellek, a weled, du-se, e penn pellañ an dremmwell, heñvel ouzh ur goumoulenn c'hlas.

Amañ ez echue ar bajenn, gant ar meneg : « Da genderc'hel, er sizhun a zeu ». Skrijañ a rae hol lenner diwar e from. Ruflañ a reas.

« Dav vo din kavout daou wenneg da brenañ niverenn ar sizhun a zeu », emezañ, en ur dreiñ ar bajenn.

Ifig Korku, gouzout a reomp, e oa ur paotrig sioul anezhañ. Harp e gein ouzh ar wezenn faou, ne fiñve ket eus kichen e geneil. N' em eus ket lavaret, avat, e kave berr e amzer evel egile. Ne gare ket lenn. Ne gare ket lenn evit meur a abeg. Da gentañ, ne ouie ket c'hoazh en em zibab mat-mat en e lizherennoù. Ha, d' an eil, ne gomprenne seurt er pep brasañ eus ar gerioù a lenne. Marteze, ma vijent bet e brezhoneg !...

A-benn ur reuziad eta, ha, goude bezañ troet ha distroet pajennoù e gelaouenn da sellout ouzh an « imachoù », e santas c'hwen en e benn a-dreñv. Bazailhat a reas :

« Veig, me zo ' vont da vale. »

En-dro dezhañ, an douar sec'h, rak ar gwez faou ne c'houzañvont ket ar geot dindan o deil, a oa goloet a giviz. Dibluskañ a reas gant e zent tri pe bevar eus ar frouezhi-goù-se, a vez graet ivez finij anezho, ha, du-mañ, kraoñ-pichon. Mes re zifonn e oant da zebriñ. Ober a reas e venoz diskenn, e traoñ ar c'hoad, betek ar c'hae, da sellout ouzh al lestr *Inga Harner*.

Klevout a rae ar wazed da vat o tiskargañ ar vag. Skoachet e oa outañ tud ha bag gant ar plenk berniet uhel, en tu-mañ d' an hent, dindan ar gwez evlec'h, da c'hortoz bezañ sammet kuit gant kirri an ti-heskennerezh.

C'hwitellat a rae Ifig e-giz ar pintig disoursi. Edo o vont da dreuzañ an hent, pa voe stouvet naet e c'hwitell.

E-mesk ar wazed a oa, gant o daouarn en o chakodoù, o sellout ouzh ar fiñv, un den eus ar Waremm-Mên, harpet war e vazh ! Ha piv e oa, nemet Izidor Kefeleg, ar c'hemener kamm ?

Ur c'hemener penn-da-benn, gant un teod a bike evel e nadozioù, hag a droc'he evel e weltre. Ha katell abalamour d' e vicher, prest atav da dopinat — evit farsal, sañset ! — kement a gleve hag a wele. Ul lesanv en doa evel an holl : Pik-Chupenn. Mont a rae dezhañ e lesanv e-giz e veskenn d'e viz. Hag, evit echuiñ tout, o chom e oa dor ouzh dor gant tad ha mamm Veig.

Hopala ! Jañ-Mari. Amañ zo dañjer ! Arabat bezañ gwelet gant hennezh !

Ha Paotr-Teo d' ar c'haloup da laez an durumell, en ur droc'han berr, dre douez ar gwez.

« Veve ! Veve ! N' ouzez ket piv zo war ar c'hae ? Pik-Chupenn kamm !... »

— Oi !... N' out ket bet gwelet gantañ ? »

Eus al lec'h e oant, ne verzed na porzh, na lestr, na den. Nemet garennoù ar gwez hag an delioù glas. Mes n' eo ket mui daou louarn eo a oa o kas anezhi e Koad Karmez ; daou wiñver spontik ha war-c'hed, ne lavaran ket, prest da skampañ, aon leun o c'hof na zeuje Pik-Chupenn, kement ha koll e benndevzh, da gas e dreid tre betek laez ar c'hoad.

Ne fiñvjont ken diouzh o repu, ken na sonas kloc'h ar Frered.

Me lavar ivez ; petra en doa ar c'hemener-laou-se da zont da straniñ war ar c'hae, e-lec'h bezañ gant e labour en e di ?

Goude kreisteiz, ha debret o merenn ganto didrabas er gêr, ne voe kudenn ebet da ziluziañ evit an daou abostol.

Divizet hag asantet o doa, o daou, ne vijent ket aet d' ar skol. Setu a dalveze kement hag un aotre — aotre diganto o-unan, aotre, memes tra ! — chom adarre da c'hoari o lern.

Divorc'hed-kaer e oant eta, ha skañv o c'houstiañs, o 'n em gavout en-dro adarre, goude ur sell, er park, d' o seier-skol, e goudor ar gwez bras. Kanañ a rae al laboused, hag ur gazeg-koad a lakae an tro-war-droioù da dregerniñ gant he youadoù. N' oa ket divalo bevañ,

Er c'hoari kotoù, e kollas Veig pemp kanetenn gant Paotr-Teo. Mes gounit a reas seizh warnañ, en un taol parpe-zispar. Ober a rejont ur c'horfadig kiviz.

« An dra-se 'n eus blaz ar c'hraon kelvez ; ne gavez ket, Paotr-Teo ?

— Eo ! » a respontas Paotr-Teo.

Ha Veig ha 'n em glenkañ ouzh traoñ ar wezenn faou, da sankañ adarre en e *Intrépide*, gant Paotr-Teo en e gichenig.

N' oa nemet ur skeudenn en danevell en doa da lenn, mes peur-fromusoc'h e oa houmañ : *Ar Gêr Gollet*.

Goude bezañ digejet gant poan hag aked ur skrid-parch e yezh kozh bro-Indez, tri ergerzhour saoz, — skosat, evit bezañ resis, rak ne c'houzañv ket Skosiz bezañ kemeret evit Saizon, — o doa lakaet en o fenn adkavout kêr santel ar Vouddhisted, skoachet dindan an douar, e-kreiz menezioù gouez ar Pundjab. Diskennet e oant dre ur puñs dianav d'an holl, hag, en ur vont donoc'h-don e kalon an douar,

dre straedoù kevrinus hag arvarus, e oant degouezhet, en diwezh, war ul leurenn kaelet gant ur spled mein kizellet.

Alese, tudoù ! ouzhpenn mil troatad, a-serz, dindan o zreid, hag o soubañ en ur sklerijenn iskis, setu mezeven-nusañ, sabatuusañ, estlammusañ, badaouusañ, pennfollusañ taolenn, a skedas biskoazh ouzh selloù trellet mab-den ! Pagodoù, santualoù, palezioù, manerioù, savadurioù aour, ken nemet aour fetis. Ar Gêr Gollet !... Hag hi didrouz, mut, diziraezus, hep ur fiñv neblec'h, nag un ene bev.

Pa zivorfilas Veig eus e huñvre, — rak burzhudus e oa e lennadenn evel un huñvre, — e voe souezhet-bras o 'n em gavout en e goañze, en ur c'hoadig anavezet mat eus kêr Bont-'n-Abad, e gêr c'henidik.

« Paotr-Teo, ne garfez ket bezañ ivez... »

Edo o vont da lavarout : « ... bezañ ivez ur c'hlasker kêrioù kollet ? » Ha respontet en dije Paotr-Teo : « Eo ! » Mes chom a reas ar gomz a-istribilh. Astennet a-c'hwen e gein, digor e c'henou gantañ, Paotr-Teo oa kousket dous. Ha, marteze, oa sorc'hennet ivez. Neuze, avat, e tlee bezañ gant boued lipous ; rak ne yae ket keit ha Veig da glask magadurezh d' e dammig spered. Gwelloc'h, sur, e kave blaz yod ar vro eget maged alaouret ar faltazi.

Edo Veig o sevel d' en em zic'hourdañ, rak tapet en doa droug dargreiz, hag izelloc'h, war an douar kalet hag ouzh rusk, ken kalet all, ar wezenn, pa voe dedennet e evezh gant trouz ur strakerez : ra, a, a !... Ha, kerkent, adarre : ra, a, a !... Piv oa, e-tro aze, o pourmen gant e c'hoariell babig ?...

Eus an uhel eo e teue tregern mibin an daboulinadenn.

« Oi ! ur gazeg-koad », eme Veig.

Ul labous e bluñv glas, kripet ouzh ur bikol a wezenn faou gwintet sonn hag uhel, e-kreiz un heoliennig, nepell diouzh moger ar Vanell-Zu, a oa a-zevri o pigosat ruskenn levn ar wezenn. Pep ar mare, e rede buan-buan, e-giz ur glazard, en-dro d' an drojenn, — « da welout hag eñ e oa houmañ toull, en tu all », a soñjas Veig.

Hogen, amzer da hemañ ober ur serr-lagad ne voe mui na trouz na labous.

Tostaat a reas ar paotr koutik-koutig, ha savet e fri. Gwelout a reas, e trojenn ar wezenn, pevar pe bemp metr a-us d' e benn, un toull ront, div wech bras evel ur pezh ugent real.

« Paotr-Teo ! Paotr-Teo ! Deus 'ta » a huche ar paotrig.
« Aze 'z eus ur gazeg-koad war he neizh. »

Digeriñ a rae Paotr-Teo e lagad hag e c'henou.

« Deomp da dapout anezhi en he c'hud !

— Añ ? » a lavare Paotr-Teo, sebezet-mik. « Te 't eus divaskell, pe ivinoù kazh ? »

Ne rae ket Paotr-Teo goap ; ober ur goulenn nemetken.

E ranked bezañ brell evel Veig, avat, evit komz seurt m'en doa graet. Pevar eveltañ n' o dije ket bet tapet ar favenn ramz-se a-dro-vriad, ken ledan e oa he zroad. Ha n' oa, kennebeut, peg ebet en he rusk, a oa kompez, ken na lintre.

Dastum a rae Veig un dornad grouan da stlepel ouzh an toull.

« N' out gour da vizañ », eme Baotr-Teo, tra ma tibabe meinigoù, e-touez ar ballogoù kiviz strewet war an douar.

Ur geitadenn re uhel, ur geitadenn re izel, div pe deir all tost pe dostoc'h d' an toull, ha setu ur maen e-barzh. Hag, heñvel ouzh un itron gozh fulor enni a vezañ bet direnket evit netra, ar gazeg-koad a zifloupe war dreuzoù he lochenn, a fuc'he, hag a dec'he trumm, a denn-askell, en ur zic'hargadennañ : A, a, a, a, a !... e donderioù ar c'hoad glas.

Nijet kuit al labous, echu an dineizhañ.

Sonañ a reas kloc'h ar Frered.

Echu oa ivez ar skol-louarn, evit ar sizhun.

Bountet gantañ an nor, a-drak, ha dilammet en ti e-giz un tarz-h-mor, Paotr-Teo a laoske en un analad :

« Veve ! Veve !... Va mamm 'n eus laret din larout dit larout da M. Karadeg ne 'z in ket d' ar skol hiziv. Me ya da Gombrid gant va zad. »

Birvilhat a rae e zaoulagad ront gant ar blijadur. Ha, gwir ! lakaet e oa bet dezhañ e zilhad sul hag e votoù-galochoù.

Sevel a rae Gaid ha Veig o fri diwar o skudellad soubenn gafe, edo Veig o lonkañ, Gaid o pismigañ.

Veig : « Te 't eus chañs, avat ! »

Gaid : « Ne vez ket laret *boñjour* mui, en ur zont e ti an dud ? »

Paotr-Teo : « Eo ! *Boñjour* ! Mes me ya da Gombrid gant va zad. »

Gaid : « Gant ar charabañ ? »

Paotr-Teo : « O, nann ! War hon treid. Me oar bale. »

N' oa ket Paotr-Teo da vezañ anavezet, ken bliv e oa sell, ha kement a deod a oa deut dezhañ. Komprenet e voe gantañ e oa savet un tabut etre e vamm-gozh hag e dad, — ginidik an eil hag eben eus parrez Kombrid. Ma oa ret mont da di-kêr du-se da gerc'hat paperoù, da c'houzout piv oa ar wirionez gantañ. Ha Lan Gorku a zegase e vab gantañ, evit kavout berroc'h an hent.

Paotr-Teo : « Me 'm eus ur voereb e Kombrid, o chom e-kichen ar vourc'h, ur c'hoar d' am zad. E ti honnezh e

vo traoù mat da zebriñ. A-dreñv an ti, 'z eus ur mell liorzha-
avaloù.

Veig : « Te 't eus chañs, avat ! »

Gaid : « Ma ne zegasez ket din ur poched avaloù, te
welo !... »

Ha kuit Paotr-Teo evel ma oa deut.

Ma rankas Veig kemer e-unan hent ar skol, d' al lun vin-
tin-se.

Sellet en doa ouzh e geneil bihan o pignat ar Waremm-
Mên, dre an dorn gant e dad, fichet ivez gant e zilhad pei-
zant bigoudenn, ha faro Paotr-Teo, m' en tou, evel ar Roue
Marc'h.

Savet e oa Veig, koulskoude, eus e wele, war e du mat
ha, zoken, leun a gouraj da vont dirak M. Karadeg. Kavet
en doa mil ha kant respont dispar da ziskleriañ d' e vestr-
skol perak n' oa ket tostaet d' e glas, e-pad daou zevezh. Bep
tro, en dije lavaret : « N' eo ket gwir, Ifig ! » Hag Ifig en dije
respontet : « Eo ! »

Padal, rankout a rae mont e-unan dirak M. Karadeg. Sell
aze hag a cheñche tout ha ne renke netra.

Kemer a reas, un tammig hep gouzout dezhañ, an hent
hirañ, dre draoñ al lenn, Pont-Gwern, Penn-ar-C'hap hag
ar Marc'hallac'h.

Teurel a reas, en ur dremen, un taol-lagad e-barzh stal
vezher ha kemenerez tad Leon Gwichaoua. Hemañ oa ane-
zhañ ur bouilh peizant bigoudenn, yaouank c'hoazh, deut,
a gostez Treogad, da fortunian, e kêr, gant an dimezell
Jentrig, ur verc'h nemeti : « Aze oa « grifou » en div « fou-
ilhez », a lavare ar gemenerien, a neude evitañ. — Danvez e
oa war an trenkedoù, peadra gwiskañ an hanter eus kêr.

Gwelet en doa ar Gwichaoua fri Veig, e toull an nor.

« Te zo o c'hortoz Piti Leon ? » emezañ, mavik. « Aet eo
d' ar skol, « frai » bihan. »

Kejañ a reas ivez, e laez Penn-ar-C'hap, gant an Ao.
Kalvez, — dilhad voulouz rouz, lunedoù ha bodreoù, — tad

Herri. Ne welas dezhañ nemet e revr, evel ma lavarer, er porzh, dirak e di, rak troet oa e gein gant tad Herri, ha damstouet, o reiñ kerc'h d' e varc'h treut, pe, mar kavit gwelloc'h, o plantañ c'hwezh e rodoù e vilo, a-raok mont en hent. Medisin loened e oa an Ao. Kalvez, ha, marteze, e oa o vont war ar maez, da reiñ an dorn d' ur vioc'h da halañ.

Digompagnun ez en em gavas Veig. un eston.

Bravoc'h, pe washoc'h, siwazh ! An diaoul a bevar a oa anezhañ, pa veze Paotr-Teo d' e heul, n' oa mui a bevar, nag a zaou, nag a unan. N' oa ket abeg da viaoual e-giz ur bisig nevez-tennet digant e vamm. Nann ! Mes da grediñ oa e oa aet e wad bev da vale-bro, eus kostez maezioù Kombrid, gant galochoù Paotr-Teo. Lent, dizifenn an Herve Trebern, ha n' eo ket mui dilui, o vont, e-unan-penn, dirak M. Karadeg, hep rezon vat ebet da ginnig dezhañ, evit e vankadenn er skol.

Marteze eo poent ober anaoudegezh, abaoe ar geit ez eus anv anezhañ, gant ar bleiz, gant ar barbaou, a lakae ken diaes spered va daou c'hwil, en ur ger, gant M. Karadeg.

M. Karadeg ?... Un denig du, treut, ha kruk, un tammig, lunedoù war e fri-furch, ha moustachoù dezhañ seul-fonnu-soc'h ma oa disto e glopenn. Ur Frer Sant-Gabriel, ur mestrskol kristen. Ha paotr yaouank kozh, peogwir e oa ur Frer.

E gefridi ? — Lavarit : e verzherinti ? — Deskiñ lenn, skrivañ, jediñ, hag o fater, ouzhpenn, da bemp-ha-tregont pe zaou-ugent sitoian, oadet etre eizh ha dek bloaz. Un dibab penndologed, ar vegenn eus ar pennoù-peul, morzet ingal evel Paotr-Teo, hedro ha dievezh evel Veig, poud da stagañ evel Herri Kalvez, ha bouzar-pa-garent, holl, war-bouez un hanter-dousennig skolidi fur.

Ne zihunent nemet e porzh an ti-skol, evit c'hoari hag en em gannañ. Hopal a ranke M. Karadeg evel ur chalboter war e jav, ha, pep ar mare, ober ur sach d' ur skouarn. — Ar baotredigoù a veze touzet dezho o fennoù, abalamour d' al loened bihan ; c'hwil 'gompren ?

A-wechoù, ez uze pasianted an den paour, ha derc'hel a rae e pinijenn, gant pemp, dek ha betek ugent linenn da skrivañ, ar re o doa torret dezhañ e vuhez ouzhpenn re.

N' eo nemet dre an hent-se, strizh mes efedus, e c'helle gwanaat turmud, prest dalc'hmat da darzhañ, e lakizien, hag o lakaat d' ober van, pa ne ve ken, da selaou e gentelioù.

« Iv Korku, pelec'h out chomet e-pad tri devezh ?

— Me oa e Kombrid gant va zad, moñsieur.

— A, mat !... Ha te, Herve Trebern ?

— Va mamm-gozh... eu ! va mamm-gozh... Menez-Piked...

— ... N' he deus ket desket dit tennañ din karotez. Te 'chomo e pinijenn da beder eur.

Ne dalve ket ar boan fentañ gevier da M. Karadeg. Gwelout a rae diouzhtu pennig ho fri o fiñval. Evel-se e oa M. Karadeg. Ha paeet e oa Veig evit gouzout.

Ha gwelit penaos e oa kont, ar mintin-mañ. Paotr-Teo ebet da vont gantañ, — daou, oc'h hardishoc'h, un tamm mat, — dirak ar mestr-skol, na Leon Gwichaoua, nag Herri Kalvez, na paotrig all ebet eus e glas. Kemend-all a vugale, paotred ha merc'hed, a oa o c'haloupat, en-dro dezhañ, war blasenn an Amann, pep hini war-du e skol !...

Deut oa da Veig ur mell c'hoant staotañ.

Privezioù a oa e porzh an ti-skol, na petra 'ta ! E-lec'h treiñ, dre gorn hent ar Vered, avat, war-du Sant-Gabriel, e treuzas Veig an hent da vont da deurel ur banne dour, en ur c'horn distro eus ar Vanell-Zu.

Kaer, un dudi, e oa ar mintin, gant heol hinon. N' eo ket ur gazeg-koad, mes div, a lakae ar c'hoad da dregerniñ gant o dic'hargadennoù. Lintrañ a rae an delioù gant ar glizh.

Ar Vanell-Zu a zo un hent-karr skosellek, tamm ebet teñvaloc'h eget unan all, a ya davet Keratur, etre kleuzioù strouezhek ar Pennkêr-Nevez, hag un uhel a voger mein vañson, bet savet, bremañ zo pell, gant menec'h Karmez, — Doue d' o fardono ! — da glozañ war o domani. Lakaomp e tape ar vanell disheol ar gwez dreist ar voger gozh, ha setu kavet abeg he lesanv. Anavezet mat e oa ar c'horn-troioù anezhi gant ar gampinoded, a vouzhe ouzh ar skol ; rak treiñ a rae kein da gêr, ha kas a rae da goadoù pin ar Menez-Bihan, a-hed ar stêr, hag ivez da vaner Travenneg, du-hont, e-kreiz ar verjeoù-avaloù hag an alezioù gwez kistin.

Me gred n' eo ket ret lavarout e oa va c'hanfard yaouank erru tost, dedennet e-giz ar spilhenn gant ur mêtouch, da riboul milliget park ar C'hoseg Ruz. Chom a rae da alvaoniñ, e-kreiz an hent.

« Kaoc'h razhed ! » emezañ dre e soñj. — Klevet en doa ar ger divalav-se gant e dad. — « Ne 'z an ket va-unan d' ar skol. Gortoz a rin Paotr-Teo. »

Edo o vont da grapat war ar c'hleuz, da lakaat e sac'h er skoach, pa glevas sklokadeg botoù, ha setu un hanter-dousenn krennarded o trotal e-biou. N' o anaveze ket ; paotred Penn-ar-Pont, marteze, pe Rozig-ar-Mager, hag eus ar skol all, sur a-walc'h.

« Neuze, *frai* bihan, ne zeuez ket ganeomp da Draven-neg, da glask kistin ?

— O, nann ! » a responte Veig. Me zo ' vont d' ar skol.

Re gozh e oa ar baotred-se evitañ. Dek vloaz pe vuioc'h, ha dezho dremmoù kaout yod d' o Fask Kentañ. Ha, da gentañ penn, ne oa ket azv-azv c'hoazh ar c'histin.

Ar guzhiadell, e park ar c'haol saout, n' he doa ket cheñchet plas. Sankañ a reas Veig e sac'h, en toull strouezh, an donañ ma c'hellas. Aet e vije betek ar c'hleuz, gant an aon ouzh al laer. Chom a rae goullo plas Paotr-Teo. Ma kavas ar park divourrus, ha yen.

Ha setu kloc'h ar Frered o tiñtal da c'hervel ar skolidi d' o c'hlasoù. Ober a rae Veig ul lamm. Ha, ken prim e tennas e vrec'h a douez ar strouezh, ma rogas e vañch ouzh un drezenn.

N' en doa ket disoñjet, evit-se, lakaat en e chakodoù e *Intrépide* hag an *Epatant*. Hir eo teir eur da gas en-dro evit ur paotrig outañ e-unan.

« Kaoc'h razhed ! » eme Veig. En-dro adarre ! N' edo ket e voc'h bihan en o c'hraou, betek ma toue ar paotrig e-giz un den bras.

Aet e oa bravik ouzh e goañze, ouzh traoñ ar wezenn faou, evel digwener ha disadorn, Kemeret e oa bet buan ar pleg ! Tomm oa an heol, ur blijadur, evel en deizioù all, ha kiviz da zebriñ, kement ha mar kare, war an douar, dindan

ar wezenn. An avañturioù, a chome dezhañ da lenn war e gelaouenn, o doa feson da vezañ ken fromus hag istor *Ar Gêr Gollet*.

Ne oa roud na liv den, tro-dro, eus ar seurt frioù-spier-se, a c'houlenn digant ar baotredigoù pet eur e vez, ha perak n'emañ ket er skol. Nann ! E-unanik-penn e oa, er c'horn-se eus ar c'hoad don. Nemetañ... hag al laboused disoursi.

Padal, goude lenn ur pennadig, ne gavas na font na madelezh d'an *Torfed war hent La Vera-Cruz*. N'oa ket e spered gant darvoudoù ar Meksik. An heol a oa aet dilufr e sked, moulbennek e oa ar gwez bras. Evel m'o dije rebechet dezhañ, en o yezh vut bezañ eno. Hag ar c'hagn a gazeg-koad ha ne sarre ket he c'hlapenn : A, a, a, a, a ! o c'hoarzhin goap warnañ, paotr ar skol-louarn.

Del ! Aze oa an dalc'h ! Diaes oa e benn, ha n'en doa mui pasianted, peogwir e oa er skol-louarn. Ne wele ket ar bed gant e zaoulagad sul.

Petra ' rae, e don ar c'hoad inouus-se, evel ur broc'h e strad e doull, e-lec'h bezañ er skol ?... Ne vije ket bet debret gant M. Karadeg. Gouzout a rae mat ne oa ket mui roñfled o tebriñ ar vugale. Koñchennoù ar re gozh, ar c'hredennoù-se !

Ma ne vije ket bet aet Paotr-Teo da Gombrid gant e dad, e vije bet er skol, d' an eur-mañ. E pinijenn, marteze, mes er skol.

Mes aet e oa Paotr-Teo gant e dad da Gombrid...

Warc'hoazh, e lavaro da M. Karadeg, evel just hag a rezon, e oa, abaoe digwener, e Kombrid, e ti e voereb.

Hag eñ, ar Veig, gant e veud en e veg, a ranko sammañ tout ar bec'h war e gein.

Ne gred ket deoc'h en doa bet abeg da zistagañ : « Kaoc'h razhed ! » evel un den bras ?

Sevel a rae betek e ziskouarn, a-dreuz renkennadoù stank ar gwez bras, a ziskenne, gant an diribin, war-du ar porzh diwel, storlok gorrek rodoù kirri. Klevout a rae stlak ar skourjezoù, ha mouezhioù rust ar charretourien o vroudañ o roñsed, hag an toumpi a vaged en-dro d'al lestr *Inga Harner*.

Da sotal, ar Pik-Chupennoù, kamm hag all, teod fall hag all, a vo o tic'henaouiñ war ar c'hae, e-lec'h bezañ gant o labour er gêr !...

« Mont a ran war ar c'hae », eme Veig.

N'eo ket souezh ma oa kement a dalabao er porzh. Ouzhpenn an teir-gwern norvegiat, gant ar vaouez bronnoù fonnus dezhi hag ul lost-pesk, e welas ar paotrig ur riblenad bagoù, hed-ha-hed ar c'hae, batimantoù div-wern, kaboterien.

Hanter-drec'h e oa ar mor. Ar bagoù a zegouezhe o font dres rez ar c'hae, mont a rae al labour en-dro a-zevri.

Ar *Malabar*, ur c'haboter du-livet e voñselloù, a oa o tiskargañ glaou-douar Kêrdiz, anvet ivez Cardiff, melloù mein du, a lintre e-giz melezourioù. An div-wern *Verdun* a gemere ur fred barrikennoù goullo, da gas d' an Naoned, mechañs, pe da Vourdel. Lonkañ a rae un trede, en he c'hal, avaloù-douar degaset gant kirri diwar ar maez, ur steudad anezho, a c'hortoze o zro, penn-da-benn ar c'hae, a-hed koad Sant-Lorañz. Gwazed ha merc'hed bigoudenn a haste, gant o sac'hadoù war o c'hein, o tougen, eus ar c'hirri betek ar vag, an avaloù-douar, a rae trouz ar gurun, pa ruilhent e strad ar vatimant.

N'anaveze Veig den ebet eus e garter, e-mesk an holl dud-se. Ne fizie ket re tostaat, evelkent. Chom a reas, gant e zaouarn en e chakodou, — evel ma vezont gant paotred korn ar c'hoc'hu ha paotred korn ar veilh, — da sellout, a-zindan ar gwez evlec'h, ouzh ar c'hirri peder rod o sammañ kuit ar plenk edod atav o tiskargañ eus an *Inga Harner*.

Ur wern-samm, koublet evel ur skourr, war ar wern vras, ha renet gant ur traouilh safarus, a gase, e kal vras al lestr, un hir a fun dir gwevn, hag a sache ac'hano melloù palankadoù plenk, a droidelle, ur pennad, en aer, a-raok bezañ degaset dre gaer war ar c'hae.

N'o doa ar wazed nemet o dougen en tu all d' an hent, el lec'h end-eeun ma oa Veig, hag o lakaat bern-war-vern, da c'hortoz bezañ sammet kuit gant kirri peder rod an ti-heskennerezh.

« Hello, boy !... Boy !... Hello !... »

Da Veig an hini a yae ar galv. Ur c'habiten, gwisket gant mezher glas-du, a rae dezhañ sin tostaat, gant e viz, diwar bourzh an *Inga Harner*. Ur pakad lizhiri e oa gantañ en un dorn. Treuzañ a rae Veig an hent d' ar red.

« You... go... post-office?... », a lavare an den-a-vor, en ur ziskouez e lizhiri ha, goude se, gant un astenn d' e vrec'h, un tu bennak eus kostez kêr, dreist koad Sant-Lorañz. Kromprenet en doa Veig diouzhtu. Lizhiri da gas d' an ti-post.

« Oui ! », emezañ.

Tapet en doa peg er pakad, hag e oa loc'het en ur pennad tizh.

« Hello ! boy... Come back !... »

Trein a rae Veig e benn, hag e teue war e giz davet al lestr. Lakaat a rae dezhañ ar c'habiten ur pezhig gwenn e bozig e zorn.

« For you », eme ar c'habiten, gant ur mousc'hoarzh. Hag adarre :

« Go ! Quickly !... »

« Oui », a responte Veig, kement hag ober.

N'oa ket ret bezañ mailh war ar yezhoù estren, — kaout spered dilui, ya ! — evit kompren e lavare an den dezhañ hastañ buan hag e oa ar pezhig-se gopr e gefridi, — e arc'hant-butun ! — Fustañ a reas, dre dreuz koad Sant-Lorañz, davet an ti-post.

E traoñ iliz Karmez, goude ur sell a-dreñv e gein, e reas un harp da guriuziñ ouzh e bezhig gwenn. Penn un den barvek a oa warnañ, penn ur roue, sur a-walc'h. Lenn a reas, war un tu, un dra bennak evelhen : *H.A.A.K.O.N...* *N.O.R.G.E.* War an tu all, e oa merket traoù ken digomprenus all, gant an niver 2, er c'hreiz.

N'oa ket Veig gouiziekok'h war e bindivigezh nevez Marteze n' oa eus ar pezhig-se nemet ur vedalenn. Nann, koulskoude. N'oa toull ebet ennañ d' e zougen er c'herc'henn. Ha neuze, ur c'habiten-vor n' eo ket ur seurez.

Dre ma piltrote, e klaske — hag e kave — penaos hag e ti piv — e madam Chich en doa soñjet, war an taol, —

kaout, e trok d' e bezh, moneiz rouz, aesoc'h da gontañ hag aesoc'h c'hoazh da frotañ. Fiziout a c'helle war sikour Paotr-Teo evit kas an dispign da vad.

C'hoarzhin a rae outañ e-unan.

« Go », emezañ. Lakaat toaz e go da aozañ kuign-yekell !... « Ma vije bet Paotr-Teo aze, ni hon ije c'hoarzhet avat. Hag hon ije desket añglic. »

Deut oa skoultrenn en-dro d' am eontr dre c'hrad al lizhiri-se da gas d' ar post ; ha trotal a rae, dre greiz ar ruioù, difoultre da vezañ gwelet. Ha, zoken, ma vije bet en em gavet gant moereb Katell he dorn dir, e vije bet leizh e c'henou gant :

« Me zo oc'h ober ur gomision evit an Aotrou Directeur. »

N' oa ket riskl e vije bet meneget gantañ paotr-ar-vag. An "Directeur" — komprenit : Rener e skol ! — a oa ledanoc'h e gein.

Ken buan all, moarvat, he dije moereb Katell kavet da vartezeañ en doa hemañ all mevelien da gas e lizhiri d'an ti-post, kuit da lakaat ur fri-mourouz e-giz he niz, da goll e eurioù klas. Veig, avat, ne yae ket da glask pemp pav d' ar maout ; ha, dre c'hras Doue, pezh gwellañ a c'helle c'hoarvezout gantañ, ne gavas war e hent pig-pe-vran-a-gan eus e anaoudegezh.

E dro a voe, pa 'n em gavas adarre dirak ar c'habiten estrañjour, da sellout mao outañ gant un neuz a embanne fraezh :

« Graet em eus mat ha prim ho kefridi ! »

O pourmen edo hemañ war ar c'hae, en ur fumañ e sigarenn.

« Good fellow ! », emezañ d' e vevel yaouank ; hag e reas dezhañ un allazig dindan e chink.

« I... », emezañ. « Me... ». Distagañ a rae : « Ai... Mi... », en ur stokañ e vruched gant e viz... « A son... a boy... like you. »

Hag e kase e viz eus tu egile bihan. Komprenit e tisplege e oa tad d' ur c'hanfard eus oadoù Veig.

« Oui ! », a respontas hemañ, a-youl vat, naren avat hep merzout e oa d' ar c'habiten-se treid bras spontus en e votoù-ler. Gwir ivez 'ta e oa ken uhel bremaik ha tourtan Penn-Marc'h.

Eus e du, e wele an den e oa takonet ha peñseliet dilhad ar paotrig, hag, ouzh e vañch, rogaenn an drezenn yud.

« You... poor ? », e c'houlenas. Distaget en doa e c'her : pour.

« Oui ! beaucoup. »

Va Doue, ya ! Veig a gave mat pour... hag e soñje dezhañ e komprene ar saozneg.

Darbet voe da Veig ober un darvoud, e-pad e verenn. En ur dennañ e vouchouer eus e chakod, — evit ur wech ma sec'he e fri estreget gant e vañh, — e teuas gantañ ar pezhig gwenn. E douar e oa al leur-di, a drugarez Doue. Ne voe nemet skouarn dano va c'hwil o klevout an trouzig dister, a reas, o ruilhal dindan an daol. Ne voe ket graet van ouzh e welout o turlutañ etre treidigoù e c'hoarezed.

« Te zo o klask da fortun ? », he doa goulennet Gaid, koulskoude. Ha, feiz ! m' he dije gouezet ar plac'h kaezh e oa kouezhet dres var ar pik !...

« Añ ! », en doa grozmolet he breur. N' oa ket bet seizhdaletoc'h o frapañ e dreid er-maez.

N' oa ket da dortañ. Dav oa en em zizober, e mod pe vod, ouzh an tamm traoù gwenn-se, ken talvoudus, hep ket a var, mes ken aes da goll ha, gwashoc'h, da zedennañ goulennoù, ha da vagañ reustl ha trubuilh, ma veze kavet en e gerz.

En em zizober ouzh ar *fortun* -se, a dra sur ! N' oa ket kant mod d' en ober, mes unan : ober dispign ganti.

Gant Paotr-Teo d' e heul, e vije bet hardizh e-giz un Turk da vont d' e « baseal », e stal Madam Chich, da skouer. Honnezh ne wele ket sklaer.

Mes ne oa ket aze. Hag, e-unan-penn, ne oa eus Veig nemet ar pezh a oa : ur paotrig eizh vloaz, hep un hanter re a fiziañs ennañ e-unan. Ouzhpenn, sammet ma oa e goustiañs gant pouez e vankadennoù er skol ; n' am eus lavaret gant ar morc'hed d'e vankadennoù.

Goude prederenniñ un tamm :

« Me zo ' vont », emezañ, « da guzhat va arc'hant en un tu bennak, da c'hortoz ken na vo distro Paotr-Teo. »

Degemer laouen e kavas er c'hoad digant al labous glas dic'hargadenner : A, a, a, a, a !... Sell aze ul loen-nij, hag a rae foultre kaer gant skol pe arc'hant ! Pigosat ha c'hoarzhin, c'hoarzhin ha pigosat, ne rae ken.

Flac'hotañ a reas Veig e bezhig gwenn e strad e chakod.

« Me zo o vont da guzhat va arc'hant en un toull », emezañ adarre.

Hag eñ davet al logig plenk du, — goudor gwardian ar c'hoad, gwechall ; mes n' oa mui gwardian ebet, — harpet ouzh ar voger uhel a gloze war ar Vanell-Zu. N' oa na dor na prenestr war al logig, mes n' eo ket toullou a vanke ennañ etre mein ar voger gozh, dindan he gwisk dule, man ha krak-raden, hep kontan ar melc'houed-krogennek.

Nann ! Dont a rae eno re a dud, yaouankizoù, dreist-holl, hag a chome aze ur viken d' en em lavarout traoù. Piv a virfe outo c'hoari o frioù-furch ? Fiziañs ebet da gaout.

Ur skarr en ur wezenn ?...

Kalz gwez kozh a oa, e-mesk glasvez ar c'hoad : evlec'h, derv, onn, faou, kelenn, lore, ha plant estren n'ouied anv ebet dezho, bet lakaet war an dorgenn-se, Doue oar pegeit 'zo, gant ar venec'h, gwez kantvedel, diarnzeret, gant skourroù marv, dizeil, heñvel ouzh eskern gwenn, hag o kinnig kouezhañ war ho kein.

Un talgos derv a welas, aet da dont ha da vrurun, gwi-gnenn ha derc'h, ha ne zalc'he eus e sav, nemet war-bouez e rusk. Divouedet an drojenn anezhañ e-giz ur pesk difastet. Un toull-kuzh eus an dibab, ledan, don, ha bras a-walc'h da lojañ teñzor Ali-Baba.

Nann ! Birviñ a rae, er gleuzenn-se, re a vleizi bihan kammlost, re a verien.

« Blev ! », eme Veig. « Ar gwellañ « int » kuzhet eo e-barzh va chakod. Me 'daolo evezh. »

Dont a reas soñj dezhañ eus ar c'habiten bras.

« Marteze vo lizhiri all gas d' ar post ! »

Da grediñ e vije bet e oa an den-a-vor o c'hedal e anaoudegezh nevez, war ar c'hae. Marteze ivez, ne ouie ket da belec'h mont, gant e enderv, da uzañ e amzer, ma n'oa ket den da zaremprediñ an ostalerioù. Mes kenderc'hel a rae da dennañ moged eus e sigarenn, en ur bourmen hed-ha-hed ar bagoù, leun a drouz atav hag a labour.

Kirri a zegase postoù-min, a ziskarged hag a vernied ouzh o sav pe en o hed, nepell diouzh ar plenk, dindan ar gwez evlec'h. Ur fred, moarvat, evit mengleuzioù glaou ar Saozon. Ne yafe ket an *Inga Harner* dilastr eus porzh Pont-'n-Abad.

Ober a reas an den ur mell mousc'hoarzh ouzh Veig, p'en gwelas oc'h astenn e benn, e korn ar bernioù plenk.

« You... never... school ? » emezañ, ur wech bennak.

« Noñ ! » a responte Veig an taol-mañ. Kaoz ar skol a oa, sur a-walc'h, gant ar c'habiten bras. Ken hegarat e oa an den-se, m' en dije bet mezha ober ur gaou, ha respont :

« Oui ! Mont a ran d' ar skol. »

Graet en doa ar c'habiten ur c'hruz d' e abrantoù, da verkañ e souezh fallgontant.

« Sorry ! » emezañ.

« Oui ! »

Veig, eñ, a vousec'hoarzhe.

Ur farsite, evel ma lavar Abeozen, e oa ar gwelout hag ar c'hlevout eus an daou vignon nevez, ken disheñvel e oant.

Ar Skandinaviad, ur skrivellleg tost daou vetr sav dezhañ, ha war-dro daou-ugent vloaz, en doa ur c'haer a bennad blev melen ha, war e zremm maget mat, divjod roz, flour ha mirzin e-giz re ur wreg yaouank. E zaoulagad e vije bet lavaret e oant bet soubet er mor, ken glas e oant. Ne lenned war e neuz nemet madelezh laouen ha landreantiz. Mes doujañs en doa unan d' e dreid ha d' e zaouarn, heñvel ouzh div c'holvazh. Un tad a familh, douget d' ar vugale, hag o kavout, hep mar ebet, — gant ul liv disheñvel, evelato, — e lamponig Pont-'n-Abad, un damskeud eus ur c'hanfard all, a oa ouzh e c'hortoz, du-se, pell, war ribl ur fjord a vro-Norvej... hag a yae d' ar skol, hennezh.

Veig, eñ, a oa eus gouenn ar gorriged rouz iziliet-munut, fas brizhoù, fri savet, lagad lemm liv ar c'histin dezhañ, hag arc'hant-bev en e wazhied.

Plijet en doa diouzhtu d' ar Viking ramz, hag anat e oa e vourre hemañ en e gompagnunezh.

Kavout a raent an tu d' en em gompren, well-wazh. Gwir ivez 'ta e talc'hent kaoz gant o daouarn muioc'h, kalz, eget gant o zeod. An iskisañ oa eo e komze an Norvegiad saozneg ouzh ar paotr bihan. E yezh etrevroadel an dud-a-vor, na petra !... Dishiliañ a rae e bozioù gant parlant gorrek an dud diakuit war ar yezh emaint oc'h implijout. Kemend-all, pe gen nebeut, en dije komprenet egile, ma vije bet dibunet dezhañ norvejeg.

Veig, eus e du, a yae d' an hini bras e galleg — ken dianav hag ar brezhoneg d' an Norvegiad, — ur yezh estren ivez, edo o komañs deskiñ er skol. Perak ? Veig ne vije ket bet deut d' e soñj brezhonegañ ouzh un den n' oa ket eus ar vro. Galleg e ranker « preg » ouzh ar re giz-kêr hag ouzh an estrañjourien. Ne rae nemet heuliañ ar skouer a wele en-dro dezhañ.

Ur farsite, pa lavaran deoc'h.

Fumet oa ar sigarenn, ha padet a-walc'h he doa ar bourmenadenn dindan ar gwez. Mont a rae ar c'habiten bras war-du e lestr.

« Come ! », emezañ da Veig.

Hag hemañ war e seulioù, e-giz ur c'hi bihan. Ober a rejont tro ur palankad plenk, a oa o troidellat a-us d' ar c'hae, ha, dre un dreuzell brañsigellek e lammjont e bourzh ar vatimant.

Piv a oa c'hwezhzet e bluñv, ma n' eo ket Veig Trebern ? Ha piv a c'hoarzhe gant ar genou a vije bet stag ouzh Paotr-Teo, ma vije bet gwelet gantañ e gamarad o rampañ war ar pont, reut e-giz ur martolod war hentoù an Indez ?...

« Come ! », eme adarre ar c'habiten, en ur sankañ e toull ur skoutilh. Ha Veig ha diskenn d' e heul, dre ur strizh a skeulig houarn.

« Sit down ! », en doa lavaret ar c'habiten, en ur ziskouez d' ar paotrig korn ur gwele-rez.

N' oa ket bras ar gambr, hag ar c'habiten a yae e benn, pe damdost, da stokañ ouzh ar solier. Ar solier-se hag ar speuriniñ a oa e koad gwerniset-lufr, liv ar c'histin. Ar pezh a blijas da Veig a voe ur fanol a-ispilh ouzh ar solier, hag ivez estajerennoù al levrioù.

Mont a rae ar c'habiten d' un armelig, hag e tegase war an daol ur voutailh, ur werenn, hag ur voest houarn-gwenn. Kargañ a rae ar werenn gant ur boeson alaouret.

« Skaul ! », emezañ da Veig, en ur c'hoarzhin. « No good for you. » Ha, paret e sell, diflach, war daoulagad ar paotr, e lonkas e vanne, en un taol.

« Skol ?... Ne fell ket dezhañ roiñ din da evañ, peogwir n'on ket aet d'ar skol », a soñjas Veig. « Ingal eo din. Ne gavan ket mat odivi. »

Sevel a reas ar c'habiten golo ar voest houarn-gwenn. Leun e oa a wastell sec'h. Tro Veig a voe d'en em regaliñ : — Chesus ! Ma vije bet Paotr-Teo aze ! — tra ma karge egile e werenn en-dro.

« You want be a sailor ? » a c'houlenne, en ur c'hoarzhin. Dalc'hmat e c'hoarzhe an den kaer-se.

« Noñ ! » eme Veig.

Sae lor ?... Sellout a rae ouzh e zilhad. Da gentañ, n' oa ket mui e sae abaoe ouzhpenn tri bloaz, ha, ma oa roget e vañch, n' oa ket lor e zilhad... Ar c'habiten-se a oa, marteze, ur godiser en e vod.

Etretant, e oa pignet ar c'habiten dre ar skeul serzh, hag e oa deut en-dro, ur pennad goude, gant ur pakad bihan.

« For your... mammy », emezañ, en ur roiñ ar pakad da Veig.

« Ma mammig ?... Oui ! Merci !... » Ha Veig ha c'hoarzhin ivez. Un drugar penaos e komprene mat.

« Go now !

— Go, adarre ?... An dra-se a zo evit larout din mont d' ar gêr.

Ken laouen e oa o fustañ penn-da-benn ar c'hae, gant ur pakad da gas d' e vamm, hag aet soñj M. Karadeg kant mil

bell diwar e spered, ma oa erru tost d' ar Veilh-Vras, a-barzh na zeuas soñj dezhañ eus e sac'h-skol, skoachet, abaoe ar mintin, e park ar C'hoseg Ruz.

N' oa ket evit lezel ar sac'h-se da dremen an noz en ur parkad kaol. Ne welit ket e kouezhfe ar glav ? Ne welit ket e vije krignet gant al logod-mors ? Pe laeret gant n' oar den piv ?

Ober a reas tro. Un dra vat eus ar c'hentañ a voe evitañ an dale-se war hent ar gêr. A-hend-all, e vije aet, ar berr-boell anezhañ, skañvbenn ken e oa, da glask e verenn-vihan kalz a-raok peder eur.

« Sellit ! mamm, petra 'm eus bet digant ur c'habiten !

— Petra ar pakad-se ? » a daole Gaidou, hep koll ur munut da foeltrañ ar pakad da welout petra oa e-barzh...
« O ! mamm. Ur c'hilo sukr !

— Ur c'hilo sukr, siwazh ?... Gortoz un tammig 'ta, Veig ! »

Veig, gant e zent en e damm bara, a oa o lakaat lev etrezhañ hag e di, hep muioc'h a ziskleriadurioù. Aes kompren perak.

Mamm : « Da belec'h 'maout o vont gant kement a bres ? »

Veig : « Da welout hag eñ eo deut Ifig en-dro eus Kombrid, mamm. »

Gaid : « Veig ne gac'hfe ket, ma ne vefe ket Ifig Korku da heul e revr. »

Mamm : « Hag ar pakad sukr-se ? »

Veig : « Laret 'm eus deoc'h, mamm. Me 'm eus bet anezhañ gant kabiten ur vatimant. »

Mamm : « Hag eo gwir ar gaou-se ? »

Veig : « Gwir, mamm ! Deuit ganin da c'houl gantañ, ma ne gredit ket ac'hanon. »

Gouzout a rae mat va ibil ne vije ket aet e vamm da glask keit-all. Na Gaid. Ne welit ket Gaidou o « trailha añglic'h » gant ar c'habiten bras ? Da greviñ !...

Veig : « Ya ! mamm. Goude ar skol, ha peogwir e oan va-unan, e oan o tont d' ar gêr dre biou ar c'hae, e-lec'h dont dre greiz kêr. Me oa o sellout ouzh ur vatimant vras, p' en deus goulennet ganin ar c'habiten mont da gas d' ar post ur mell pakad lizhiri. »

Mamm : « A, ya ? »

Veig : « Hag en deus roet din ar sukr evit ar gomision. »

Mamm : « Me gav an dra-se drol, skragn e-giz m' eo ar Saozon. »

Hag evel eviti hec'h-unan :

« Gwir 'ta ivez, marteze n' eo ket Saozon tud ar vatimant-se. »

Gaid, gant he zeod flemm : « Laret 't eus mersi, d' an nebeutañ ? »

Veig : « Sur 'vat, c'hwi ! »

Dirouestlet e oa bet e neudenn gant Veig da sabatuñ, mes bet en doa tomm d' e ler.

« Ifig n' emañ ket aze ? »

« Nann, Herve bihan. N' int ket distro. Pell emañ Kombrid, te oar. »

« Me teuio en-dro, moereb Chann. »

Paotr-Teo a oa e gerent o chom, un tammig izeloc'h, er Waremm-Mên, eget tud Veig, war ul leurig enk, a-dreñv ostaleri Mar-Janig Kourtez, dirak al lenn, eus kostez Pont-Gwern.

Kentañ mall Veig, goude e verenn vihan, a oa bet redek betek ti Paotr-Teo, da gontañ an doareoù d' e gamarad.

Da c'hortoz distro Kombridiz e yae Veig da vrasaat kelc'h moused all eus traoñ ar ru, a oa, dirak al lenn, o chalkañ o merenn-vihan ivez, en ur selaou Fañig Vras, un askell-groc'hen a zek pe unnek vloaz, a ouie anezhi war ur bern traoù.

« ... Ha va breur Per-Mari a skriv war e lizher n' en deus gwelet morse ur vro ken brav. Ar menezioù a zo gwenn, hag ar mor a zo glas, glas, ken eo violez. Du-hont eo tomm, ken e rost... »

« Pelec'h emañ da vreur, Fañig ? » a c'houlenne Veig.

« Te oar emañ oc'h ober e amzer 'barzh ar « Marine ». Martolod e Brest. Bremañ emañ e Toulon, e bourzh ur vatimant-brezel, al *Liberté* hec'h anv. E porzh Toulon, 'z eus batimanchoù-brezel ken ledan ha ken hir, a lar va breur, ma ne vefent ket kad da droiñ, aze, war al lenn.

— Oi !... » a laoske ar selaouerien yaouank, diwar o bam.

« Hama ! » a daole Veig, fougennañ. « Me zo o tont ivez eus ur vatimant vras, war ar c'hae, unan a deir gwern.

— Añ ! » eme Fañig, drouklaouen, un tammig, o welout e troc'hed ar geot dindan e votoù. « Te zo bet e bag an Añglichen, te ? Te oar añglic'h ?

— Añ ? » eme Veig d' e dro.

« Te lar « yes ! » dezho ?

— Nann ! Perak ?

— An Añglichen a ranker atav larout « yes ! » dezho.

— Penaos ouzez an dra-se, te ?

— Me ? Me oar añglic'h. Mes, evit preg añglic'h, e rankez lakaat da c'henou a-dreuz. Dal ! e-giz-mañ ; hag e larez : Yes, bono tabako !... Añ !... »

Hag e rae ar Fañig ur sav d' e chink, lorc'h an trec'h en e lagad.

« Petra zinifi an dra-se ? » a c'houlenne ur c'hrennardig.

« An dra-se a zinifi : Me gav mat butun... 'T eus ket goulet « rokin » ganto, « frai » ? An Añglichen a fum « rokin » c'hwez-vat, hag a zo blaz ar mel gantañ. »

En em lakaat a rae daou pe dri fri-karn da skrognal, leizh o dent, evit ar memes rezon, aes oa gwelout.

« Ha neuze », eme unan anezho, « eo gwelloc'h da vutun añglic'h eget ar « bleoñ » kistin. Bleo-Rodet amañ en doa tapet ar foerell ar miz all, gant ar butun marmouz, ken a zivere hed e c'haol. »

Me lavar deoc'h e voe c'hoarzhadeg gant va mourouzeien.

« Genaoueg ! » a droc'he ar Bleo-Rodet, mezhekaet. Pezh ne vire ket outañ da c'hoarzhin gant ar re all. Na petra !...

Ar wirionez oa ! Ha seurt darvoudig a c'hell c'hoarvezout gant forzh piv ; n' eo ket gwir ?

Veig n' oa ket stag e galon, e nep feson, ouzh ar basianted. A-barzh pell e voe rentet en-dro adarre, dre ar vanellig, e ti mamm Paotr-Teo, evit klevout ar memes respont :

« Nann, va faotr bihan ! N' eus den 'bet c'hoazh. Amzer zo, Herve bihan. »

Amzer o doa marteze an daou valeer-bro. An noz, avat, a zeu abred, e fin gwengolo, ha Veig e oa poent dezhañ tostaat d' e glud.

En em lakaat a rae mamm Paotr-Teo da c'hoarzhin, p' en em gavas Veig en he zi, evit an trede gwech. N' oa ket evit gouzout, evel just, pegement a draoù, ha ken pouezus, en doa hemañ da zisplegañ d' he mab.

« Me bari », emezi, « ne gouski ket parfet, ma ne welez ket Ifig, a raok mont da da wele... M' en dare ivez pelec'h int chomet.

— Marteze int kollet.

— Marteze 'vat. Gant ma ne chomint ket da lojañ e Maner Lonk-Avel !

— Maner Lonk-Avel zo un hotel, moereb Chann ?

— Hag unan bras, Herve baour ; ar brasañ zo er bed-holl, ha ken uhel, ma ne welez, pa savez da benn, da sellout ouzh e solier, nemet ar stered, pe ar c'houmoul. »

Dihuniñ a reas Veig, p' edo e vamm o vont, gant ul liñse-riad krezioù, he golvazh, ar broust neuc'h hag ur mell tamm soavon marseilh.

« Setu, Gaid », e lavare d' he merc'h kozh. « Mont a ran betek poull Kanapet gant ar bec'h kouez-mañ da walc'hiñ. Labour digrasañ 'm o betek kreisteiz. Taolit evezh eta war Wenole bihan, ha n' e lezit ket da leñvañ. Na zisoñjit ket kas ar paotr d' ar skol !

— Sevel a ran diouzhtu, mamm », a daole Veig. « Hag ez an da glask Ifig da zont ganin d' ar skol. »

Barr oa va eontr gant an nerzh-kalon, gren ha gardis, e-giz dec'h vintin.

Ha, gwir ! gant Paotr-Teo « da heul e reor », evit komz evel e c'hoar, e kave dezhañ e oa aes mont dirak M. Karadeg, ha tennañ dezhañ ur gaer a garotezenn.

« Ni oa, hon daou, e Kombrid, abaoe digwener, M. Karadeg. N' eo ket gwir, Ifig ? — Eo ! » a respontfe Ifig.

N' oa ket diaesoc'h eget se.

Ul lip pav-kazh d' e veg, e soubenn-gafe kaset war-draoñ e teir loaïad, ha kuit da gerc'hat Paotr-Teo. Nag a draoù o dije da gontañ an eil d' egile penn-da-benn an hent !

« Deus tre ! Herve bihan. Deus da welout va daou feneant ! »

Kerkent hag erru war dreuzoù dor ti Paotr-Teo, setu petra a glevas Veig eus genou Chann Grall a oa da vat o skubañ leur he zi. Teñvalik oa an ti, rak moget vras magazin bleud ar Mell a vire ouzh sklerijenn an heol da zont e-barzh.

« Ha 'oas, kantolor ? Emaout o vont d' ar skol ?

— Ya ! toñtoñ Lan. Bonjour, toñtoñ Lan. »

Azezet oa Lan Gorku ouzh taol, gant ur voutailhad sistr hag ur volenn dirazañ. O klask rollañ ur sigaretenn edo, mes gwall-grenañ a rae e vizied. Ober a rae ur mousc'hoarzh ouzh kamarad bras e vab.

« Te zo ur paotr fur ac'hanout », emezañ.

Falloc'h eget tevel en doa graet tad Paotr-Teo, rak Chann Grall eo a zistage ar respont :

« Fur, sur. N' eo ket diaes d' ar vugale, hiziv an deiz, bezañ furoc'h eget an dud vras, p' eo un digarez d' ar re-mañ da goll o devezh an disterañ bramm a chom a-dreuz etre o gaol.

— Veve ! Veve ! Deus amañ 'ta ! N' ez an ket d' ar skol, ar mintin-mañ. »

Dont a rae ar vouezh eus kogn teñvalañ ar gwele bras gant ridojeier, ha ne weled da Baotr-Teo, — rak eñ an hini a c'halve, — nemet pennig e fri ha bourbell e zaoulagad sart, e-maez eus al liñserioù.

« Nann ! Ne yelo ket Ifig d' ar skol, ar mintin-mañ. Skuizh-marv eo, a lavare e vamm. Noz-dall oa dec'h, pa int degouezhet er gêr eus Kombrid. »

« Petra 'n eus laret dit M. Karadeg, dec'h ? » a c'houlenne diouzhtu Paotr-Teo, mall gantañ anaout ar c'heleier.

Krapet oa Veig er gwele, goude bezañ stlapet, dindan ar skabell, sac'h-skol ha botoù-koad, hag e sile e plegig skouarn e geneil :

« Stank da c'henou ! Me n' on ket bet er skol, dec'h. Kontañ a rin dit. Mes pas amañ. Ma ouifez tout petra zo c'hoarvezet !... »

« Ur chañs eo da lod kaout krouadurien eizh vloaz da ziskouez dezho o hent », a gendalc'he Chann Grall evel outi hec'h-unan, hogen a vouezh uhel. « Hanternoz, ma n' eo ket ur vezh ! Tost da hanternoz, p' eo en em gavet va aotrou er gêr, gant ur paour-kaezh bugel eizh vloaz ! »

Ar c'hontrol-bev eus he gwaz e oa Chann Grall, mamm Paotr-Teo.

Eñ, korfet-ponner ha fetis, ha ganet, 'm eus aon, d' ur sadorn da noz, en doa atav amzer da sevel eus taol, ha ne dorre ket penn an dud gant e varvailhoù ; ar mintin-mañ, nebeutoc'h c'hoazh eget boaz. Dornet-mat, evelkent, pa groge en ul labour. Evel, da skouer, p' en doa fardet d'e bried bugale yac'h. N' oa ket an Ifig, — ar vi, a-hend-all, diwar e dad, — an divalavañ eus an torrad.

Hogen, Chann Grall ne vijen ket bet souezhet e vije bet mamm, kentoc'h, da Veig Trebern !... Du, askornet-moan, rafin ha difreüs, ne bade ket en he flas. Ha, gwir vigoudenn Penn-ar-Pont ma oa, libr-a-deod, troet, peurliesañ, da farsellat diwar-benn gorregezh — korf ha spered — he « feizant dir teir bouloutenn ».

An taol-mañ, avat, e kave e oa aet Lan re bell ganti o chom da gornozat ken diwezhat. Abalamour d' ar paotr bihan, eveljust. Rak gouzout a rae mat-tre e vije deut hec'h oustilh d' ar gêr gant e jiletennad.

Lan Gorku, hep respont, — brevet e oa, korf ha youl ; ha petra en dije respontet ? — a skarzhe e volenn, a dape ar voutailhad sistr, a oa boulc'het mat, hag a zamgarge en-dro e volenn. Ur skrab a rae d' e benn, a-raok kas d' e vuzelloù an evaj melen distanus.

« Debron 'z eus, Lan Gorku ? » a daole e wreg gant ur c'hoarzhig-goap trenkik. « 'Zlefe mont da di ar perukenner da lakaat touzañ da benn, e-giz da vab. E-giz-se, ne 't eve ket mui droug-blev !

« Ev gant yec'hed ! Lan Gorku. Da vugale a ray gant dour d' o merenn. Boazet int. »

Ret eo hel lavarout, ouzhpenn ar paperoù e oa bet o kerc'hat, degaset en doa gantañ ar C'horku, eus Kombrid, peder boutailhad sistr hag ur... sec'hed spontus.

N' oa ket aet d' e labour d' an uzin soud, ha n' oa ket c'hoazh eizh eur, m' en doa torret he beg d' an eil boutailhad. Bihan oa atav e zaoulagad, hag, a-hend-all, habask dre natur, ne glaske ket rebardiñ. Ouzh pav an daol eo e komze Chann Grall :

« Heñvel, holl ! Trelatet dirak tal ar varikenn, e kement karrdi 'zo ! An dra-se a ya d' an oferenn. Mes an devotañ

int eo da gement chapel gant ar bod iliaev a gavont hed o hent. Eno eo blazet gwelloc'h an dour benniget... »

Anaout a rae ar baotredigoù an donigenn, ha ne raent ket nemeur a van ouzh kunujenn Chann Grall. E ti Veig, e veze heñvel alies. Goulenn a rae, memes tra, goustadik :

« *Kech* oa da dad, dec'h ?

— N' ouzon ket, Marteze. Eñ zo eus Kombrid, hag anavezet eo gant tout an dud, du-se. Me oa e ti va moereb.

— Ha 't eus bet traoù mat da zibriñ ?

— N' oan ket kad mui. E-pad ma oa va zad er presbital ha n' ouzon ket e pe lec'h all, me oa gant va moereb o c'horor ar saout, ha 'm eus bet ur mell skudellad laezh tomm, ha, goude, 'm eus debret avaloù ha per mat, mat, ken oa gleuc'het va dent...

— Oi !...

— ... Ha, d' am merenn, e oa ur pezh alumenn vioù, ha kig-sall, ha sistr da evañ, ha kafe mat.

— Che ! va Doue. Ha 't eus debret hag evet kemend-all a draoù ? a droc'he e vamm, en ur c'hoarzhin, rak ur skouarn he doa ivez ouzh diviz an daou varbilherig.

— Marteze e oas meze ivez, e-giz da dad paour », a farse Chann Grall, tra ma yae d' an armel da cheñch tavañjer

« Hi ! hi ! hi !... » a rae an daouig, o virvilhat.

« ... Hag e komprenan gwelloc'h perak out ken skuizh. E-giz da dad paour...

— Bourouell ! » a c'hrozmoles Lan, imor o sevel ennañ, a-benn ar fin, diwar deñsadoù e wreg.

« Chom 'barzh da wele da gemer da repo, va mabig bihan.

« Mes, te, Herve bihan, ha soñjal a rez en eur ? Eizh eur eo, bremaik. Diwezhat e vi er skol. »

Ya ! feiz 'vat ! Ar skol ! Gouzout a rae Veig e ranke mont d' ar skol. Hep Paotr-Teo adarre. An dra-se oa ur son all.

Pep ki zo hardizh en e di, evel ma lavarar. Ha setu Paotr-Teo o sevel e vouezh... hag o lezennañ, mar plij !

« Veve, chom ganin ! »

Veig ne c'houlenne ket gwelloc'h. Setu pezh a ziouetas Chann Grall, moarvat.

« Ya ! » emezi, en ur c'hoarzhin. « M' en deus c'hoant !... Chom amañ gant Ifig, mar karez, Herve ! E-giz-se e kavo berroc'h e amzer, e-doug ma vin er c'hoc'hu o prenañ danvez merenn.

— Ya ! moereb Chann.

— Te laro d' ar mestr e oas bet ivez e Kombrid. Evit ur wech, mechañs, ne viot ket debret gantañ. »

Ha setu Veig sabatuet-mik. Ur vaouez kozh — tregont vloaz, d' an nebeutañ, e oa mamm Paotr-Teo — he doa bet ar memes meno hag ur paotr bihan, evit touellañ M. Karadeg !... Lavarout e oa bet e Kombrid !... En desped d'ar wirionez !

« Ya ! moereb Chann. Me chomo gant Ifig. »

Na petra ! Ma oa mat ar rezon evit an eil, perak e vije fall evit egile ?

Edo Lan Gorku o vont da heul e wreg.

« Te zo o tont ganin d' ar marc'had, va den yaouank ? » a c'houlenne Chann, didruez. « Kemer ar baner, neuze.

« War an tu-se e yan, mes pas ganeoc'h, atav.

— Kavout a ri traoù eus da rañs, e-tal ar c'hoc'hu pe e korn ar Veilh-Vras, da fogasiñ dezho da gorfad. Ar re-se ne 't o rebech ebet diganto. Er c'hontrol !... »

« Petra zo c'hoarvezet gant da dad ? Eñ zo bet o 'n em gannañ ?

— Nann, te !... Mes laret 'm eus dit, anavezet eo va zad en holl c'hêrioù diwar ar maez, war hent Kombrid. Er c'hontrol, en imor vat e oa kenañ-kenañ. Kanañ a rae memes e karrdi Kerzeoc'h, gant peizanted all, en ur dañva sistr ar barrikennoù. I a oa o lardañ ar gwaskelloù, da fardañ sistr nevez, pa vo bet dastumet an avaloù azv. Goude, e oa aet da c'hourvez e-tal ar bec'holo, hag e oa kousket diouzhtu.

— Ha te ?

— Me ? Me oa azezet en e gichen, war ar plouz. Ur wech, e oa deut ar c'hi da c'hwesa va zad, peogwir e roc'he. Laret 'm eus dezhañ : — Tê ! Torc'h-ki ! — Hag eo aet kuit. Nemet, noz teñval-dall oa, p' eo dihunet va zad.

— Oi !... Ne 't oa ket aon ?

— Aon ?... Me oa gant va zad...

« Ha te, Veve ? Te lar n' out ket bet er skol, dec'h ?

— Me gave gwelloc'h gortoz ac'hanout. Mes pa ouezi pelec'h on bet ha petra 'm eus bet !... »

Gant doujañs ur beleg o kas an Aotrou Doue d' un den klañv, e tigare Veig e zorn war ar pezhig gwenn, a oa o teviñ dezhañ e voz abaoe ur pennad. Ober a rae Paotr-Teo e zaoulagad ront.

« Te oar, *frai* ! » a zisplege Veig. « Ar vatimant vras teir gwern... Ar gabitened vras... Hama ! Me zo bet e bourzh ar vatimant-se gant unan eus ar gabitened. Ha 'm eus bet an dra-se digantañ.

— Arc'hant eo ?

— Petra 'gred dit ken ? »

Displegañ a rae Veig dre ar munut, en ur gaeraat c'hoazh an daolenn, penaos en doa graet anaoudegezh gant an den-a-vor chichant. Estlammet oa Paotr-Teo.

« Ma vijez aet d' ar skol, ne 't ije ket gounezet kemend-all a arc'hant », emezañ, trellet e sell.

— Kerkent ha ma vi savet, ez aimp e kêr da brenañ traoù. »

O vertuz an arc'hant ! N' o doa ket ezhom m va daou gantolor eus sistr Kombrid da dommañ dezho o fenn. Garm, kri ha c'hoarzh e-barzh ar gwele ! Sevel a rae Paotr-Teo war e bastell, hag ez en em lakae d' ober toutig-penn war ar c'hol-c'hed. Veig a rae chiboud, ha, goude-se, ar berenn, gant e benn en traoñ hag e dreid ouzh ar voger, ha, goude-se, bountadegoù ha gouren. Ma horjelle hag a stlake ar ridojeier, prest da freuzhañ.

Pa voe klevet botoù-koad Chann Grall o sklokal er vanelig a gase d' al leur. Amzer ur c'hwitelladenn, e voe Paotr-Teo dindan e zilhada-wele. Prim oa Paotr-Teo, pa gare.

« Fur oc'h bet, bugale ? »

Veig a c'hoarzhe. N' oa ket da souezhiñ, o vezañ ma veze dalc'hmat o c'hoarzhin.

« Ya ! moereb Chann.

— Mamm, bez' e vin c'hoazh skuizh, goude kreisteiz ? » a daole Paotr-Teo.

« Che ! va mabig paour. Dit eo da c'houzout an dra-se gwelloc'h evidon. Evit petra e c'houlez an dra-se diganin ?

— Evit mont d' ar skol asamblez gant Veig, mamm.

— O Itron Varia Garmez benniget ha Sant Jakez Lannvorc'h ! Me 'm eus ur mab fur, avat, a c'houl mont d' ar skol, e-lec'h chom en e wele da ziskuizhañ. Petra an diaoul 'm eus graet d' an Aotrou Doue evit kaout ur mab ken fur ?... 'Benn merenn, e vo gwelet, va c'hrouadur. Da c'hortoz, chom brav aze, e-barzh da wele tomm, ha diskuizh ar muiañ ma c'helli. »

Madam Chich — Madam a veze lavaret d' ar maouezed e giz kêr, kran pe get, pe, mar kavit gwelloc'h, d' ar re ne oant ket bigoudenned, — Madam Chich eta a rene, e ru Kereon, kichen ar c'hoc'hu kozh, war ur voutig madigoù mat ha marc'had-mat : chokolad, karamel, boñboñioù, regalis, per — glas ha fouest — prun, pechez, mesper, spezad, avaloù, kraoñ, ha lipouzerezoù a bep seurt, lakaet e gwel e paneroù ha kachedoù pe glozet e podoù gwer.

Mechañs e oa bet Madam Chich yaouank gwechall, ha dilikat. Hiviziken, avat, e oa anezhi un itron war an oad, loudourenn un tammig, poan dezhi o tougen he monumantad kig laosk. Aet e oa diegus he skouarn. Berrwell ouzhpenn, rankout a rae kemer daou re lunedoù evit lenn.

Ar pep niverusañ eus he fratik — ouzhpenn ar gwesped hag ar c'helien a oa eno er baradoz — a veze amprevaned ar skolioù, a zeue d' he stal da gargañ o chakodoù evit... lakaomp ur bennozh Doue, e-doug ma veze un digourdi eus ar vandenn o terc'hel evezh ar vaouez kaezh gant ur brenadenn dister.

Veig, bremañ m' en doa adkavet e hardizhegezh war un dro gant e letanant, a oa e bal kentañ tennañ moneiz rouz eus e bezhig gwenn.

Un draen a oa. Ne gemere ket an holl goñversourien arc'hant saoz. Rak n' oa douetañs ebet evit Veig : arc'hant saoz e oa e bezhig gwenn.

N' oa nemet Madam Chich a c'helle faziañ, hep difiziañs, war e orin, gwerzhañ ur gwennegad forzh petra ha rentañ ur mell dornad moneiz, ur moneiz eus ar vro, onest, istimet ha degemeret gant an holl.

« Petra vo evidoc'h, bugale ? » a c'houlenne Madam Chich, tev he lapenn vlevek, ha garv he mouezh evel hini ur gwaz. Dont a rae, ouzh stlej lugut he fañtoufloù, davet he daou gliant yaouank, Veig dirak, evel boaz, Paotr-Teo a-dreñv e gein, sko ennañ.

« Boñboñ, Madam, ur gwennegead da bep hini, eus ar podad-se », a responte Veig, difrom-kaer, en ur ziskouez ur podad-gwer madigoù roz-livet.

« Arc'hant 'z eus ganeoc'h da baeañ, bugale ? » a c'houlenne ar goñversourez gozh, difizius un tamm.

Astenn a rae Veig e « arc'hant ».

Ur pezh gwenn ?... Ur pezh eizh real, diwar ar gwel kentañ ?... Ruflañ a rae an itron gozh. Ma vije bet ur pezh pemp kwennege, pe zek, ne vije ket bet iskis an dra, re en holl... Mes eizh real, evel-se, e-kreiz ar sizhun, etre daouarn daou gac'her ken yaouank ?... Klevout a rae Madam Chich ar pezh-se c'hwez ken fall ha ma oa ganti hec'h-unan.

« Gortozit, ma welin ! » emezi ; hag hi, ponner he bale, da doull an nor, gant he daou re lunedoù war he fri gwen-naennek, ha sellout pizh ouzh teñzor an daou bratik. Berr e voe an taol lagad.

« Lavagnoned fall ! » a groze an hini gozh, ken a grene he muzelloù gwak. « Faos eo ar pezh-se !... E oac'h deut adarre da glask laerezh ac'hanon. Laeron fall !... Biribi !... Mont a reot da Viribi betek fin ho puhez ! Pa welin ho... »

Prim ha trumm, ma ouie ober, en doa Veig tapet e bezhig gwenn a dre vizied Madam Chich, hag e sailhe er-maez, Paotr-Teo d' e heul, hemañ gant ur berenn e pep dorn.

Distreiñ a rejont e korn ar c'hoc'hu kozh.

« Chich pourri ! » a youc'has Veig.

« Chich pourri ! » a youc'he Paotr-Teo.

« Chich pourri !... Chich pourri !... »

« Larit 'ta ! frioù-karn », a skandale an troc'her-bary, amezeg Madam Chich, a oa o kemer an aer war dreuz e zor. « N' ho peus ket mezh « langachat » ur vaouez kozh ? Bremaik e lakain deoc'h ho reor e traoñ ho kein ! »

Tec'hout a rae an daouig d' ar c'haloup, dre ar c'hoc'hu kozh.

Hag e c'hoarzhent, ar voused fall. N' o doa nemet kender-c'hel gant o lañs. War hent ar skol, end-eeun, e redent, e-biou da vogerioù louet an uzin soud. Hastañ a rae bandennadoù bugale, dre ar memes hent, o vont d' ar skol ivez.

C'hoarzhin a rae va daou lampon, en ur blantañ o dent er per « falziget » gant Paotr-Teo. Mes c'hoarzhin glas. Kazeg o doa graet. Ar pezhig gwenn n' oa ket bet graet moneiz gantañ, da lavarout eo ne dalve netra er stad ma oa.

Ken brav e-giz vije bet chukañ boñboñ, en ur selaou kentelioù M. Karadeg !

N' oa ket da dortañ. Ar pezh-se a ranke bezañ eskemmet ha lakaet er c'hoñvers. Devañ a rae e zorn da Veig.

Pa chomas a-sav, sklerijennet trumm, e-kreiz plasenn an Amann.

« Selaou 'ta, *frai* ! Ha ma yafemp da brenañ un *illustré* e ti an Dimezell Bleo-Griz !... Honnezh zo desket, honnezh a gompren an traoù. »

Amzer oa c'hoazh, rak bez' e welent forzhig bugale — an diwezhadoù, ret en anzav — o trotal d' ar skol, en-dro dezho.

Hag an daou vray, pell diouzh heuliañ o skouer, ha treiñ kein da Sant-Gabriel, ha sankañ tizh war-du kêr, betek ar Ru Vras.

« Deomp diouzhtu da welout ! »

Ne voe ket ken aes ha m' o doa kredet ober afer gant an Dimezell « a gompren an traoù », sañset. Aet e oa Veig tre er Burev-Butun, tra ma chome Paotr-Teo e toull an nor. Levrioù ha kazetennoù, ha kartennoù-post, ne weled ken eno, ouzhpenn an daolig-varbr gant he fouezerez-butun.

E kaoz vras e oa an Dimezell Bleo-Griz gant ur plac'h yaouank dev, e giz kêr, evelti. Galleg e oa ganto o div.

Ne rejont van ebet ouzh ar paotrig, boazet ma oant, moarvat, da welout ar vugale o furchata er mouladurioù skeudennet, a-raok ober o dibab. Evel-se a rae Veig ivez, ar gwechoù all.

An taol-mañ, avat — ha brallet e oa bet e feiz en e bezh gwenn, faos, eme Chich flaer ? — e oa yenet ar paotr, hag aet lent, dirak ar plac'h yaouank kozh-se, hir, sec'h, ha dic'hoarzh a-hed ar wech. Ne vousec'hoarzhe morse ouzh ar vousetaj. An teodoù fall — hag ez eus anezho, e kêr ! — a lavare ne gare ket « c'hwez ar micherour » nag e barlant. Ar pezh a zo sur eo ne goueze morse ur ger brezhonek diwar he muzelloù, a oa faeüs, ha prennet dre natur, marteze a-walc'h.

A-greiz-holl, e taole pled ouzh Veig, a chome plantet evel ur peul, e-kreiz al leurenn, gant e bezhig gwenn en e zorn.

« Petra 'fell dit, paotr bihan ? » a c'houlenne e galleg.

« *L'Intrépide*, mezell Brieg. »

Kavout a reas Veig dezhi dremm riell ar vestrez-skol o vont da reiñ ar wialenn. Respont a reas an dimezell, e galleg atav, ha neuz an heskin en he mouezh :

« *L'Intrépide* ? Bet out o kerc'hat unan dija, an deiz all. N' emamp nemet ar meurzh hiziv, ha ne vo *Intrépide* all ebet a-raok digwener.

— Ya ! » a responte Veig, toutek ha divarc'het, ha war-nes mont kuit, hep goulenn hiroc'h. Krediñ a reas, kouls-koude, diskouez e bezhig gwenn, ha lavarout :

« Evit kaout moneiz an hini oa.

— A !... Diskouez da fortun ! »

Kemer a reas ar pezh eus dorn Veig. Sellout a reas outañ, ha neuze ouzh Veig, hag ouzh ar vaouez all. Prennet he beg, ken e oa prennet, an taol-mañ. Astenn a reas ar pezh d' eben.

« Anaout a rit an dra-se, Irma ? »

Eben a droe hag a zistroe an tamm metal.

« Kerzh da c'hoari c'haloj gant da damm traoù gwenn, mar karez. Evidon-me ne dalv ket ul liard toull. »

Sed ha ne rae ket o c'hont d'an daou gomperig. Flemmañ a rae Veig en e vod, droug ennañ :

« 'T eus ket gwelet hounnezh gant he beg-mersi-'m eus ket imm ?

— Eo ! ur beg ec'h-m' en argas », a responte Paotr-Teo, kerseet ivez.

« Ma vije bet arc'hant saoz », a lare hounnezh. Hag hounnezh a oar aŋglic'h, memes ?

En ur vont, Paotr-Teo a voe e dro da resev ar sklerijenn.

« Veve ! emezañ, trumm. Ha ma yafemp da hotel *Al Leon Aour* ? Aze e vez ur bern Aŋglichen, e-pad an hañv.

N' oa ket pell hotel *Al Leon Aour*. Dres e penn-laez ru Kereon, etrezek an Ti-Toull.

« Deus ganin, ar wech-mañ ! Paotr-Teo. Ne fot ket din mont va-unan e-barzh an ti bras-se.

— Ya ! » eme Baotr-Teo.

Ken luc'hus e oa an trepas, a ranne an hotel dre e greiz, ma tennas ar baotred o botoù da vont war o chaosonoù etrezek ar gegin.

Dre un nor digor, e taoljont ur sell er sal-debriñ. Ur sal hir ha sklaer, kran, gant un daol-greiz ken hir all, ha taolioù bihan goloet gant un doal wenn, ha warno asiedoù, boutailhoù, gwer lintrus, loaioù, fourchetezoù, edo ur vatezh bigoudenn, gwenn-kann ivez he zavañjer o tistaliañ.

Aotrounez, gant o fri en ur gazetenn, a echue skarzhañ o zasad kafe, a oa muioc'h a c'hwez-vat gantañ, sur, eget gant rouzig ar gêr.

An Itron Berr, perc'hennez an hotel, a oa anezhi ur vaouezig dous ha sioul. Selaou a reas ar baotredigoù gant madelezh ha, neuze :

« Ya ! va bugaligoù. Ya !... Mes an arc'hant-se n' eo ket mat amañ. »

Kemer a reas ar boan lakaat goulou e letern an daou vihan.

« Ya ! Amañ e vez kalz estrañjourien, e-pad ar sezon. Ar re-se, marteze, o dije bet graet an eskemm. Mes n' emaomp ket mui en hañv, bugale. An aotrounez a zo bet gwelet ganeoc'h er sal vras, a zo anezho beajourien koñvers eus Kemper pe an Naoned, pe Bariz, tud hag a labour evel ho tad, evit gounit o buhez. Ne reont implij

nemet eus gwenneien ar vro. Forzh penaos, an estrañ-jourien, pa zeuont e Frañs, o deve dija cheñchet o gwenneien en un ti-bank. Paeañ a reont amañ o dispign gant arc'hant gall, evel an holl. Hag aesoc'h, kalz, eo evel-se. Ne zeufe ket unan a-benn eus e gontoù, ma vefe kemeret moneiz eus kement bro a zo. »

Selaouet o doa an daou skoliad pennad kentel arboel-louriezh etrevroadel itron vat *Al Leon Aour* gant seul-vuioc'h a c'hrad m' he doa, etretant, kemennet d' ar geginourezh troc'hañ dezho pep a damm bara gant koñfitur. Marteze e oant bet kemeret ganti evit daou glaskerig aluzen.

Mes komprenet o doa ne oa o fortun, allaz, nemet un huñvre !

Kenavo regalis, chokolad, madigoù ha kelaouennoù skeudennet !

Ha va faotred adarre war ar ru, e-giz daou « goi », gant ar pezhig e dorn Veig, o sac'h-skol war o c'hein, hag ar skol... e sac'h an diaoul, ur wech ouzhpenn. Da sutal, ar skol, diwar seurt disouezhenn !...

Forzh penaos, evit komz e-giz an Hini Bleo-Griz hag itron vat an hotel, forzh penaos e oant adarre diwezhat. Tost div eur.

Biskoazh seurt gopr, a oa bet roet da Veig gant ar c'habiten-vor ! Dont a rae ar pezh gwenn-se, ken prizius, koulskoude, — eus an dra-se e oa sur, — ken karget a c'halloud-prenañ traoù ker prizius all, da vezañ pounner ha didalvez evel ur pouez plomm. Tonket oa dezhañ chom stag ouzh e flac'h, e-giz e roched-tan ouzh kroc'hen Herakles gozh.

Alvaoniñ a rejont, ur reuziadig, war ar riblenn-straed, dirak dor an hotel, ur vuzell gamm stag ouzh o beg. Hep gouzout da belec'h mont.

Ha, neuze, hep m' o devoe rannet grik etrezo, e kasjont o zreid, a ruz botez, davet ar Vanell-Zu, da guzhat, e park ar C'hoseg, o seier, a oa un uz o c'haout war o c'hein hag a zedenne re an evezh.

« Deomp atav war ar c'hae », eme Veig da c'houde. Marteze e welimp ar c'habiten bras. Ne welez ket e rofe deomp arc'hant gwir ? »

Ur c'haloupadenn a-hed ar vanell, hag un diskenn dillo dre ziriou mein Keratur. Edont adarre dirak ar c'hal Fereg, e traoñ ar porzh.

N' oa kabiten bras ebet war bont an *Inga Harner* nag o vale war ar c'hae. Ur maltouter, ne lavaran ket, gant e zaouarn a-dreñv e gein, o tic'henaouiñ ouzh al lestr : e vrasañ labour.

N' eo ur maltouter nag un archer na zoken ur gward-maezioù o lakaat kas war an dineizherien ha war skolidi-louarn. Mes gwisket eo gant dilhad ar gouarnamant... Da zifiziout outañ !

Ma rae va faotred an dro vras, dre dreñv ar bernioù plenk hag ar postoù-min, da vont da gantren pelloc'hik. N' oa ket diouer a vagoù all, penn-da-benn ar c'hae, nag a girri hag a roñsed o vont hag o tont gant o sammoù plenk, glaou, pe patatez, ouzh storlok ar rodoù, ar stlaka-dennoù skourjez, ha leoù paotred an tumporelloù — ha « youp ! », hag « hu ! », ha « drri ! » — a-hed ar c'hae ; hag ar roñsed o c'hwirinat d'ar gezekenned. Peadra e-leizh d'o lakaat da gaout berr o amzer, en ur c'hortoz distro ar c'habiten bras, ha fin ar skol, eveljust.

Aet e oa kuit ar *Verdun* gant e varikennoù. Ar *Malabar*, avat, a ziskarge atav e c'hlaou du lufrus.

« Tec'hit alese, *chojiked* ! Pe e viot flastret », a youc'he ur martolod, a-greiz-holl, a gichen un traouilh.

Feiz Doue, gwir ! Gant ar c'hoant gwelout gwelloc'h, hag e riskl kouezhañ er porzh, e vijent aet dindan pavioù ar pennoù-kezeg. Dres a-zioc'h o fenn, e oa ur pikol a banerad glaou oc'h ober dañs-ourz, e penn ur fun hir ouzh beg ar wern-samm, kent disac'hañ e-barzh karrastell un tumporell.

Preget en doa ar martolod e brezhoneg. Hag e brezhoneg eo ez ae ar vartoloded all ouzh ar chalboterien, a oa ken du o fasoù ha re morianed an uzin soud. N' oa ket estrañ-

jourien ar re-se, evit dezho dont eus bro-Saoz, ha, ken sur all, n' oant ket eus gwall-bell eus Pont-'n-Abad, diouzh ma seblantent anaout mat ar charretourien-glaou.

Redek a rae Veig da sellout pishoc'h ouzh anv ar vag, war an a-dreñv : *Malabar, Pont-l'Abbé*. Sklaer oa an traoù.

Ma ! N' eo ket gant ar re-se c'hoazh eo a vo diyalc'het ur « graf » d' e drokañ gant ar pezh gwenn-se dozvet gant yar an diaoul.

Antronoñ vintin, pa zegouezhas Paotr-Teo d' e gerc'hat da vont d' ar skol, e oa Veig atav en e wele, hantergousket, o lakaat e zilhadañ, hep mall. Diouzh al luchadenn a gasas dezhañ e gamarad, hag e vousec'hoarzhig fin, e tiouetas e oa deñt spered da hemañ, e-doug an noz.

« *Malabar* ! » a sile Paotr-Teo dezhañ en e skouarn.
« Sav buan, Veve ! »

Hag, a-boan erru war ar Waremm-Mên :

« Kavet 'm eus, *frai* ! Ar *Malabar*.

— Ya ! Ar *Malabar*. Ha petra goude ?

— Klevet 't eus petra 'n eus laret dec'h itron an hotel. Hama, *frai*, kabiten ar *Malabar*, te ' welo, a gemero da arc'hant diganit.

— Te 't eus bet ur sorc'henn, e-pad an noz ?

— Nann ! Veve. Mes ur soñj a zo deñt din, pa oan o tebrin va lein.

« Selaou mat ! Ar *Malabar* a zo o tont eus an Añgleter gant e c'hlaou-douar. Marteze, ha sur a-walc'h, e yelo en-dro d' an Añgleter gant ur fred potojoù-min pe avaloù-douar.

— Ya !

— Hama ! Kabiten ar *Malabar* a rank ober e zispign du-se gant arc'hant an Añglichen.

— Sell ! ya 'vat ! » a daole Veig. « Komprenet 'm eus. Ar Saozon, pa zeuont amañ, a gemer arc'hant ar Frañchi-

chen, hag ar Frañchichen, pa yeont da Vro-Saoz, a rank ober gant arc'hant an Añglichen. Te oar anezhi !

« Deomp diouzhtu da gaout kabiten ar *Malabar*. Henezh a gemero va fezh gwenn, hag a roio deomp moneiz en e blas. »

Va laboused n' oa ket berr o anal o nijal hed al lenn, dre biou traoñ ar c'hastell, ha penn-da-benn ar c'hae, betek ar vatimant du. Ha skañv oa o fluñv war o diwaskell ; fellout a ra din lavarout : o botoù-koad hag o seier-skol.

Dres a-walc'h e oa tri zen war bont ar *Malabar*. Daou vartolod yaouank, diarc'hen ha gwisket gant kotoñs glas takonet, a c'hoarie « plantañ ar yenn » an eil en egile. Abalamour d' ur c'hazh, war a gomprenas ar baotredigoù.

« Da gazh n' eo nemet ul laer », a hope an hini yaouankañ, ur c'hrennard goñs, dezhañ ur farsus a friig savet, e-giz hini Veig. Ne weled ket dezhañ kroc'hen e figur, kement a bikoù panez e oa warnañ.

« Stlepel a ri dour c'hoazh ouzh va c'hazh, fall-tra, lormor ! » a gunuc'he an hini brasañ, oc'h ober an ezvan da lopañ gant e holl nerzh war egile.

« Hag e rin », a youc'he ar mous, tra ma skampe, dreist bord, war ar c'hae, etrezek koad Sant-Lorañz, egile war e lerc'h.

N' oa netra vat da c'hortoz digant ar seurt istrogelled.

Ar martolod all, un den war-dro daou-ugent vloaz, a oa azezet war ur roll fard, er penn a-raok, o tennañ moked diouzh e gorn, dilavar hag habask.

« Hennezh a zle bezañ ar c'habiten », a soñjas ar baotred.

« Eontr ! mar plij ! » a c'halve Veig. Munudik oa e vouezh e-kreiz toumpi an traouilh hag ar glaou o kouezhañ en tumporell.

Treiñ a rae ar martolod eus e du un dremm, a oa rouz ha kalet e-giz un tamm ler.

« Ya ! » emezañ, hep diskrogañ eus e bibenn.

« C'hwi eo ar mestr ?

— Nann ! »

Sellout a rae an daou baotr an eil ouzh egile, nec'het.

« Pelec'h emañ, mar plij ?

— E-barzh e otoù, mechañs. »

Ur mousc'hoarzh moan en devoe an den, o welout mousklenn ar baotredigoù. Lavarout a rae :

« Er gêr, mechañs, e ti e wreg. »

N' oa ket desketoc'h va daou abostol gant ar seurt respont. Ha ne gredent ket goulenn hiroc'h. Dont a rae egile war sikour.

« N' anavezit ket Malabar, kabiten ar *Malabar*, nag an ostaleri Malabar, dalc'het gant Chan an Draouleg, e wreg ?

— Nann !

— N'eo ket diaes. »

Diskouez a rae, gant e bibenn, penn an hent, a gas da gêr, etre ar c'hoad hag an tiez-skol.

« It betek hotel *Al Leon Aour* ! Hotel *Al Leon Aour* ouzoc'h, mechañs, e pelec'h emañ. Ostaleri ar *Malabar* a zo sko ennañ, dres e korn ru an Ti-Toull hag ar Vanell-Gaoc'h. »

Sur 'vat, e ouient e pelec'h e oa hotel *Al Leon Aour* ! Tognet o doa o fri warnañ, n' oa ket keit-se.

Ne lakajont ket pemp munut, kement o doa redet, da zegouezhout e-tal ar Vanell-Gaoc'h, respet deoc'h ! — Un anv divalo, ret hen anzav, d' ur c'harr-hent hir ha strizh o riboulad, etre daou vur uhel, betek ar Marc'hallac'h ha porrastell ar Gouent. Ar savadur nemetañ eno a zo anezhañ privezoù boutin. E galleg, e vez anvet ar vanell, gant muioc'h a zereadegezh : *la Voie Dorée*. Pezh ne denn ket o frond *sui generis* digant ar bleunioù a zigor war he bevennoù, ha n' int na rozennoù na lili.

Diwar ar ru, e weljont e tavarn ar Malabar, ur vigou-denn vras, o torchañ gwer, a-dreñv an daol-ostaleri, en ur farsal gant everien, a oa ouzh o sav dirazi. Teñval e oa an ti, ha don evel ur c'hav, ha leun a voged butun. Dastum a rae va daou fas rouz o hardizegezh, hag i tre, Veig dirak, ha Paotr-Teo war e seulioù, evel boaz.

N' aent ket betek dargreiz ar wazed, a stanke dezho an hent davet ar c'hontouer. Mes gwelet e oant bet gant Chann an Draouleg, an ostizez.

« Grit ur plas d' am c'hlianted yaouank ! » emezi.
« Petra 'p eus ezhomm, paotred ? »

— Hi ! hi ! » a rae Veig. N' oa ket lent, tamm ebet, dirak ur vaouez a oa gwisket hag a « brege » e-giz e vamm.

« Ni garfe kaout moneiz », e responte ; hag ez astennas, ur wech ouzhpenn, e bezhig gwenn.

Mont a rae an ostizez, ur vaouez vras etre daou oad, ha livet yac'h, war-eeun da diretenn an daol. Neuze e sellas ouzh ar pezh.

« Petra... petra an tamm traoù-se ? » emezi ; hag e selle pizh outañ, ouzh sklerijenn ar prenestr bihan, a skoe war ar ru.

Hag ar memes diskan o sevel « war un ton anavezet », evel ma lavar Levr ar C'hantikoù :

« Ha...a...kon ?... Norj ?... Biskoazh, war an douar, seurt anvioù !... E pelec'h an diaoul oc'h bet o tineizhañ ar seurt medalenn ? »

Veig : « Me 'm eus bet an arc'hant-se digant ur c'habiten bras, war ar c'hae. »

Pouezet en doa ar paotrig war ar ger : arc'hant, da lakaat ar vaouez da intent n' oa ket afer amañ a vedalenoù, mes a wenneien yac'h hag onest, daoust hag estren.

« Feiz ! va faotr bihan paour, evidon-me da arc'hant, evel ma larez, ne dalv netra. »

Hag adarre ! Hag atav !... « Da arc'hant ne dalv netra !... »

Broudet e voe ar paour-kaezh Veig gant ur pik en e galon. Ma kredas zoken e klevas Paotr-Teo o valbouzat, a-dreñv e gein, un dra bennak evel : « Bleo ! » Da lavarout eo : « C'hwitet evit mat, an taol-mañ !... »

Setu 'ta ! Bezañ galoupet, ken uzañ tachoù ha koad e votoù, bezañ ruziet e dal a zor da zor, en holl ruioù kêr, evit klevout bewech ar respont diremed : « Da arc'hant ne dalv netra ! » an dra-se n' eo ket c'hoari e oa.

« A ! » eme an ostizez, a-daol-trumm. « Gortozit, bugale ! »

Gervel a rae :

« Malabar ! Deus amañ un tammig 'ta !

— Ya ! Petra 'zo ? »

Tregernet he doa ur vouezh kaer ha don, e penn pellañ an ti, eus kostez ar gegin. Daou zen a oa azezet eno, ouzh un daol vihan, dirak pep a vanne kognag. An hini en doa komzet en doa savet e benn. Diskoaz ledan dezhañ, hag ur gasketenn kabiten war e vlev du rodellet. Hennezh eo a oa Malabar — n' oa ket da faziañ, an taol-mañ — mestr ar *Malabar*.

Mont a rae Veig davetañ gant e bezh.

« An dra-se zo ur gurunenn », eme an den, en ur gemer ar pezh, d' e dro. « Ur pezh-arc'hant a Vro-Norvej. »

Sellout a rae an den ouzh Veig gant ur mousc'hoarzh a youl-vat.

« Me laka out pinvidik ! »

Troc'het e voe ar gomz da Veig gant unan eus ar wazed, a oa eus harp an daol-ostaleri.

« An Norvej ?... Petra eo an dra-se ?

— Gast, 'vat ! » a lare Malabar. « Ar re-mañ, e Pont-'n-Abad, n' ouzont netra... An Norvej a zo ur rouantelezh nevez, en em zistaget, bloaz hanter zo pe zaou bennak, eus ar Sued. Hag he roue a zo e anv Haakon. Ya !... Haakon. E-giz-se emañ o anvioù, er c'hostezioù-se.

— E pelec'h emañ an Norvej, neuze ? » a c'houlenne un ever all.

« El laezioù, du-hont, war vord ar Mor Bras, uheloc'h c'hoazh eget Bro-Saoz hag an Danmark.

— Te zo bet du-hont, Malabar ?

— N' eo ket dav mont di evit gouzout.

— Mes... » a gendalc'he egile. « En em zistaget e-giz-se, hep... hep brezel ? Ma vije bet emgannoù, e vije bet klevet nevez.

— Hep brezel, ya ! Dre emglev. Ar re-se n' int ket ken sot hag ar Frañsizien hag an Alamanted, pare atav d' en em lazhañ abalamour d' un Alzas-Loren bennak. »

Neuze e troe Malabar ouzh tu Veig, gant e vousec'hoarzhañ a blijje kenañ d'ar paotr.

« Me bari » emezañ, « e kavfez gwelloc'h kaout moneiz rouz da brenañ boñboñ eget ar pezhig arc'hant-se.

— Hi ! hi ! » a rae Veig.

Evit-se eo e oant eno, eñ ha Paotr-Teo, evit trokañ an tamm karn a bezh daonet-se e moneiz rouz. Hag ar c'habiten eo a ginnige ober an afer, a-barzh ma voe goulennet tra digantañ. N' eus ket d' an dud-a-vor da gompren an traoù !

Ha Veig ha dibunañ, ur wech ouzhpenn, istor lizhiri ar c'habiten bras.

« A ! ya ! » a droc'he Malabar. « Kenut Olafsen, me bari, letanant an *Inga*. Anaout a ran anezhañ. Ur paotr mat... Te 'n em gompren gantañ ?

— O, ya ! » eme Veig. Fogasiñ a rae. « Nemet, a-wechoù, ne gomprenan ket tout. E-giz p' en deus kaozeet din eus va sae lor. Hi ! hi ! »

Diskordañ a rae ar c'habiten da c'hoarzhin, ha :

« N' en deus preget morse dit nag eus da sae nag eus da dreid, azen bihan. Ar saozneg n' eo ket ar brezhoneg. Ne denn tamm ebet dezhañ, memes. Hag ur « sailor » n' eo ket ur « sae lor », mes ur martolod. Goulet 'n eus diganit, sur a-walc'h, ha karout a rafez mont da navigañ.

— Hag e karfen, 'vat ! » eme Veig, kalonek. « Paotr-Teo amañ a zo kreñvoc'h evidon. Mes me zo kreñv ivez. N' eo ket gwir, Paotr-Teo ?

— Eo ! » eme Baotr-Teo.

« Pregit deomp ! » a c'hoarzhe Malabar. « Mes a-raok dont war ar bagoù bras da danvañ blaz ar wilastrenn gant ho kein, e vo dav deoc'h debriñ ur bern soubenn, e ti ho mammoù. Ur gwall-vicher eo micher ar martolod.

— 'M eus ket aon », eme Veig. « N' eo ket gwir, Paotr-Teo ?

— Eo ! » eme Baotr-Teo.

Etretant, en doa Malabar fouret ar pezhig arc'hant en ur godellig eus e jiletenn vihan. En em lakaet en doa en-dro da zivizout gant an den a oa dirazañ, hep soursial hiroc'h eus ar « gurunenn ». Marteze en doa disoñjet. An dud vras a zo dievezh, un eston, war draoù a zo. Mes Veig a oa ar « gurunenn-se » e holl fortun. N' oa ket deut da zegas ur prezant d' ar c'habiten. Da glask moneiz, ne lavaran ket.

Gortoz a rae e voneiz.

Paotr-Teo, eñ, pa n' en doa tra all da ober, nemet gortoz ivez, a suc'helle hag a dorche e fri gant e vañch, pep ar mare. Ne zeue e benn nemet dres a-rezik an daol-ostaleri. Hogen, tizhout a rae, gant e sell, an estajerennoù, a-dreñv kein Chann an Draouleg.

Ouzhpenn boesonioù, houmañ oa ganti stal ispisiri. Ha Paotr-Teo ne denne ket bourbell e zaoulagad diwar an tablezennoù chokolad. Merket oa war ar paper-golo : *Chocolat Poulain*. Hennezh zo chokolad mat kenañ.

« Lar 'ta ! Malabar », a daole Chann an Draouleg. « E soñj diwall ar vugale-se da goan emaut ? »

— A ! ya 'vat. Disoñjet oan eus ho moused !... Ar gurunenn-se a dalv eizh real pe war-dro. Kavout a rin implij dezhi e Kêrdiz. Roit eizh real d' ar paotr yaouank-mañ ; n' eo ket eñ a vo koll. N' eo ket gwir *frai* bihan ?

Lakaat a rae an ostizez daou bezh pevar real war an daol.

« Dav kenlodañ », emezi. « Kement-ha-kement da bep hini. E giz-se ne savo ket reuz etrezoc'h. »

Chann an Draouleg ivez a ouie eus ar vugale.

Lammet en doa Veig raktal war e wenneien.

« Da brenañ levrioù ! » emezañ. « Dont a rez, Paotr-Teo ? »

Paotr-Teo, teoget, hep ket a var, gant estajerenne an traoù mat da zebriñ, a sile d' e geneil en e skouarn :

« Me 'm eus c'hoant prenañ *chikoled*. »

— Me ivez », a daole Veig, kerkent. Ur wiblenn en doa Veig en e benn.

« Moereb, bez' e ve moienn kaout *chikoled*, mar plij ?

— Feiz ! Ya, sur ! » a responte Chann an Draouleg, en ur zirollañ da c'hoarzhin. « Sell aze a zo lakaat an arc'hant prim ha buan er c'hoñvers ! Evit pet gwennege e vo lakaet deoc'h ? Ur gwennege ? Daou wenneg ?

— Pevar real, eme Baotr-Teo, taer. *Chikoled Poulain !...* » Hag e tiskoueze gant e viz an tablezennoù hoalus war o estajerenn.

« Din ivez ! » a laoske Veig.

Karout a rae lenn. Mes *chikoled*, evel ma tistage Paotr-Teo, piv a c'hellfe herzel ouzh e c'halv, p' emañ, aze sko, oc'h « ober lagad » deoc'h, e-giz ur plac'h yaouank d' he muiañ-karet, ha pa 'z eus « aour melen leizh ho forn » ? Kavet e vo gwenneien, ur wech all, da brenañ traoù da lenn.

« Eizh realad chokolad, krouadurien ! » a c'hoarzhe Chann an Draouleg, gounezet evit mat gant an drantiz. « Ne stagit ket ho chas gant delioù kaol. Bez' ho p' eus ur c'hravaz, evit kas ganeoc'h kemend-all a varc'hadourezh ? »

Ha, gwir ! un tamm brav a vern a rae ar varc'hadourezh, war an daol, dirak an daou ganfard. Peadra en em regaliñ betek ar sul, d' an nebeutañ.

Ha setu ma estlamme an ostizez vras.

« Gast 'vat ! Amañ 'z eus tammoù all chomet da louediñ war ar blankenn, e-kichen ar soavon. Biskoazh c'hoazh !... Kasit an tammoù-se ganeoc'h war ar marc'had, paotredigoù ! C'hwil 'ravo ar blev diwarno gant ur gontell, hag e vint ken mat hag an tammoù all. »

Hag ouzh taol, timat !

Nann !... N' he doa ar Vanell-Gaoc'h — respet deoc'h ! — netra, hag e feson ebet, o tennañ da sal-debriñ cheuc'h ha sklaer hotel *Al Leon Aour*. Ha n' eo ket c'hwezh an dour Kologn a save d' o fronelloù, a-douez al louzeier treut hag al linad, a vevenne an hentig, en daou du, hag, uheloc'hig, eus ar « c'henkiz » toull e leurenn. Mes ar vugale n' eo ket figus o fri war frondoù a vez.

Ha roue Bro-Spagn n' oa ket o c'henderv. Na Balthazar ar Juzevien, na Lucullus al Latined, na Curnonsky ar C'hallaoued, na Kic'houlin, sac'h don Iwerzhoniz, e-unan, gant e gig-moc'h sabatuus. Ha, koulskoude, Iwerzhoniz eo diaes ober gwelloc'h egeto, e fed a vañvezioù ; war a fougeont, d' an nebeutañ. Ar roñfl Gargantua, marteze ?... Hemañ, sañset, en doa debret, ur bloavezh, kement sivienn a oa, e kement park a oa, e Plougastell, hag evet, goude se, evit terriñ e sec'hed, dour mor kloz Brest, betek ar berad diwezhañ, listri-brezel hag all.

Edont o tebriñ chokolad, ouzh o sav, tal-ouzh-tal, e-kreiz an hentig, er Vanell-Gaoc'h — respet deoc'h ! — pep a bakad ganto, en ur baperenn, e pleg o brec'h.

« Chwi 'ravo an tammoù louedet gant ur gontell », he doa aliet Chann an Draouleg.

Ravañ, m' hel lavar, me ! Da gentañ, n' oa kontell ebet ganto, hag an dra-se a vije bet koll marc'hadourezh. Un taol torch d' ar blev gant o mañch, ha mat pell 'zo ! Marteze oa, gant un darn eus ar bizhier, un arvlazenn soavon, un tammig blaz al louet. Se ne rae forzh.

Veig a oa ur jod dezhañ, reut ha ront, evel ma vije bet gant an droug dent, ha Paotr-Teo, bec'h warnañ o chaokat, ken karget e oa e forn, a zivere ar glaour betek e chink. Biskoazh ken dispourbell n' oa bet e zaoulagad.

Ya ! Redet o doa, klasket o doa, bec'h o doa bet. Mes paeet e oant eus o foan. Chokolad o doa da zebriñ, puilh hag eus an druilh.

Mes piv eo an hini ne ouezas ket petra eo digalonekaat, ha teurel an trebez war-lerc'h ar billig ? Piv an hini a voe pennek, — e-giz tud e ouenn, — hag hardizh, — gant Paotr-Teo ouzh e harpañ, — ha speredek, o kas e vennad da benn ? Piv a oa aet ar maout gantañ, ma n' eo ket Veig Trebern ?

Setu petra 'ranker ober evit bezañ trec'h, er vuhez ! Derc'hel peg. Paotr-Teo, atav, a oa sur ne oa, er pevar c'horn eus kêr, ur paotr all ken digourdi, ken barrek hag e *frai*, Veve Trebern, unan, hag a ouie gounit arc'hant hag el lakaat da dalvout, hep koll amzer.

An « delikatessen » a oa bet servijet d' an daou veg-lip gant ostizez ar Malabar, a oa hini gros — mat ha marc'had-mat ! — chokolad da boazhañ, eus ar seurt a veze implijet gant ar re giz kêr d' o dijuni. Evit hon daou varlonk, e oa ur meuz eus ar baradoz.

It da c'houlenn diganto, avat, ne lavaran ket krignat ha pismigañ — se zo ardoù merc'hed —, mes tañva blaz o lipouzerezh, saourañ dre gaer, en ur gemer brav o amzer, chukañ, disusunañ, ober plijadur d' o staoñ !... Nann ! Plantañ en o dremm, kargañ o c'hof, setu petra 'raent.

Paotr-Teo, dreist-holl, a oa ur sabatur ar gwelout anezhañ. Un taol dant, un ezvan paskañ, ha lonkañ.

Evit d' ar vanell bezañ dizarempred, mont a rae un tremener bennak e-biou, evelato. Teurel a raent ur sell souezhet ouzh an daou festaer, ha n' oant ket evit mac'hañ war o mousc'hoarzh.

« Sell aze », e soñjent, « daou varmouz, a zo digor o c'halon d' an traoù mat ! »

Unan bennak pe vuioc'h, avat, a rae ur c'hriz d' o zal hag ur prenn d' o beg. Evel m' en dije sellet an dra-se outo ! Ma soñjas Veig, evelkent, e oa politikoc'h, marteze, cheñch aer.

« Ha ma yafemp betek park ar C'hoseg Ruz, da guzhañ lod eus ar chokolad gant ar seier », emezañ. « Dav ve diwall ul lod evit goude kreisteiz. »

N' eo ket peogwir e oa un arboeller, e lavare an dra-se, mes n' oa ket gouest ken.

Graet en doa un hik. Reketet e oa, hag edo e halo o vont da hesk. Pezh ne vire ket outañ da gas e vegadoù war-draoñ, daoust ha difonnoc'h.

Reiñ a rae Paotr-Teo e asant gant e benn, en ur lakaat un hanter-bazh all en e c'henou. Gagouilhat a reas :

« Hennezh zo *chikoled* mat, 'vat ! »

Hag i kuit, dibres-kaer, war-du ar Vanell-Zu, pep hini gant e bakad prizius. Hep ehanañ da chaokat. Aet oa skañvoc'h, kalz, lodenn Paotr-Teo, mes, evel ma lavarar war ar maez, n' oa ket erru c'hoazh e penn e erv.

E park ar C'hoseg Ruz, e oa ur vigoudenn o tastum ur bec'h delioù kaol evit ar saout. N' oa ket ar mare sachañ evezh ar vaouez-se — na den all ! — war o zoull-kuzh.

Ha, neuze, en ur soñjal ervat, da zifiziout e oa ouzh al logod-mors hag amprevaned ar parkeier. Ar re-se, kennebeut, ne dufont ket war ar chokolad.

Etrezomp-ni, kein ledan o doa al logod-mors, ha Veig a zeue ar wirionez gantañ, pa lavaras :

« Koulz eo debriñ tout. Deomp e-barzh ar c'hoad da zebriñ ar rest ! »

N' eo ket Paotr-Teo an hini en dije lavaret : nann ! Respont a reas, evel bep tro :

« Ya ! »

N' he doa ket fiñvet ar wezenn fav diwar he gwrizioù. Distro, un tammig, diouzh ar gwez all, en ur frankizenn eus ar c'hoad, sonn hag uhel, gant he bolzad ledan delioù

glas. En em lakaat a rae ar baotredigoù, klok en o c'hoazez, ouzh harp traoñ ar wezenn, en disheolig, a oa sin ha skañv.

Petra ober, da c'hortoz kloc'h unnek eur, nemet kenderc'hel da zebriñ chokolad? Hag e tebrent chokolad. Biskoazh ne oa bet debret ganto kemend-all a chokolad.

Evit komz heñvel ouzh ar wirionez, heuget oa Veig, un disterañ. Paotr-Teo, eñ, e oa da grediñ ne oa strad ebet d' e gof. Kent pell, ne chomas war e varlenn nemet ar paper. Lipat a reas ar bruzunoù gant e deod.

« Me gav mat chikoled, 'vat! » a lavare en ur zi-c'hwezhañ.

« Sikour ac'hanon da zebriñ va lodenn! » a ginnige Veig. « Pa vo ket mui, vo ket mui. »

Chom a rae gantañ peder pe bemp barrenig.

« Ya! » eme Baotr-Teo, didroidell-kaer. Na petra! Daou vignon a oa anezho, muioc'h eget breudeur, prest dalc'hmat d' en em rentañ « sikour! ».

Ha setu kaset war-draoñ, d' o zro, tablezennoù diwezhañ Veig. Rampo oant.

Pebezh korfad, tudoù!... Eizh realad chokolad diroues-tlet, diloret propr ha kempenn, amzer chaokat. Hep evañ, na disternañ.

Sellout a raent an eil ouzh egile gant ur mousc'hoarzh chichant. Ma vijent bet div blac'hig, e mije lavaret : sev. Brasoc'h kamaraded n' oant bet biskoazh.

Paotr-Teo ne lavare tra. N' oa ket da souezhiñ, peogwir ne gomze, peurliesañ nemet evit respont. E deotek a gomper a oa peoc'h ivez, evit ur wech, ouzh e ranell. Mes evitañ e oa un abeg. Abaoe ur reuziadig, e kave d' am Herve e oa gwalldost e galon d' e c'hourlañchenn. N' oa ket da faziañ, dispac'h a save en e vouzelloù, ur reveulzi distourbouilhus, n' oa tra vat da c'hortoz eus e berzh.

Sellout a reas ouzh Paotr-Teo.

« Te zo gwenn, 'vat! » eme dezhañ Paotr-Teo.

« Me 'm eus c'hoant dislonkañ », eme Veig. « Ha me, me gav ac'hanout glas. N' out ket klañv, *frai* ?

— Nann! »

Paotr-Teo n' oa ket echu mat e gomz, ma rae un hikadenn. Skoelf-oc'h-skoelf, ma c'hellent bezañ, e zaoulagad gwesklev, c'hwezhañ a rae e zivjod, e-giz ur c'hwezhi-gell, tra ma prene start e vuzelloù. Amzer dezhañ, avat, kas e zorn dirak e veg, evel ma vez desket d' ar vugale ober, er seurt degouezhoù, e tistage un diael a vreugeud. Flistrañ a rae, herr ha taer, eus e c'henou, ur fuzeenn rouz. Harzhet gant e flac'h, e chintre ar vourien c'hludek en daou du, a-raok kouezhañ war e otoù ha war e votoù-koad. Tapout a rae Veig e « lod-ar-pardon » war ur skoaz ha war e fri.

N' eo ket se oa ar gwashañ. Veig a voe leun e c'henou, d' e dro, leun a zour hag a yod, a sailhas trumm er-maez, gant nerzh ha tizh un tenn, war-hed daou vetr, d' an nebeutañ, etrezek moger ar c'hoad.

N' oa ket brav mab an Trebern ha mab ar C'horku da welout, o 'n em c'houllonderiñ, gant hikadennoù ha klemmoùigoù : « Aiou ! va Doue 'ta ! », war ar grouan geotek ha war ar c'hiviz, strewet dindan ar wezenn fav. Perlezenniñ a rae an dour war o zal, ur c'hwezenn tomm ha yen war un dro. Ha bec'h dezho kaout o anal, hep kontañ ar boan benn.

Ha mantret o daou, o daoulagad glep paret war an dismantr : o chokolad ken mat a-flastr, a-stlap, a-blat, e-giz div veuzelenn, o tivogediñ war an douar, dindan lagad heol an Aotrou Doue.

O chokolad kollet.

N' eus ket da nac'h, tonket e oa da Veig Trebern, ha da Baotr-Teo, evel just — rak ne vije ket bet aet an eil da zizourañ hep egile —, lakaat un astenn d'o c'hoari-louarn.

N' ajont, ar mintin-se c'hoazh, nemet betek toull-dor Sant-Gabriel. Diwezhat adarre, hag, evit ur wech, pep hini eus e du, an eil o klask egile. Ha kement-se, abalamour d' ul laouenn.

N' eo ket war-bouez Nerzhoù Galloudus nemetken ez a ar bed en-dro. Renet eo ivez planedenn mab-den gant darvoudoùigoù munut, taolioù biz diheverz, a laka ar Rod da zihentañ. Gant an Dibouezus, a lavarfe ar Furien.

Gwelit, da skouer, kudenn fri Kleopatra, ar rouanez-se a Vro-Ejipt, a vije bet cheñchet dremm ar bed, diouzh ma vije bet hiroc'h pe dognoc'h !

Va daou lakepodig-me, ma chomjont berr, ar mintin-se, adarre, n' eo ket zoken abalamour da fronellig ur briñsez, eus ribloù an Nil pe get, nag abalamour, kennebeut, d' ur bern fagod derv all da lojañ e porzh Jakez Konan, bouloñjer ar Ru-Vras. Mes abalamour d' ul laouenn.

O ! ur gaer a laouenn e oa eus al laouenn-se, ur pezh mell laouenn, maget mat, lart-toaz, ur bam, ur begeliad dezhi evel d' un ozhac'h kozh pinvidik.

Ha setu ! Ma — nemet gant « ma » ha gant « panevet », e vefe lakaet Pariz en ur voutailh —, ma ne vije ket bet gwelet al laouenn-se gant e vamm war glopenn Paotr-Teo, e vije bet aet hemañ, disoursi-kaer, d' ar skol, ha, marteze,

e vije bet aet an amprevan da bourmen war zilhad unan all eus e amezeien vihan, e klas M. Karadeg ; ha peoc'h pell 'zo, hep ma vije bet douetet gant Paotr-Teo e oa bet e glopenn sal-debriñ ha bevañs d' ar pezh divalav-se.

Panevet al laouenn-se, ne vije ket bet aet Paotr-Teo da di an touzer-blev.

Ma ne vije ket bet aet Paotr-Teo da di an touzer, Veig hag a oa ouzh e c'hortoz e korn ar ru, ne vije ket bet higennet gant ar beleg yaouank hag aet gantañ d' an iliz.

N' eo ket, koulskoude, an amzer a ya gant ur perukenner da douzañ penn ur paotrig eizh vloaz. Un taol krevierezh eus an toull-kil d' an tal, daou daol, tri daol, ur stirlin-kadenn sizailhoù lintrus en-dro d' an diskouarn, ur boufadenenn war ar gouzoug, ha : « Setu, paotr yaouank, ur bouilh ac'hanout adarre ; daou wenneg eo ! » Daou wenneg gounezet buan.

Veig, eus e du, n' oa ket chomet da c'horiñ vioù er sakristiri. Skampet va labous, kerkent ha troet e gein gant ar beleg.

Amzer o doa peadra, eta, da vezañ o daouig e poent hag e koulz, war o bank, e klas M. Karadeg. Rak n' oa ket kel e vijent aet d' ar skol an eil hep egile. Abalamour da se, eeun hag eeun, eo zoken e voent lakaet diwezhat adarre. Rak an amzer-se, kollet-naet e voe ganto, o treiñ, distreiñ ha korntreiñ dre ruioù kêr, an eil o klask egile.

Ar mammoù bigoudenn, hag holl vammoù ar bed-holl, moarvat, a zo un dudi teneraus ar c'haout anezho, gant an touellet e vezont war sujed o bugale.

O bugale?... Traouilh ha turmudus, ya ! un torr-penn hag ur vouzarenn, ar ral a-wechoù ma tegouezh dezho chom da stlaenañ en ti, etre ho treid ; un hirvoud ivez, pa zeuont d' ar gêr, re alies, gant o dilhad roget pe vastaret. Na petra 'ta ! Bev int, ha yac'h, a drugarez Doue.

Mes kaout troioù en o c'horf ? Bezañ kuzhetik ouzh o mamm, ha dre zindan, siwazh d' o c'halonigoù?... Bugale ar re all, marteze, ya !... eus traoñ ar c'harter, pe eus laez ar c'harter, pe eus kreiz-kêr. Pep bro a vag he lorgnez. Na gollit ket glaour ho kenou, avat, o kontañ da Chann Grall pe da vamm Veig n' eo ket o faotredigoù krouadurien eus an dibab, bugale mignon, ha sentus, ha fur. Hag aketus da vont d' ar skol.

N' o doa ket kavet aour da rozellat en o c'havell, nann ! Mes ur galon vat a oa bet roet dezho, hag evit ar pezh a sell ouzh ar skol, Veig, gant e spered lemm, a zeske pezh a gare. Ingal e veze e fri gantañ — ken ez ae togn ! — en ur skrid moulet... pa ne veze ket oc'h uzañ buhez e c'hoar vras, evel just ! E blijadur a oa mont d' ar skol, sed a oa skler e-giz dour feunteun ar Prat.

Chann Grall, hi, a ouie mat-tre n' oa ket hec'h Ifig prim a deod evelti nag ur maout war ar studi. Mab gorrek un tad pounner e oa Ifig, na petra ! Mes gouzout a rae ivez, e oa, er pennig kalet-se, ur skiant-prenañ... hantergousket, lakaomp, a rafe e roud, da vare ar c'hresk. N' eo ket ar re a loc'h kuit an abretañ a ya ar pellañ.

Ha neuze, pebezh nerzh en e gorf, d' an Ifig ! Pebezh yec'hed war e zivjod !... Kofigoù e zivhar ? Mac'hit warno ! Ront ha kiget-start, m' hel lavar, start e-giz kaouchou !...

Evit an deskadurezh, feiz ! arabat goulenn kastrilhez digant un halegenn. Gant ma tapfe ur begad beu-ha-ba bennak digant ar Frered, kement hag e lopez a dad e ouife atav. Lakaat a rae e boan da zeskiñ.

Abaoe ur reuziad zoken, ne chome ket nemeur da rouzmouzat e tro ar gêr. Kerkent ha diloret e voued, e tilore ivez al leur-di...

« ... Evit redek d' ar skol 'ta ; ha da belec'h ken ? » Sed ar pezh he dije respontet Chann Grall d' ar beg-bras en dije souezhet dirazi o welout hor « mec'hioğ o sachañ e skasoù — e gilhoroù — ken dillo », evit komz evel Plouizkerne.

Ya, laouen !...

Nann, siwazh ! kentoc'h, pa oa ken disheñvel ar wirionez, ma ne c'helle ket bezañ disheñveloc'h.

Abaoe ma troent kein da skol ar Frered, evit daremprediñ ar skol all — hini al louarn, evel ma ouzomp — va santig-pri a Baotr-Teo ha Veig Trebern, kalonig-aour e vamm, a sante drein spern dindan seulioù o zreid war leurenn ti o c'herent. Fall-goustiañs o doa, setu ar wirionez ; ha ne badent mui e tro an ti gant an aon rak ur goulenn dañjerus diwar-benn ar skol, ur respont a-dreuz, a lakafe ur skouarn da sevel diwar zifiziañs hag... an abadenn bazhadoù, a zeufe da heul, ken sur ha serten ha ma oa feskinnier ouzh o gaol da reiñ degemer d' ar gwiskad.

Nann ! ur wech c'hoazh. N' eo ket d' ar skol, daoust ma krede d' o mammoù, o doa mall redek, en ur zigêriñ gant kement a hast. Ne garent ket ar skol. Mes nebeutoc'h c'hoazh e karent an torch gleb war o reor noazh.

Er-maez, e oa aer ha frankiz. Avel d' ar baotred ! Kein ledan he doa ar skol.

Mes ma oa berrwel Chann Grall war darempredoù he mab hag ar skol, merzout a rae mankigoù all gant an taol lagad kentañ. Selaouit !

« Mar deo permetet kaout kemend-all a ziegi d' an dour !... ».

Ouzh ur skouarn vouzar-pa-gar he doa komzet Chann Grall. N' oa ket Paotr-Teo kamarad d' an dour yen. Debret gantañ e zijuni, sammet en doa e sac'h-skol, prest da 'n em laerezh er-maez, hep ur sell ouzh ar sailh dour hag an torch. Fuc'hañ a rae e vamm :

« ... Gast 'vat ! Kement-se a vall 'z eus mont d' ar skol ? Mont a rafe d' ar skol gant e groc'hen kras. Biskoazh war an douar ! Da eizh vloaz !... Ar re-mañ a ranko o mamm gwalc'hiñ anezho ha sec'hañ dezho o fri betek o ugent vloaz ! Ma n' eo ket un druez ! »

Paotr-Teo a oa e zorn war ar c'hliked, pa oa savet mouezh e vamm. Digor oa an nor, pa glev, kerkent all :

« Ep a la ! va aotrou. Da belec'h e fuster ken buan-se ? A boan eo seizh eur hanter.

— D' ar skol, mamm.

— Gouzout a ran. Mes... 't eus ket disoñjet netra ? »

Kas a rae Ifig e zorn d' e sac'h-skol, ispilhet war e gein.

— Bez' emañ va sac'h ganin, mamm.

— Ha da vizaj ? Ha da zaouarn ?

— Ganin 'maint ivez », a responte an Ifig, souezhet un tammig, mes dic'hoarzh.

Ne voe ket Chann Grall evit mirout da zirollañ. Pebezh mab farsus e oa he faotrig !

« A, feiz ! va Doue », emezi. « Marteze 'maint ganit, e-giz a larez. Mes, me, n' o gwelan ket gant ar gwiskad kramenn a zo warno. Paotr-an-teil n' en defe ket ezhomm ouzhout e-barzh e garr, ken lor out. Devale amañ, ma roin dit un taol torch gleb, gant ar vezh. Hemañ a rafe mezh d' ar moc'h.

— Ur vezh eo bezañ lor, mamm ? » a c'houlenne Paotr-Teo, didroidell. Hag e save davet e vamm bourbell e zaoulagad, gant selloù an oan dinamm.

« Ur vezh, sur ; hag ur pec'hed, va c'hrouadur paour », a responte Chann Grall, tra ma frote kalonek enebañs ar paotr, gant korn ar serviedenn, edo bet o soubañ er sailhad dour. « Ha, sur, e vijes bet dalc'het e pinijenn gant da vestr-skol, ma vijes bet aet d' ar c'hlas gant...

— O ! eme Baotr-Teo. Me zo pell diouzh e vurev. Me zo e traoñ ar c'hlas.

— E c'hellez fogasiñ... La ! Un taol-krib bremañ d' ar reun-se. »

Paotr-Teo a oa war e benn blev sonn, reut, a liv hag a stumm gant an delioù pin sec'h, ha troc'het berr. Pas berr a-walc'h c'hoazh, rak :

« O va Salver benniget Jezus !... » a estlamme Chann Grall. « Ur glujar !... »

Teurel he doa graet ur youc'hadenn ken skiltr ha ma vije bet kavet ganti ul logodenn en he mañch. Kejet e oa he sell gant ur pezh laouenn, o pourmen he c'halite war ur vlevenn eus penn he mab. Flastrañ a rae an hudurenn, ken berr, etre ivinoù he meudoù, ma chintras ar gwad en daou du, gant strak un tenn.

N' oa tamm ebet Chann Grall eus ar maouezed a gred dezho e sun al laou kleñvedoù ar vugale. N' oa al laou, eviti, nemet amprevaned lous, lastez, un dismegañs o gwelout war ur penn kristen.

« E pelec'h an diaoul eo bet hemañ o taspugn al lorgnez-se ? »

Ur goulenn e oa, ha ne c'hortoze respont ebet. Paotr-Teo, avat, dam-zistag e vuzelloù, krizet e dammig tal, a glaske ha, kavet gantañ, war e veno, a daole :

« O ! mamm, an devezh all, 'm eus gwelet ur paour-kaezh o tarlaskat.

— Che, ivez ! va mab bihan. Ha laou ar paour-kaezh kozh-se o doa diwaskell e-giz pichoned, hag int deut da gludañ war da benn, en ur nijal ; ne gred ket dit ?

— Eo, mamm.

— Ma ! va loen rouz. En ti-mañ, ne vo ket maget pichoned. »

Ha, tra ma skrabe gant he biz e-touez reun he c'hanfard, e termone mamm Paotr-Teo outi hec'h-unan :

« 'Benn ur sizhunvezh ac'han, e vijent bet o virviñ. N' eo ken nez tout e vlev. »

Furchal a rae, en ur chakod eus he zavañjer, hag e tenne ur pezh daou wenneg eus un doug-moneiz ler.

« Del ! daou wenneg, makez penn-laou ! Ker e koustez din. Troc'h roud diouzhtu da di Chel ar grampouezherez. Gouzout a rez e pelec'h emañ ti Chel ar grampouezherez, e ru Poull-Fank. War hent da skol emañ. Amzer he do Chel da droc'hañ dit da vlev, a-raok eizh eur. Lar dezhi touzañ dit da benn betek da groc'hen. Klevout a rez ? Betek ar c'hroc'hen.

— 'Giz ur voulienn, mamm ?

— 'Giz ur voulienn, ya ! Evit ma ne vo mui na klud na kaoc'h d' ar seurt pichoned war da glopenn, gant ar vezh !

— N' am oa ket debron, mamm, ha n' am oa ket c'hoant en em gravañ.

— Krav kuit ! memes tra. 'Chomez ket da c'hoari penn-da-benn an hent, ha diwall da vankout da glas ! »

Edo Veig, gant e sac'h-skol ouzh ur skoaz, o c'hedal e gomperig e korn penn ar vanellig, a gas eus leur ti Paotr-Teo d' an hent bras, e-tal traon al lenn. Ha kuit, o daou, d' an trotig evel boaz, ha goustatoc'h, da c'houde. Veig n' oa ket chichant e vuzelloù.

« Selaou 'ta ! Paotr-Teo », emezañ, a-raok memes ma voe tizhet ganto ar Waremm-Mên. « Me ra foultre-kaer ; ha pa lonkfe M. Karadeg e voustachoù gant ar broc'h a vo en e reor, pa welo ac'hanomp e tegouezhout er c'hlas...

— Ya !

— ... Ni 'rank mont d' ar skol.

— 'M eus ket laret nann, morse, Veve.

— Kompren a rez ? Betek-hen, hon eus bet chañs, ken hon eus bet chañs. Den 'n eus gouezet netra. Mes ne gavez ket an dra-se drol, te, n' eo ket bet kaset den ebet betek da di gant M. Karadeg da c'houzout petra e teuemp da vezañ, da c'houl pe oamp klañv pe varv ?

— 'M eus ket soñjet morse en traoù-se. Mes n' oan ket em aes.

— Ha 'barzh da di ?

— Va mamm a gred dezhi e vezan bemdeiz er skol.

— Me, du-mañ, n' am eus ket mui peoc'h.

— I oar un dra bennak ?

— Nann, 'm eus laret dit. Mes me gav e ra va c'hoar Gaid daoulagad drol. Daoulagad ober goap. E-giz ma ouife. Atav emañ o teñsal ac'hanon. Hounnezh zo hegas, hounnezh zo hegas !... Pa vo bet distoupet ganin...

— Marteze te eo an hini a glask trouz, Veve. Te zo chigardet dre benn d' ar skol, ha te zo tagnous ouzh Gaidou, marteze.

— Te oar pegeit 'zo n' omp ket bet tost ?

— 'Ran ket. Un devezh gwener e oa atav, pa omp chomet da c'hoari, evit ar wech kentañ, goude bezañ lojet e geuneud d' ar bouloñjer.

— Pell 'zo, atav !... Oi ! va bouzelloù !... Ni vo lazhet gant ar skourjez, pa vo gouezet... Tampir gant pinijenn M. Karadeg. Hiziv e rankomp mont d' ar skol.

— Ya ! eme Baotr-Teo, asantus evel boaz. Mes a-raok e rankan mont da di Chel ar grampouezherez da lakaat troc'hañ va blev. Va mamm 'n eus laret din 'm oa amzer a-raok son ar c'hloc'h.

— Da droc'hañ da vlev ? » a c'hoarzhe Veig. « Da vlev n' int ket hir, te !

— Nann ! Mes va mamm he deus kavet ul laouenn 'barzh va fenn.

— Ha, beñ ! Evit ul laouenn !... » eme Veig diwar fae.

Chel Vuanig e oa ganti ur stal grampouezherezh, en un ti kozh teñval eus ru Foull-Fank, e kreiz-kêr. Pa oa bet intañvet, un nebeut bloavezhioù a oa, he doa kroget e binvioù-labour he den, a oa perukenner — Doue d' e bardono ! — Leuskel a rae, diouzh ma tegouezhe, toaz, pillig ha spanell evit an aotenn pe an douzerez, ha brud he doa da vezañ dornet akuit.

N' oa ket Veig ali gant ar vrud, hervez, rak lavarout a rae da Baotr-Teo, a-greiz m' edont o treuzañ ar Vadalen.

« Blijet out da vont da di Chel ?

— Va mamm 'n eus laret din mont aze.

— Hounnezh a fardo dit skalieroù 'barzh da vlev. Gwelloc'h e ve dit mont da di Kerlenn.

— Abalamour da betra ?

— Gouzout a rez. 'Barzh ti Kerlenn, ez eus melezhourioù bras-bras, ha neuze ur bern viloioù-kours, ur mell kaouedad laboused, ha Koko...

— Hi ! hi ! » a c'hoarzhe Paotr-Teo, asantus. « Ar peroked Koko... »

Chel pe Gerlenn, ingal oa an dra da vab Chann Grall, gant ma vije touzet dezhañ e benn, evit e zaou wenneg.

« Ha, marteze, e vo lakaet dit dour c'hwez-vat gant ur strinkerez war da benn. »

Distagañ a rae Paotr-Teo ur voñsadenn ouzh skoaz e geneilic, gant ar blijadur en devoe o soñjal e vije c'hwez-vat gantañ e-giz gant ar madamed o zog pluñv.

E gwir, ur blijadur e oa bezañ « servijet » — ne gouste ket keroc'h —, e stal Kerlenn, e ru Kereon, ar straed cheuc'h. Lakaet e vezec'h da azezañ war ur gador-vrec'h bransigellek ha troiellek, a bigne hag a ziskenne hervez ho ment. Dirazoc'h, ouzh ar voger paperennet-brav, a-zioc'h un daolig-varbr gwenn, gant ur gibellig er c'hreiz, hag un estajerennad boutailhadoù traoù c'hwez-vat, e oa daou bezh melezhour bras, naet, splann, hep un intr, a zistaole deoc'h ho tremm, ha kement jestroenn a raec'h, pizh ha resis, ma oa ur c'haer. Paket e vezec'h, ouzhpenn, en ur sae divañch, gwenn-kann, hag, en-dro d' ho kouzoug, ur serviedenn, gwenn ivez, ne servije nemet ur wech.

Dre c'hrad ar melezhour, e weled, en ur c'horn, ouzh harp ar voger enep, ha gwintet war o rod a-dreñv, evit kemer bihanoc'h plas, un hanter-dousenn kezeg-houarn, « viloioù-kours », evel ma lavare, leizh o genou gant ar ger nevez-se, ar baotred yaouank *à la page*. Ardivinkoù anezho, mistr, ha lintrus o nikel, prest da fringal, ha livet o fram-madur gant livioù splann, glas, melen, ruz, a zideotec'h gant ar c'hoant prenañ unan, ken nemet o luchañ warno.

E-tro ar mareoù-se, dav eo gouzout, e oa ur sport nevez o kemer e lañs e-touez yaouankizoù ar vro, ar redadegoù kezeg-houarn. Bep bloaz, d' ar 14 Gouere — deiz Gouel ar Republik — e veze prientet gant Kuzul-Kêr redadegoù kezeg-houarn war ar Vadalen, fichet anezhi tro-dro gant gwernioù uhel, o tougen pep a vanniell melen, brodet warnañ ul leon ruz lostet ha teodet-hir.

Ar Vadalen a oa, hag a zo atav, dirak ar C'hoc'hu Nevez, ul leurenn-gêr ec'hon-tre, kelc'hiet gant gwez evlec'h bras. Lakaat a rafen ac'hanoc'h da c'hoarzhin, ma lavarfen deoc'h e oa simantet. Ne oa ket, a dra sur. E douar kalet ha meinek e oa, gant forzh toulloù hag antoùigoù roudennet gant an dour-c'hlav.

C'hoari a rae ar rederien tro ar blasenn, an niver gwechoù kemennet, dirak ur bobl-tud, kêr a-bezh, koulz lavarout, stank ha stank a-dreñv klouedoù koad, ouzh o isañ kalonek dre o anvioù : « Tizh dezhi ! Gabi... Dic'hast ! Dic'hast ! Charlig... », rak, an holl gwitibunan, e oant eus Pont-'n-Abad pe a ziwar-dro. Pa dapent lamm, diwar re a herr, er c'hornioù-tro, ha diskroc'hennet ganto gar, ilin, pe jod, ez aent da walc'hiñ o gwad ouzh dour pomp ar blasenn, dirak ostaleri Mari Fer. Ha c'hoarzhadeg gant ar merc'hed : « Deus amañ, Gab, pe Jakez, pe Vastien, ma vo gwriet dit da doull ! »

D' an ampoent-se, n' oa gour, evit kas ar pedalennoù en-dro, sankañ tizh en o rodoù, par da Jarl Bastard ha da C'habig Kerlenn, enor Pont-'n-Abad. Dalc'hmat e vezent er penn, Gabig pe Jarl. Aze oa arzelloù !...

Hag anat eo n' oa den barrekoc'h egeto da zerc'hel kenwerzh kezeg-houarn.

Re yaouank oa Veig, evel just, evit ober ouzhpenn sellout ouzh ar mekanikoù burzhudus-se. Dibaot-tre e oa ar re a oa perc'henn d' ur vilo. Muioc'h a amzer a dremene va faotr o tic'henaouiñ ouzh kaoued ramz al laboused, hag ouzh ar peroked Koko, pa oa kamarad bras gant Lili Kerlenn, breur yaouankañ Gabi, hag ez en em brestent o Levrioù Bihan Roz hag o c'helaouennoù skeudennet.

Lavaret 'm eus : pa oa, rak fachet ruz e oant, abaoe ma oa bet tennet Veig diouzh skol ar Vistri — skol an diaoul —, dre c'hrad ne ouie ket piv, da vont da Sant-Gabriel gant ar Frered. Ar Gerlenned a oa debourien beleien, evel ma lavarere. Etrezomp-ni, ne zle ket bezañ gwall-vagus ar c'hig beleg, rak treut e oant holl, evel ar c'hagn, tad, mamm, an daou vab hag ar verc'h.

Ur wech eta, en ur c'hoari reizh-tre, hag a gement-se Veig a oa sur, en doa hemañ gounezet pizh-rac'h e holl

ganetennoù war Lili bihan. Ar jeu a zo ar jeu, n' eo ket gwir ? Lili Kerlenn, riñset propik, a oa deut ruz, ha glas, ha gwenn, ha, diwar e vroc'h, en doa stlapet, dre deir gwech, ha war daeraat, ouzh fas e gamarad, ar ger an dismegañsusañ a c'helle tarzhañ war veg e deod :

« Kalotin !... Kalotin !... Kalotin !... »

Disvantet en doa Veig ur viñsad ouzh jod Lili, ken en doa sonet penn hemañ. War se, o doa en em gannet e-giz daou loen gouez. N' eus ket dibardonoc'h eget ar brezelioù a relijion.

Sur, avat, e krede Veig en Aotrou Doue, a oa azezet gant e varv gwenn, war ur goumoulenn flamminek, e laez uhelañ an neñv, er Salver Jezuz-Krist, e Santez Vari, mamm da Zoue. Krediñ a rae en Aeleez ar Baradoz, gant ur stere-denn war o zal, hag en o askilli aour. Evit bezañ tostoc'h ouzh ar wirionez, koulskoude, eo koulz anzav ne rae ket kalzig forzh, da vagañ e relijion, gant Joaioù da zont ha muzikoù flour ar Baradoz. Mes krediñ a rae start en Diaoul, hag aon bominañ en doa rak an Diaoul. Ne blije ket dezhañ, tamm tout, soñjal e c'hellfe e feskinier mont da rostañ, un deiz bennak, e tantadoù ar Viltañs-se, kerniel dezhañ e-giz d' ur boc'h-bidi flêr, ul lost hir ouzh e reor, karnoù marc'h ouzh e dreid, hag ur fas dezhañ da lakaat ur razhedenn varv da zislonkañ, ken vil e oa.

Sur, en doa Veig relijion, hag e skol ar Frered e oa, war ar marc'had. Mes lavarout dezhañ : « Kalotin !... » N' o doa ket en em « breget », abaoe. Da lavarout eo, tost bloaz e oa. Traoù kozh holl eta ! Kollet o bilim ganto. Disonjet...

Daoust da se, n' eo ket gant ar c'hoant adskoulmañ gant e « frai » a wech all an hini oa dedennet, ar mintin-mañ, p' edo o vont betek toull dor e di. N' eus ket pennekoc'h eget un den hedro. Da Goko eo en doa diouer, abaoe ar geit. C'hoant en doa tennañ kaoz digant Koko, e-doug ma vije penn Paotr-Teo dindan touzerez tad Lili.

Nag ur chañs ! Koko, peogwir e oa brav an amzer, a oa bet lakaet er-maez, mintin abred, e-tal an nor. Stag e oa dre ur pav, eveljust, gant ur chadennig hir, ouzh e glud, anezhañ ur peul koad, gant barrinier tro-dro, heñvel ouzh pazennoù ur skeul da Goko da bignat ha da ziskenn e-giz a gare.

« Ha ' oas ! Koko. Salud ! Koko ! » eme dezhañ Veig gant e vouse'hoarzh ar chichantañ.

Ar peroked, ul labous glas, gant ur bluenn ruz bennak e pennoù e zivaskell, a baras warnañ sell diflach e lagad ront ha du, hep malvennoù. Roc'hellat a reas ur poz bennak : « Greu ! greu ! ouac'h ! », a oa marteze e yezh an Indianed Gouarani, pe c'houezidi all, a vev en Ifern Glas ar c'hoadoù tomm eus ribloù ar stêr Amazonas pe an Orenoke.

Hogen dont a rae gantañ ivez, pa gare, galleg ha brezhoneg. Mechañs n' oa ket war e du mat, ar mintin-mañ, pe e oa mouzhet ouzh Veig, e-giz e vestr bihan. Hep muioc'h a van ouzh va niz eget ouzh ur votez toull, ez en em lakae, gant fiñvoù stroallek a-walc'h, da grapat e skeul gant skoazell penn e fri koulz ha gant e grabanoù. Ur pezh pigos du tev en doa, kromm ken e oa kromm — ur fri peroked, na petra ! — ha pik eus ar beg.

« Petra 't eus debret da lein ? » a c'houlenne Veig, hegarat ha sartik... « Ur sac'had mein ? »

Boud, nemet stirlink ar chadennig ouzh bizhier koad ar glud.

« Ha petra 't o da verenn, Koko ?... Pavioù kelien pe drein spenn ? »

En em lakaat a rae Koko da skrabat e bluñv, a-zevri-kaer, gant e bav diere.

Evit ur peroked, n' oa ket Koko ur peroked gwall-zistagellet e deod. Mut Koko, pa lavaran. Bouzar ha mut, ma n' oa ket dall, evel Gurvan, ar marc'heg estrañjour. Mouzhet, kentoc'h, rak dont a rae kaoz gantañ, pa gare.

« Ha da goan ? Koko », a gendalc'he Veig. Kaoz en doa Veig evit daou. Ober a rae ar goulenn hag ar respont :

« Petra 't o da goan ? Stlipoù logod ha kig moan ? »

Pa save ur vouezh maouez, er gegin, er penn all d' ar stal-perukennerezh. Mouezh madam Kerlenn.

« Alo 'ta ! pismiger. Poent dit hastañ, pe e vi diwezhat er skol. »

Gant ar preder a gemere ouzh al labous e veg tort, n' en doa ket Veig taolet kont edo e enebour treut o tebriñ e zijuni ouzh taol ar sal a-dreñv. E fas magnous en doa gwisket, ha sellout a rae vil ouzh dor ar ru, da lavarout eo ouzh Veig.

N' en doa ket Veig aon rak Lili Kerlenn, n' en doa ket aon, sur, ha pare oa evit un distoupad all. Mes n' oa nag ar c'houlz nag al lec'h, nag abeg ebet, en ur soñjal ervat, d' en em yennañ, ur wech all.

« Gwelloc'h eo din mont pelloc'h », a soñjas Veig, koulskoude. Sed a oa bezañ fur.

Hag eñ kuit, a-hed ar riblenn-straed, gant e zaouarn en e chakodoù, en ur ruzañ e votoù war ar pavez. C'hwibanata a rae *Matonkiki, matonkinoaz*, etre e zent, e-giz ur paotr yaouank, evit diskouez fraezh ha sklaer n' oa ket chalet gant an hini all na gant e labous karn.

N' oa ket degouezhet dirak ti Moizan, ar marc'hadour gwin, pa darzhe ur foeltr a daol-c'hwitell, a-dreñv e gein, hag ur galv, da heul :

« Ep ! ep !... »

Treiñ a rae e benn, dres evit klevout ar peroked o trompilhañ :

« Kaoc'h evidoc'h !

— Ha va reor evidout ! » a zicheke Veig, dirukel.

Feuket va aotrou, mar plij. Kemeret en doa evitañ luc'haj distaolad divergont ar Brazil.

Ya ! Gwelloc'h e vije, e korn ar ru, o lipat gwerenn staliad traoù devot an dimezelled Fleiter en ur c'hortoz Paotr-Teo.

Gwelloc'h c'hoazh en dije bet graet, d' am meno, o chom, ur vunutenn bennak ouzhpenn, d' en em bigailhat gant Koko, rak, amzer dezhañ stagañ e fri ouzh prenestr ledan an dimezelled Fleiter, e save ur vouezh all, a-dreñv e gein. Mouezh un den e oa, an taol-mañ :

« Ac'hanta, pâotrrig ! O vont d' ar skol ? »

Hag e welas sko ennañ, ur sae du hir. Ur soutanenn, gant un den e-barzh, evel just. Ur beleg, en doa muioc'h a c'hoant « kaozeal » eget ar peroked glas, hep ket a var, rak stagañ a rae ganti, kerkent :

« Penâoz emañ kount ganez ? »

— Hi ! hi ! » a responte Veig. N' en doa ket komprenet. Tennañ a reas e voned, evel ma oa bet desket dezhañ ober, dirak an dud-a-iliz.

« Penâoz e vez grreat ac'hanout, kanfarred bihan ? »

Rollañ a rae hennezh e « erroù », en un doare iskis da skouarn ar paotrig.

« Hi ! hi ! » emezañ adarre, en ur sevel e fas rous da vousec'hoarzhin ouzh ar beleg. Ha merzout a reas e oa yaouank ar beleg, hir ha strizh, roz e zivjod, ledan e vousec'hoarzh, ur varetenn pevar-c'hornek taolet en a-dreñv war e vlev liv ar mel, ha... besteed, un disteraik. Hennezh n' oa ket aes kompren e vrezhoneg.

« E petore skol emañ, mabig ? »

— E Sant-Gabriel, e skol ar Frered.

— A...c'hanta ! A zo mat ! Gouzout a ouzout neuze da bateroù, 'm eus aoun.

— O, ya !

— Ac'hanta !... Ac'hanta !... E brezhouneg ? E galleg ? E latin ?

— O, e galleg.

— Douetus ! Evel ma tere, penegwir emañ er skol gristen. Ne vez kelennet eno katekiz brezhouneg nemet d' ar gouerien vihan, an drouc'herien-buzhug. Eus a gear ez out, kredabl... Lavar din-me, mabig ? Daoust ha gouzout a ouzout lenn ?

— O, ya ! Mat-tre.

— Ac'hanta !... Daoust ha ne vefe ket stad en tamm ac'hanout bezañ kurust ganen ?

— Hi ! hi ! »

Perak n' en doa ket lavaret « masikod », evel an holl ? Intentet en dije Veig, ha gallet ober ur respont estreget ar

« hi ! hi ! » -se, ne yae da du ebet. Mes kemeret a voe ar « hi ! hi ! » evit un asant.

« Ac'hanta !... »

Tennet en doa ar beleg yaouank e eurier eus ur godellig a-zindan ar gouriz du ledan, a rae an dro d'e zargreiz.

— Amzer az peus c'hoazh, a-raok eizh eur. Deomp timat da ober un taol-esa ! Deus ganen betek ar sakristiri, mabig !

Ober a rae ur vountadig da skoaz Veig, strafuilh o kregiñ en hemañ, ha kuit, o daou, war hent an iliz, dre ru Garmez.

N' oa ket ar beleg-se, « kredabl », den da lezel al laezh da zont war an tan. Kerkent ha mennet, seveniñ ar mennad ! Gant an taol-lagad kentañ, en doa meizet e oa un dra bennak da ober gant ar « c'hanfartig », en doa kavet dirak stal ar chapeledoù hag al levrioù a zevosion ; e oa danvez da bleustrañ er pennig-se, daoust pegen mistr e oa ar c'horf, en douge. Arnodiñ war an tomm !...

N' en doa ket soñjet, avat, en un dra : goulenn e ali digant ar « c'hanfartig ». N' oa ket ar « c'hanfartig » ali gantañ, e mod ebet. Abalamour da Baotr-Teo hag abalamour d' ar skol.

Kollet e vije Paotr-Teo, ma ne gave ket e « frai » Veve ouzh e c'hortoz war ar ru, da vont d' ar skol. Ha boud adarre evit ar skol, ur wech ouzhpenn, gant ar « frai » Paotr-Teo ha gant ar « frai » Veve. Pezh a vefe an diwezhañ.

Setu petra vije bet lavaret gantañ d' ar beleg, m' en dije bet kemeret hemañ amzer da selaou ur ger eus genou Veig.

Nann ! Kuit e oa aet e-giz ar gurun. Astenn a rae e c'haol, a rampadoù hir, ma ranke Veig piltrotat, e-giz ur c'hi bihan da heul e vestr.

An Ao. Gak — rak Gak e oa anv ar beleg, pezh e zegouezhe brav-tre, peogwir e oa besteod, — a oa bet kaset, adal ha beleget — e forniad Pask diwezhañ, — da amprou oberiantiz froudheñvel e ene abostol, e digristenañ parrez a oa, moarvat, en eskopti Kemper ha Leon, d' an ampoent. An nebeutañ a c'helled lavarout eo ne yae ket mezv paotred Pont-'n-Abad gant an dour benniget...

Ha, gwir ! ur saouzan e oa bet d' al Leonad yaouank — muioc'h, ur galonad —, niveriñ un dousenn bennak nemetken a vicherourien pe a zevezhourien, en oferenn-bred. Un dousenn kristenien wirion, en ur barrez a c'hwec'h mil ene !... Pell oa Pont-'n-Abad diouzh douar santel Gorre-Leoun !...

Digalonekaet hor c'hure nevez ? Ha ne oa ket ! Leonad e oa, ha beleg Doue e oa. Paotr yac'h ha drant ouzhpenn, eus gouenn ar saverien kezeg, hag asur-divrall, ken gwir ha ma rede gwad ruz dindan e ivinoù, da goñvertisañ gwazed Pont-'n-Abad. Dindan dek vloaz. Sed aze a oa kaout gred ! Displeget en doa an uhel-mennad-se, ouzh taol, er presbital, dirak tri beleg sabatuet : an Aotrou Person hag an daou gure all. N' o doa ket koeñvet e ufernioù, en despet da vousec'hoarzh sioul — hum ! — an Aotrou Person ha da vourennig an daou gure all : hum ! hum ! Graet an eost a-raok hadañ gant hor c'henvreur yaouank !

Da c'hortoz, ha peogwir e oa e brud e nerzh ha war ar boulc'h kentañ, e oa bet fiziet ennañ gant an Aotrou Person paotredigoù ar c'hatekiz... hag ar re all. E seizh-wellañ a rae — n' am eus ket lavaret : en aner —, da zastum en dro dezhañ mousetaj kêr, er patronaj nevez-flamm war Hent ar Vered, ha d' o diwall eno, dindan e lagad, en ur reiñ dezho « diduell yac'h ha kristen, pell diouzh dañjerioù ar straed ».

Ha setu perak — ha penaos, evel ma ouzomp, — e oa bet higennet gantañ hor Veig Trebern, e korn ur ru. Ur vray a stokenn, a lavarot !... Glizig avat a zeu da eog.

Dre ma 'z aent gant an hent, e konte an Ao. Gak d' e ziskiblig nevez :

« Gwelout a ri, mabig !... Na stad ha lorc'h a vezo ez kerent vat, nag a enor, p' az kwelint gwisket en ur soutanennig heñvel ouzh va hini-me ! Ruz, avat, e vo da hini-te, pe c'hlas. Kaeroc'h e vezo, neketa ?

« Ha, war ar marc'had, ne vezi ket dic'hopr... »

O, al Leoniz-se, a zeu, gant o bizied, an hevelep jestr da zibunañ greun o japeled ha da jediñ o gwenneien !... Hogen, war an dachenn-se, e c'helle bigoudenn ha pagan en em intent.

« ... Un toulladig arc'hant a c'hounezi. »

Hedet o doa ru Garmez, re vat anavezet gant Veig, peogwir e kase, goude treuzet plasenn an Amann, d' e skol, war an dorn dehou, hag, eeun dirazañ... d' ar vanell-zu, d' ar c'hoad ha war ar c'hae.

Ar beleg, avat, a droe war e zorn kleiz. War-du plasenn Garmez. Gwelout a raed, er penn all, talbenn gwennrazet ar presbital. An Ao. Gak a drouze e sae du evel ul lien-bag en avel, rak troc'hañ a rae hent, a rampadoù hir, Veig d' ar piltrot d' e heul, kamm e vuzell. Ha na toull na dor zigor war ar ru d' en em laerezh. Forzh penaos, galoupet en dije ar beleg divisker hir-se buanoc'h egetañ.

Ha setu plasenn Garmez ha, war an tu dehou, an iliz vras gant he daou borched mein griz debret gant an amzer. Diskenn a rejont enni, e-giz en ur c'hav, dre zirioù mein ledan. Suc'hellat a rae Veig, skarzhañ e c'hourlañchenn, ha torchañ e fri gant kein e zorn kleiz.

Soubet en doa ar beleg ur biz er piñsin ha kinniget dour benniget da Veig. Sin ar groaz gant e zorn dehou, hervez ma oa bet desket d' ar c'hleizier anezhañ, ez vihanik, pa yae da skol ar Seurezed. Sklokal a rae — klok ! klak ! klok ! klak ! — botoù-koad ar paotrig war daroù greunvaen an nev ec'hon, hag uhel spontus he bolz. N' oa ket un ene kristen en-dro d' ar c'hadorioù. N' oa ket ar sul.

Ur pleg azaouezus d' ur penn-daoulin dirak an Aoter Vras, soubet sioul e skleur ar gwereg e livioù trellus, hag edont erru, en tu dehou d' an aspled, a gaele ar chantele, dirak un nor bonner sanket don en ur voger fetis, dindan ur wareg izel.

Pa zigoras ar c'hure an nor, e tifoupas ouzh diskouarn Veig gwagennoù ur muzig boemus. Edo er sakristi, hag edo ur beleg kozh o son gant an armoniom.

« Doue r'ho pennigo ! aotrou Chaloni », a daole an Ao. Gak, mavik. « Stad a zo ennoun ouzh ho kavout amañ, aotrou Chaloni. Degas a ran deoc'h, end-eeun, ur mousig a zo e zezo, emezañ, deskiñ ar c'han, en amboaz bezañ kurust. Ha plijout a rafe ganeoc'h arnodiñ penaos emañ kount gant e vouezh ? »

Ur pezh kambr vras karrezek e oa eus ar sakristiri, skleri-jennet gant ur prenestr uhel, hag houarn-barrennet — kentañ tra a welas ar paotr — ha lambrusket gant arrebeuri uhel e koad derv koaret.

Dres e-kreis al leurenn, e oa staliet an armoniom, ur pikol monumant teñvalik, gant ar beleg kozh azezet dirazañ, o son hag o vousekanañ, savet e benn gantañ, evel m' en dije lennet e notennoù war dreustoù ar solier... E-giz ur c'hazh, pa vez war al ludu, e soñjas da Veig, dizouj-kaer, hep gouzout dezhañ. N' oa nemet ur c'hrouadur.

Marteze en doa klevet ar muzikour prezegenn ar c'hure yaouank. Marteze n' en doa ket. Rak kenderc'hel a rae, e-pad ur reuziad da vagañ trouz dudius, en ur lakaat pennoù e vizied da vac'hañ war renkennadoù touchennoù gwech gwenn, gwech du, tra ma luske div droadikell gant e votoù — ur sell en doa Veig evit pep tra —, e-giz ma ra ar c'hemenezerezed gant o mekanik-gwriat.

Neuze, e poueze war ar c'hlaouier gant holl vizied e zaou dorn lakaet en aveler digor, hag e tenne dioutañ ur vlejadenn voud, a yeas goustad war devel.

« A ! Gwelomp, neuze. Digoulzik e tegouezhit, kenvreuer yaouank, rak edon o vont. Gortozet on er gêr da eizh eur.

— Ha me er skol da eizh eur », eme Veig dre e soñj, ha moñs e benn.

« Un arnodenn a netra, aotrou Chalon. Evit ur gwelet nemetken... A 'ta !... E peleac'h emhout, lakoun ?

— Amañ ! » eme Veig, o 'n em ziskouez eus tu-dreñv an armoniom. Uheloc'h egetañ e oa ar benveg malañ sonerezh.

« Tosta, va bugel ! » eme ar beleg kozh.

Sevel a rae e lunedoù aour betek kreiz e dal da sellout ouzh Veig, pezh a lakaas hemañ souezhet. Ma touger lunedoù war ar fri, evit gwelout sklaer ez eo ; n' eo ket gwir ? Perak e tenne hemañ e re da sellout outañ ?

« N' eo ket gwall-fetis hoc'h Eliakim nevez, aotrou Gak ; gwelomp atav ! »

Pouezañ a rae gant e dreid war an troadikelloù, tra ma tenne, gant ur biz, ur son-pad diouzh unan eus an touchennoù gwenn.

« Dooo ! » emezañ, gant ur vouezhig faoutet. « Gra ivez : Do !... va bugel ! »

Ha Veig :

« Dooo ! »

Sellout a eure ar c'hure ouzh ar chaloni gant neuzig an trec'h :

« Reizhik mat eo e vouezh, 'm eus aoun, emezañ.

« Skouarn ez eus », eme ar beleg kozh. « Ha gouzout a rez da notennoù, va bugel ? » a c'houlenne, tra ma pigne ar skeul-gan war an armoniom.

« Hi ! hi ! » a rae Veig. Ne ouie ket petra a c'houlenned digantañ. Ne veze ket desket kanañ e skol ar Frered.

« Ma ! Te a gano ganen », eme C'hak vras. Hag, eilet gant an armoniom, e pigne skeul an notennoù, war e bouez :

« Do, re, mi, fa, sol, la, si, doo ! »

Ha Veig — krenañ a rae e vouezh, siwazh d' e galonig, diwar e esmae :

« Do, re, mi, fa, sol, la, si, do... »

« Hesonik eo e ourouler, daoust ha dister », a asantas den an armoniom, en ur vousec'hoarzhin. « Tennañ implij a c'hellot eus hoc'h eostig nevez. Gourc'hemennou ! aotrou Gak. Bremañ eo mall bras din mont.

— Reizh hag heson, klevet az peus, mabig ! Lorc'h a zle bezañ en tamm ac'hanout dre m' eo bet kavet talvoudek da vouezh gant an Ao. Durand, ha barrek da ganañ er c'heur. Ne ouezez ket piv eo an Ao. Durand, klaoustre !... Ur sonaozour brudet en eskopti a-bezh, ha gouizieik meur-bet, ha bet kelenner er C'hloerdi-Bras ! »

Na ne vamer na ne vadaouer, da oadoù Veig Trebern, gant gerioù, goullo evitañ, seurt brud ha gouiziegezh. N' en doa gwelet, o tec'hout primik, e-giz ul logodenn, dre zindan bolz an nor a zigore war chantele an iliz, nemet un denig du e vlev gwenn, kruk, kozh-Noe, ha dezhañ kroc'hen yar-Indez war e c'houzoug.

Taolet en doa an Ao. Gak ur sell ouzh horolaj ar sakristiri, ha frotet e zaouarn.

« Amzer hon eus », emezañ. Digeriñ a rae, war un daol a-stok ouzh traoñ ar prenestr uhel, ul levr ramz e gein ler.

« Gwelomp ha barrek e vefes da lenn war al levr-mañ. Moulet bras eo al lizherennoù. Amañ, da skouer ! »

Diskouez a rae ul linnen, an hini gentañ deut, gant e viz-yod. E latin e oa, evel ma tere evit ur misal. Rak bez' en doa Veig, dindan e sell, ul levr-ofereñ bras.

Ha Veig ha dishiliañ, ger war-lerc'h ger, evezhie ha divall :

« Vir... gam... vir... tu... tis... tu... a... e...

— Tu... e, tu... e ! » a resisae an Ao. Gak, drantik, kalonekaüs. « A zo mat ! Dispar ! Dont a ra ganez brav-kenañ. Disklipañ a rez al latin koulz hag ur c'hloareg. Te zo ur mailh ac'hanout... »

Krennet e voe ar barrad meuleudioù gant ar c'hloc'her — paotr-ar-chas, evel ma lavaromp du-mañ —, o 'n em gavout er sakristiri dre an nor vihan a skoe war ziri tour ar c'hleier.

« Va digarezit, aotrou Gak, ma tirenkan ac'hanoc'h. E kambr ar c'hleier... »

Un den dillo e oa eus ar c'hure yaouank, hen gwelet hon eus.

« Deomp da welet raktal », emezañ... « Te, mabig, lenn c'hoazh, en ur zeport. Ne vezin ket pell o vont hag o tont. »

Hag eñ kuit kerkent, gant ar c'hloc'her, dre zor vihan an tour.

Ha Veig, kerkent all, ha sevel e fri, diwar al levr latin bras, davet ar prenestr e varrinier houarn, ha sevel e foñs diwar ar gador, hag, amzer sammañ e sac'h-skol war e gein, tapout peg gant e zaouarn en e votoù koad, hag en em dennañ, mar gouie redek, dre an nor all. Treuzañ ' rae an iliz en he hed d' ar c'haloup, hep ur sell ouzh an Aoterioù, ouzh ar Sent, ouzh ar pileroù mein postek, nag ouzh ar piñsinoù dour benniget, ouzh harp an nor-dal. Piñsinoù e greunvaen, ken ledan ha ken don, m' en dije

gallet neuñ e-barzh. N' en dije ket redet buanoc'h, ma vije bet ur c'hi klañv war e lerc'h.

Ha kuit a dizh hag a dren, a-dreuz plasenn Garmez. Tapout a reas, d' ar red, an hent dilevenez a gas d' ar C'hoc'hu Kozh etre ur chañter-glaou ha moger louet an uzin soud. Treuzañ a reas ar C'hoc'hu Kozh, atav d' ar red, hep ur sell ouzh ar staliou frouezh ha madigoù. Ken na tiskornas war ru Gereon.

Lakaat a rae un ehan da wiskañ e votoù, ha da dennañ e anal. Ezhom en doa. Neuze e taole ur sell a-zehou hag a-gleiz — stal traoù mat Madam Chich oa sko, aze, war an dorn dehou — a-gleiz, dreist-holl, eus tu ti Kerlenn. N' oa Paotr-Teo ebet war wel. Mes atav e oa Koko, du-se, war e berchenn bazennek. Ha kuit Veig davetañ, a-zoug e gamm, a-hed ar riblenn-straed pavezet, lintrus en heol mintin.

« Ma ouife al Lili karn-se eus pelec'h emañ o tont, neuze 'vat e yafen bouzar o klevout hennezh o larout din : Kalotin ! » a lavare dre e soñj.

Dic'houzougañ a rae e toull-dor an troc'her blev. Gwelout a reas an eur, rak gouzout a rae lenn an eur, war an horolaj ispilhet a-us da zor ar gegin : eizh eur nemet pemp. War gador-vrec'h Paotr-Teo e oa un aotrou o lakaat lemel e varv, gwenn-kann e veg, betek e zaoulagad, gant ar soavon. A Baotr-Teo na liv na roud...

« Koulskoude, 'm eus graet tizh », eme Veig, kerseet.

« Greu !... greu !... » Dispac'hañ a rae ar peroked war e skeulig, en ur lakaat e chadennig da stirlinkat.

« Uf !... Anduilhenn !... » a c'hroz mole Veig. Deut oa tagnous diwar e gerseenn, ha fachet oa ouzh Koko.

« Greu !... greu !... ouac'h !... » eme adarre ar peroked, ouzh sklak e zivaskell, an taol-mañ. Ne welit ket en dije hopet : Kalotin ! dezhañ e-kreiz e fas.

« Uf !... Fri-krok nostrom !... » eme Veig, en ur hejañ e skoaz. Tennañ a reas e deod d' al loen glas, a bare warnañ, diseblant-kaer, ul lagad ront ha du.

Ne chomas ket da ober chiboud e korn ar ru, gant aon gwelout ur beleg all o tifoupañ eus boutig an traoù devot.

Kenderc'hel a reas gant e hent war-du plasenn an Amann.
En em chalañ a rae :

« Kement-se, n' eo ket aet ar « goi » -se d' ar skol »
— ar « goi » a oa Paotr-Teo —, « hep gortoz ac'hanon.
N' am eus ket gwelet morse ur « goi » e-giz hennezh.
Hennezh zo ur « goi » 'vat ! » ne gave ken da lavarout.
Sevel a rae nec'h en e dammig kalon — c'hoant mont d' ar
skol en doa — tra ma heulie an hent en doa kemeret, gant
kement a zisplijadur, un ugent munud e oa, gant an Aotrou
Kure.

Plasenn an Amann adarre. Ha setu ar c'hoad ha penn
ar Vanell-Zu. Astenn a raent dezhañ o divrec'h, ma c'heller
lavarout, o truchañ anezhañ da zont war o barlenn... Mes
treiñ a rae dre Hent ar Vered. C'hoant en doa mont d' ar
skol.

N' oa bet biskoazh tognoc'h e fri, pa harpas e-tal dor
strizh porzh-c'hoari Sant-Gabriel. Sur, e oa dale gant
horolaj ar perukenner, rak goullo-spontus e oa al leurenn
vras, ha klevout a rae ar baotred, er c'hlas dostañ o
trailhañ a-gevret :

« Deux fois deux quatre, deux fois trois six, deux fois
quatre... »

Ha reolenn ar mestr-skol o skeiñ herr war daol e vurev.

N' oa ket posubl treuzañ ar porzh ec'hon-se penn-da-benn — du-hont, er penn pellañ e oa e sal-klas —, ha mont da azezañ war e vank, diwezhat adarre, dirak M. Karadeg. Debret e vije bet gant M. Karadeg.

Ur skrab d' e doull-kil, ha Veig hag ober tro, krog e zent en e vuzell-draoñ.

Ha Paotr-Teo ebet tro-dro. Sell aze 'vat !

« Marteze, emañ ar « goi » -se, er vanell, o klask ac'hanon !... Pe 'barzh ar c'hoad ! »

Na « goi » na ki er vanell. Krapat a rae ar paotrig war ur c'hleuz, dre ar riboulenn anavezet re vat hiviziken, da sellout en toull-kuzh. Ne oa ket sac'h Paotr-Teo e-touez ar strouezh.

« N' eo ket aze emañ ar skol. Diwezhat e vi er skol », a hope dezhañ ur vigoudenn dev, eus kreiz ar parkad kaol-saout.

Ar skol ?... Ha c'hwi ' yafe, hoc'h-unan d' ar skol, c'hwi ? Hep ho kamarad ? Goude bezañ chomet keit-all hep mont tost.

Ha Paotr-Teo ebet, na tost na pell, e tro ar wezenn fav, er c'hoad. N' oa eno nemet un armead kelien du oc'h ober chervat gant dilerc'hioù ar fest chokolad, o doa graet — ha distaolet, allas ! — va daou gomper, en derc'hent. Ne ya netra da goll er Bed Krouet.

Dilugerniñ a reas Veig ouzh an daolenn gant ur sell drouk.

« Feiz ! Hennezh a dapo ganin, pa gavin anezhañ », a gounnare. « Hennezh ' glevo diganin !... »

N' ouie ervat dre be du treiñ. N' oa tamm ebet en e vleud. Ne rae ar Paotr-Teo-se nemet sotonioù, pa ne veze ket Veig war e gein.

« Penn-laou », a larin dezhañ. « E c'hell bezañ sur e larin dezhañ : penn-laou !... Tout ar pezh a c'hoarvez a zo dre benn d' e laouenn vrein. Ha ma kred dezhañ emañ o vont da redek war e lerc'h. »

Pa rae ur piklamm, gant ur meno savet trumm.

« Ya ! feiz... Marteze 'm eus ket sellet mat a-walc'h 'barzh ti Kerlenn. Marteze eo chomet azezet war ur gador, en ur c'hornig, e ti Kerlenn, da c'hortoz ac'hanon. »

War an taol, e save divaskell en-dro d' hor chaseour. Ha kuit d' an trot adarre etrezek kêr. Labour vo d'e dad lakaat tachoù nevez dindan e votoù.

Hedet en doa, ha tizh warnañ, an hanter vrasañ eus ru Garmez, pa gleve :

« Ep ! ep !... Veve !... »

Harpañ ' rae krenn. Ne wele den en-dro dezhañ.

« Ep ! Veve... Amañ emañ ! »

Ha setu ur penn o tiskoachañ eus a-dreñv dor difor-linket trepas un ti don e mein-ben eus an amzer gozh, ur penn touz e-giz ur vi, war ur fas rouz leun a vrizhoù, penn Paotr-Teo, mavik hag aonik, war un dro, e zaoulagad glesker.

Veig : « A ! aze emañ ? Te oar anezhi, te !... »

Paotr-Teo : « N' eo ket me. Ar Gallou bihan an hini eo... »

Veig : « Ha me, ha me... Petra 'n eus peget ennout mont da guzhañ ouzhin ? »

Paotr-Teo : « Ar Gallou bihan, pa laran dit. Perak n' out ket chomet, te ivez, da c'hortoz ac'hanon ? »

Veig : « Ha te, te n' oa ket dit mont kuit. »

Paotr-Teo : « Ha te, te n' out ket chomet ivez. N' on ket bet keit-se, gant va blev. »

Veig : « Ne 't oa nemet gortoz ac'hanon, ken na vijen deut en-dro. Ar beleg... »

Paotr-Teo an hini a gavas ar c'hentañ penn e neudenn. Ha teod dezhañ. Evel an dud tavedek-se, a flep hag a fistilh, ken a reont pa vez ur banne ganto dindan o fri, Ifig Korku, pa veze bet diwar boan spered — tra ral kenañ — a zeue dezhañ teod Chann Grall. Ha trevariet oa bet, rak mont a rae e deod en-dro. Dibunañ ha dibunañ a rae, hep kemer amzer da dennañ war e anal :

« Ma ! N' oan ket kontant, pa n' am eus ket gwelet ac'hanout war ar ru, na neblec'h. Sell ! me lar. Aet eo Veve d' ar skol hep gortoz ac'hanon. Hag on aet buan war da lerc'h. Ha pa on degouezhet dirak dor ar porzh, e oa ar c'hloc'h oc'h echuiñ sonañ, ha tout ar baotred war renk evit mont d' o c'hlas. Ha 'm eus ket gwelet M. Karadeg. Ha 'm eus ket gwelet ac'hanout. N' oan ket kontant, te oar. N' am eus ket fotet din mont va-unan d' ar c'hlas, hag on deut en-dro eus kostez plasenn an Amann, hag e oan o klask ac'hanout, pa on bet tapet gant ar Gallou bihan. Hennezh zo ur polis « blech », avat ! Lammet 'n eus warnon 'giz ur bleiz ! — Petra 'maout oc'h ober aze ? 'n eus laret din. 'T eus ket klevet ar c'hwitell ? D' ar skol, diouzhtu ! — Peget 'n eus din 'barzh va brec'h 'giz gant un durkez, ha stlejet ac'hanon betek dor skol ar Vistri, te oar, an nor vihan, evit kas ac'hanon betek ur c'hlas. — Me 'maon ket er skol-se, 'm eus laret dezhañ. — A ! Te 'maout ket e skol ar Gouarnamant ? 'n eus laret din, en ur zispegañ eus va brec'h. Te zo e skol ar Galotined ? — Ya ! 'm eus laret dezhañ. — Ma ! Troc'h buan, neuze, da skol da Frered, pe e vi kaset ganin d' ar prizon. — Hennezh zo ur polis « blech », avat !... Evuruzamant, 'n eus ket goulet va anv diganin. Me 'm eus graet an ezvan da gemer Hent ar Vered. Eñ zo diskennet eus kostez koad Sant-Lorañz, ha me, pa eo bet pell, me zo deut amañ da guzhañ, 'barzh an aître. Me 'm oa aon mont va-unan d' ar skol. Mes me gave hir va amzer... »

Paotr-Teo oa da vezañ kredet. N' oa ket ul liardad « fisel » en e gorf. Kontet en doa e « wall-eurioù ». dres evel ma oant c'hoarvezet. N' oant ket mantrus ; n' oant ket fentus. Evitañ d' an nebeutañ. C'hoarzhin a rae Veig, memes tra. Re a blijadur a oa ennañ, oc'h adkavout e

« frai kouzh » yac'h ha dibistik, da heul un enklask, n'oa ket bet dienkreiz ; mes re farsus e kave ivez penn noazh hemañ.

« Da benn zo 'giz bolomig ar skalier », emezañ da Baotr-Teo.

— Va mamm 'n oa laret din larout da Chel ar gram-pouezherez troc'hañ din va blev touz, touz, betek ar c'hroc'hen.

— Ha da voned ? Te 't eus kollet da voned ?

— 'M eus ket. 'Barzh va sac'h emañ ganin. Kouezhañ 'rae betek va divskouarn ha va daoulagad, ha me 'm oa mezh. Mes te, Veve... Da veleg... »

Pa darzhe ur vouezh maouez, e laez an diri mein, a gase d' ar c'hambroù :

« 'P eus ket echu gant ho jolivari, e-barzh an aître-se ? N' eo ket amañ emañ ho skol. C'hwi zo o c'hortoz ac'hanon da vont da gas ac'hanoc'h d' ar skol gant trojenn va balaenn ?

— Puff !... » a rae Veig, en ur lakaat e zorn war e c'henou, evit mirout da c'hoarzhin re greñv. « Deomp kuit buan ! »

Savet o doa an daouig o fri, ha bet amzer, a-raok skarzhañ, da spurmantañ, war ar pondalez, a zioc'h o fennoù, traoñ ur gotilhon ha reun melen ur skubellenn.

« A ! feiz », a c'hoarzhe Veig, torret da vat war e imor fall. « N' emaomp mat neblec'h. Fustomp d' ar c'hoad ! »

Ya ! Memes a-dreñv dor breñvedet trepas don ha teñval un ti kozh, e tarzhe skandal dirukel ar re vras : « N' emañ ket ho plas amañ ! Ho plas a zo er skol ! » N' oa nemet ar maezioù don hag ar c'hoadoù dizarempred a gement a ouezfe, pell diouzh kunuj ar re vras, reiñ degemer, evel d' al loened dizoñv, da zaou skoliad enket, hag en o gwall.

« Ha ganit, Veve ? » a c'houlenne Paotr-Teo, en ur redek skoaz-ouzh-skoaz gant e « frai » adkavet. « Petra zo c'hoarvezet ganit ?... Te lare : ar beleg...

— Ma ouifes petra zo c'hoarvezet ganin, n' hallfes ket mui sarriñ da c'henou », eme Veig.

« O, me gred ac'hanout, Veve. »

Hor « Veve » ne vije ket bet Herve Trebern e anv, ma ne vije ket bet livet gantañ, da sabatuiñ e gamarad, ur rimadell, tres toniusoc'h dezhi eget n' oa bet e avañtur, e gwirionez. Rak n' oa ket peadra c'hwezhañ en e bluñv gant e dec'hadenn binous diouzh ar sakristiri. Hogen n' oa ket difaltazi va aotrou.

« Hama ! paotr paour. Chomet e vijen da gaozeal gant Koko, kamaraded e-giz ma omp, e-pad ma oas o troc'hañ da vlev. Mes, pa 'm eus gwelet Lili Kerlenn o tibriñ e lein, er gegin, em eus laret : Gwelloc'h eo din mont pelloc'h. Ni zo fachet, te oar, mes n' em eus ket mui malis deuzoutañ, hag hegas em ije bet o plantañ ar yenn ennañ, ur wech all. Ha mat 'm eus graet mont, rak, selaou, Ifig, amzer din degouezhout e korn ti Fleiter, divun piv zo deredet d' am c'haout.

— N' ouzon ket.

— Ur beleg ! Ya ! paotr. Ur beleg !...

— A ! ya. Ar beleg... » eme Baotr-Teo.

« Ya ! An Aotrou Gak, kure nevez ar presbital. Ur bouilh beleg, te oar. Deut da bediñ ac'hanon, mar plij, da vont gantañ betek ar sakristiri. Aet on gantañ, te oar mat. Ma 't ije gwelet ac'hanon o lenn latin, « frai » paour, en ur pezh mell levr !... Gant pezhioù lizherennoù a bep seurt livioù flamm !... Ha ma 't ije klevet ac'hanon 'ta, o kanañ gant an armoniom !... Gant ur beleg kran, lunedoù aour war e fri ! An Aotrou Chaloni eo e anv. Ken istonet int bet, o daou, gant va mouezh, ma ne ouient ket mui petra da larout... Morse n' o doa klevet.

— Oi ! » eme Baotr-Teo, bamet ma oa. « Neuze 'n eus goulet ganit mont da vasikod.

— Nann ! te. »

Pa lavaren deoc'h ne oa ket bet komprenet ar ger « kurust » gant Veig Trebern !... O ! kudenn hor rann-yezhoù !

« Marteze 'n eus c'hoant kas ac'hanout da vont da veleg.

— Da veleg ? » eme Veig. — N' en doa ket soñjet en dra-se. — « Pe seurt micher a ri, te, pa vi bras ?

— Me ?... Pa vin bras, me yal da vevel war ar maez : te oar mat.

— Te zo e soñj mont da vevel war ar maez ? Te 'fot dit bezañ plouk ?

— Ya ! Gout a rez mat ne zeskan netra er skol. War ar maez, n' eo ket dav gout lenn, hag ez eus ur bern boued da zibriñ, hag ur mestr o komandiñ. Me gav gwelloc'h bezañ dindan ur mestr.

— Te zo 'giz ur marc'h, neuze ? » eme Veig en ur c'hoarzhin. « Te rank bezañ sternet, ha klevout larout dit : — Hei ! Bailhard.

— Ya ! » eme Baotr-Teo.

« Hama ! Me », eme Veig, « me gav gwelloc'h komandiñ. Ma yafen da veleg, ne fotfe ket din chom amañ, e Ponâd, gant ur sae du. Me fot din bezañ eskob, en ur maner cheuc'h, gant ur vantell aour, gant un tog aour uhel, hag ur vazh aour, hag ur bern tud, war o daoulin en dro din.

— Me gred ac'hanout, Veve », eme Baotr-Teo gant ur feiz divrall. « Te zo desket.

— Ha n' ouzez ket, « frai », petra a blifje din, muioc'h c'hoazh, bezañ ?... Amiral !...

— Me n' ouzon ket petra eo an dra-se », eme Baotr-Teo.

« Un amiral, te, 'n eus ivez dilhad aour, ur gasketenn gant galoñsoù aour, ha medalennoù, forzh pegement. Ar vatimant-brezel vrasañ a zo dezhañ, ha mont a ra da bourmen, ganti, war ar mor, e penn ar batimantoù all, dre ar bed-holl, betek ar Chin. »

Tra ma varvailhent kalonek diwar-benn o buhez da zont, e oa erru ar mevel-peizant hag an eskob-amiral, e traoñ hent an tiez-skol, e-tal koad Sant-Lorañz, nepell diouzh ar c'hae.

N' oa ket deut d' o soñj zoken mont da skoachañ o sïer e park ar C'hoseg Ruz.

« Oi ! Ar Gallou bihan ! » a daole Paotr-Teo, a-greiz-holl, skoelf e zaoulagad.

« Petra, ar Gallou bihan ? » a souezhe Veig, disoñjet-kaer m' en doa, a-benn neuze, an darvoudig c'hoarvezet

gant e gamarad, evel ma oa aet diwar e spered e varradigoù strafuilh. « Hennezh zo aet d'ar C'hastell, abaoe pell 'zo. Deomp da welout ar c'habiten bras ! »

Uhel oa ar mor, ha war-nes kregiñ gant an trec'h.

Ken buhezek ha biskoazh e oa fiñv ar porzh gant ar c'hirri o vont hag o tont, e-tal ar bagoù, hag an dougerien sammoù o tifretañ. Edo an *Inga Harner* o peurechuiñ he lestrad : ur fred peulioù-min da gas da vengleuzioù-glaou ar Saozon.

Divrazañ a rae a daol-lagad ar bern trojoù gwez pin, heskennet keit-ha-keit, war-dro tri metr hed dezho, ha dastumet ouzh o sav, dindan ar gwez evlec'h, e-kichen ar plenk eus ar broioù-krec'h nevez-dilestret diouzh an *Inga*.

Ur sac'h rouez ganto war o fenn, e doare ur c'hougoul, d' en em wareziñ ouzh ar rusk diskroc'hennet hag ar rousin spegus, ar wazed a samme ar peulioù, hini hag hini, war o skoaz pe a dro-vriad, hag a dreuze an hent gant difrae da vont d' o stlepel war un dreuzell trojoù pin taolet etre bord ar c'hae ha kal ar vatimant. Ruilhal a rae ar peulioù gant un trouz boud e kof ec'hon al lestr, karget, a-benn neuze, ouzhpenn an tri-c'hard anezhañ. A-raok an noz, e vije pare.

En em silañ a rae va daou Yannig etre penn ur marc'h ha lost ur c'harr, ha, goude bezañ heuliet ar c'hae a-rezik bord an dour, hervez boaz kasaüs ar vugale, ez en em blantent a-sav e-tal penn a-raok an teir-gwern, eus tu ar vaouez he bronnoù fonnus hag he lost pesk.

Gortoz a raent ar c'habiten bras. Abaoe ur sizhunvezh dremenet, ma oa erru al lestr er porzh, e oa deut Veig bemdeiz, ha Paotr-Teo kel lies all, da welout ar c'habiten bras. Deut e oant da vezañ mignoned — « frai » an eil d' egile ! — e gwirionez, ha n' eo ket Veig an hini a oa da glemm. Gwech pe wech, en deveze digant an ofiser — peogwir e oa « poor » —, un draig bennak da gas gantañ da di e vamm. Er gêr, eveljust, e oa eus ar pakadigoù-se goprou ar paotr evit ar « c'homisionoù » a rae va ibil, sañset, d' an den-a-vor, goude ar skol.

Menegomp, p' emaomp ganti, unan eus ar « goprou » -se, peogwir e oa a dalvoudegezh ha dic'hiz a-walc'h, en ur

mod, ha ma voe penn-kaoz d' un tammig kemmesk, kerkent ha degouezhet Veig er gêr, ha d' ur c'hemmesk kalz grevu-soc'h, ur sizhun bennak diwezhatoc'h.

Aet oa Paotr-Teo n' oar den da belec'h, pa voe galvet Veig war bont an *Inga* gant ar c'habiten bras. Lakaet en doa hemañ dezhañ, en e sac'h, ur voutailh paket en un tamm paper, en ur lavarout un dra bennak evel-hen : « *For your father !...* »

« Sed ! mamm, petra 'm eus bet », a daole Veig, ha lorc'h ennañ, en ur astenn ar pakad d' e vamm.

N' oa ket e vamm hec'h-unan en ti. Eno oa ivez he c'hoar Gaid, o voumounañ war he barlenn ar babig Gwennole, hag e voereb Katell, eus Menez-Piked, fichet evel boaz, hag an div c'hoar vihan a-istribilh ouzh he zavañjer splann.

Primoc'h ha kuriusoc'h eget e vamm ha Gaidou, tapet he doa moereb Katell ar pakad degaset gant he niz. Ur voutailhad traoù mat a oa e-barzh, gant, war an tikedenn, penn ur morian o c'hoarzhin leizh e zent gwenn ; ul litrad rom-plouz.

— Ec'h ! m' en argas », a dufe Gaidou. « Ne gavan ket mat ar gleupaj-se. »

Ne gave mamm Veig da lavarout, war an taol, nemet :

« Biskoazh war an douar !... »

Moereb Katell, avat, n' en em vage na gant doñjer merc'hedigoù na gant estlamm. Barner-enklasker he dije moereb Katell gallet bezañ, ma vije bet bragoù ganti e lec'h he dilhad bigoudenn tonius. Ur gwir voereb ar peragoù hag ar penaozioù anezhi !

Ranket e voe displegañ dezhi dre ar munut istor darempredoù he niz gant an ofiser-a-vor estrañjour, un den brokus evel an holl dud-a-vor.

Diskredik e tiskoueze moereb Katell bezañ. Frost eo ar vartoloded, ha digalzerien, ken ez int, an holl a oar an dra-se. Mes reiñ, evel-se, ur voutailhad rom-plouz, ur boeson ken ker, hep abeg na reson, koulz lavarout, ha d' ur fri-marmouz a eizh vloaz, war ar marc'had !...

« N' eo ket evidon eo », en em zifenne ar Veig, seul-galonekoc'h m' edo ar wirionez gantañ. « An dra-se zo evit va zad. Deuit ganin betek ar c'hae, hag e weloc'h ne laran ket gaou !

— Hag ez in », eme voereb Katell. « Dav vo din mont da « breg » ouzh an den-se, ur wech bennak. Dont a reot ganin, Gaidou vihan. An dra-se a ray deomp ur bourmenadenn vrav, en aer vat, war vord ar mor. Ha, maz eo bev ha gwir, ar martolod-se...

— Che ! paour-kaezh Katrinig », a rebarbe mamm Veig, en ur c'hoarzhin. « Karout a rit chigardañ ar paotr-se. Kement-se ne gredit ket e vije bet laeret ar voutailhad traoù-se gant va faotr bihan.

— Nann ! Mari-Gorantina. Mes n' eo ket difennet klask gouzout pizh ar pezh a ra ar vugale, pa n' emaint ket er gêr. Pa vin dimezet... »

Dirollañ a rae trumm da c'hoarzhin. Gwelet he doa, en ul luc'hedenn, dre he soñj, mourrennoù he breur-kaer ha birvilh e lagad, a-bann ouzh an evaj prizius.

« A ! feiz, Mari-Gorantina baour. Hag Herve Trebern ?... Gouest a-walc'h e vefe da zont en ur redek eus Beg-Meilh, ma ouife ez eus ur voutailhad hini-kreñv da lipat en e di.

— Che ! ivez, Katrinig. N' eo ket ken krever-se va gwaz. Ha neuze, ne vo evitañ na gour all, na c'hwez na blaz na gwel eus ar rom-se, a-raok ar gouelioù. A-benn Noz ar Pellgent, e lakain dezhañ ur galopinad en e votez, hag ur galopinad all, da zerou-mat, a-benn deiz kentañ ar bloaz. Ha chichant va den, pell 'zo.

— Aze vo labour d' an Trebern ober bouchoù-mersi-bras d' e « Vabig-Jezuz », a c'hoarzhe moereb Katell. « Biskoazh n' en do kavet, en e votez, ur prezant Nedeleg da ober dezhañ kement a blijadur. Mes, ma gredfec'h ac'hanon, va c'hoar vras, e rofec'h din ar voutailhad traoù-se da gas ganin da Venez-Piked. Muioch dizañjer e vo du-mañ eget en ho ti.

— A, oah ! Ne zeuio ket Herve d' ar gêr a-raok ar gouelioù, nemet evit un tremen e ve ; ha morse ne laka e fri en armel. Ar voutailh-se a vo skoachet klok, ha neblec'h gwelloc'h eget em armel...

« Ha c'hwil, an daou vras, beilhit da ziwall ho teod !

— Sur 'vat, mamm », a responte Gaid ha Veig, a-unvouezh. Ne gouste ket dezho. Rom, ha pa vije Martinik, n' eo na gwastell na dour-regalis.

N' oa ket diskennet Veig ha Paotr-Teo war ar c'hae da niveriñ houlennoùigou ar mor, a haste, herrusoc'h-herrus, war-du korn-tro Porzh-Moro, en ur saflikat geouzh moñselloù difiñv an teir-gwern. Gortoz a raent ar c'habiten bras. Pasianted Job o deve ar vugale, pa garont.

Aet e oa izelik ar mor, hag an heol o tostaat da varr an oabl, tomm ha laouen, ha poent bras d' ar baotred redek d' o merenn, pa weljont o tegouezhout, dre wenodenn c'heotek koad Sant-Lorañz, un den kofek, prim e gerzhed, gant ur sac'h-ler plat dindan e gazel.

« Komandant ar vag ! » eme Veig da Baotr-Teo, e pleg e skouarn.

« Ya ! » eme Baotr-Teo.

Graet o doa anaoudegezh, eveljust, dre c'hrad ar c'habiten bras. Tennañ a rejont o boned d' e saludiñ, e-giz paotredigoù savet mat, pa lammas war an dreuzell da vont er bourzh. Mousc'hoarzhin a reas an den.

« O c'hortoz an Aotrou Olafsen, moused ? » emezañ, en ur galleg reizhik.

Ober a rae Veig : ya ! gant e benn. N' oa ket hardizh gant hemañ evel gant ar c'habiten bras.

« E kêr emañ, gant ar c'hefridioù diwezhañ », a lavare ar c'homandant kofek. « Warc'hoazh vintin, e lakaomp da ouel. »

Antronoz.

« Che ! ivez. Che ! ivez. Bremaik e savo hemañ a-raok ar c'helien !...

N' eo ket da Baotr-Teo eo ez ae an estlammadenn, ar mintin-mañ. Da Veig Trebern an hini oa. Kennebeut ha gant Paotr-Teo, ne veze ket dav ken kemer gantañ ar forc'h d' el lakaat da ziblouzañ da vont d' ar skol. Ha lorc'h e Mari-Gorantina Menez Piked gant ur mab ken dibikouz, mil bell ma oa soñj ar vaouez yaouank diouzh an abeg nemetañ a sache hec'h amprevan davet ar maez : digêrin. Kuit da luziañ e deod e kaozioù re hir diwar-benn ar skol. An taol-mañ, avat, e oa un digarez eus ar c'hentañ da vont kuit abred.

Ha va contr ha displegañ ken difrom ha tra :

« Ar c'habiten bras a ya kuit e vatimant hiziv, mintin abred, mamm. N' am eus ket bet soñj larout deoc'h, dec'h da noz. Me garfe larout kenavo d' ar c'habiten bras, a-raok mont d' ar skol.

« N' oas ket kad da larout dezhañ kenavo, dec'h da noz ? » eme C'haid, gand he spilhoù etre he muzelloù, rak o lakaat he bigoudenn e oa, e penn an daol.

« Beñ, nann ! N' oa ket ar c'habiten aze, dec'h. Sañset e oa gant komisionoù e kêr.

— Feiz ! sur », a c'hoapae ar c'hagn-se a C'haid — flemmus oa honnezh ! — « Chomet oa da gabiten da vouchañ d' e blac'h yaouank, un tu bennak, ha n' oa ket chalet gant ur jañbleo egistout.

— Da bet eur emañ uhel ar mor ? » a c'houlenne mamm an daou gi-ha-kazh.

— Dec'h... »

Harpañ a rae krenn ar paotr war e respont. Edo o vont da lavarout : « War-dro dek eur... »

E vamm, marteze, n' he dije ket bet taolet evezh. Ar vopenn a C'haid, avat, n' he dije ket manket goulenn : « Penaos ' ouzez an dra-se ? Te oa war ar c'hae ?... »

Soutiloc'h e oa treiñ penn d' ar gaoz — amzer en doa da vont war ar c'hae — hag ober an ezvan da gemer e amzer da gas war-draoñ e soubenn-gafe. N' en doa ket naon. Ha neuze, c'hoant bras en doa Veig ober ur goulenn, a darode dezhañ e deod, abaoe an deiz all.

« Mamm », emezañ, en ur sevel trumm e fri. « Setu, neuze, eo gwir ar pezh a lar ar baotred ?

— Hag e lar petra, ar baotred, va faotr bihan ?

— N' eo ket ar Mabig-Jezuz a zeu dre ar siminal da lakaat deomp traoù en hor botoù, da noz ar Pellgent ?

— Che ! va mabig bihan paour. Hag e pelec'h out bet o teskiñ ar son nevez-se ?

— C'hwi oar mat, mamm. Ar voutailhad traoù am oa degaset, evit tad, eus bag ar c'habiten bras.

— Ya ! va faotr bihan.

— Hama ! Klevet 'm eus ac'hanoc'h, an deiz all — me oa va skouarn o selaou —, o larout, gant va moereb Katell, eo c'hwi an hini a lakafe e galopinad rom da dad, en e votez.

— Ya ! Hag eo gwir.

— Neuze n' eo ket ar Mabig-Jezuz.

— O !... Soñj en niver bugale ez eus dre ar bed-holl, ha ken nemet amañ, e Pont-'n-Abad ! Ne zeufe ket ar Mabig-Jezuz a-benn d' ober e dro dindan ur bloaz, na daou na tri, ma rankfe diskenn e kement siminal a zo. Ni, ar mammoù, a ro an dorn dezhañ da lakaat traoù er botoù, pep hini en he zi.

— Hama ! Gwelloc'h eo e-giz-se. E-giz-se, e komprenan gwelloc'h. Mes domaj eo.

— Che ! va mabig paour. Petra zo domaj ? Ha petra 'ta a gomprennez gwelloc'h ?

— Ar Mabig-Jezuz a zo mab d' an Aotrou Doue, n' eo ket gwir, mamm ?

— Biskoazh seurt goulenn !... Ne vez ket desket dit da relijion e skol ar Frered ?... Mab eo ar Mabig-Jezuz d' an Aotrou Doue, Pehini zo en Neñv, sur ha serten. Hag eñ ivez a zo Doue, ken sur ha ken serten all.

— Ma ! mamm. Me gav gwelloc'h gouzout n' eo ket an Aotrou Doue eo a ziskenn dre ar siminal. A-hend-all, ne vije ket bet just.

— O, Itron Varia Garmez benniget ! Emañ va faotr o koll e skiant-vat.

— O nann ! mamm. Nemet e oa un dra, ne gomprenen ket. Ar Mabig-Jezuz oa paour gant ar re baour, ha pinvidik gant ar re binvidik. An dra-se n' oa ket just. Mes, bremañ, e komprenan. Ar wirionez a oa gant ar baotred : ar mammoù eo a laka traoù deomp en hor botoù, hervez o moienn. Domaj eo. Ar Mabig-Jezuz, me zo sur, en dije degaset an traoù bravañ e botoù ar re baour, boñboñ mat, avaloù-orañjez. Me 'm ije karet kaout jeuioù brav ivez, e-giz ar re binvidik.

— N' eus ket mui bugale », a huanade mamm Veig, mantret.

Kreskiñ a rae he faotrig. Echu oa eviti maread, ken tomm da galon ar mammoù, al luskellerezh hag an dorloñ, a-dal ma 'n em lakae he faotrig da brederiañ ha ma ne grede ken er Mabig-Jezuz.

A drugarez Doue, e oa ar c'hoar Gaid, gant he zreid war an douar, da lakaat mamm ha breur da ziskenn diwar uhelderioù ar feiz hag he c'hredennoù o vrallañ.

« Lar 'ta, Veig ! Me soñje din e oa mall warnout mont da larout kenavo d' an den-se war ar c'hae. »

Mamm, evel o tihuniñ : « Ya ! 'vat, siwazh ! Treiñ a ra an eur, hep gouzout da unan. Fust buan, Herve, da lavarout kenavo d' an den, ha, dreist-holl, mil gwech : bennozh Doue ! Muioc'h eget mat eo bet hennezh en da genver... »

Gaidou, o c'hoarzhin : « Ha lar ur mell mersi, eus perzh tad, evit rom ar Mabig-Jezuz. »

Veig : « Genaouegez ! »

Tost e oa ar gourlanv, damdorret herr ar mor, etre ar c'haeoù mein-ben.

Lirzhin ar mintin. Kaset gant un avelig reter, sinik, koabrennigoù gwenn a rae o hent, uhel en oabl ; diougan amzer gaer. Koad Karmez, war e bantenn, ha koad Sant-Lorañs, soubet e sklêrijenn an heol yaouank, a hirise bep ar mare, gant sourradoù an aezhenn, a lakae o delioù glas, e-giz nevez-gwelc'het, da lintriñ. Ha lintriñ a rae gorre an dour etre ar c'haeoù sonn, hag a-hed moñselloù al listri.

Savet e oa bet an eorioù. Ha kuilhet e oa, war ar pont, an darn vrasañ eus ar pennoù-fard, a cree an *Inga Harner* ouzh bonnoù maen ar c'hae. E-tal ar bonnoù, e pep penn eus al lestr, e oa ur martolod, pare da largañ an daou vos diwezhañ. Paotred ar gwernioù, diarc'hen ha war gorf o stammenoù roudennek, a oa war ar pont, nepell diouzh ar skeulioùigoù kerdin, a gase d' an delezioù.

War c'hed ivez, pep a sparl ganto, e oa martoloded all en-dro d' ur gwindask. Diouzh pellenn ar gwindask ez ae ur fun hir, ha laosk en dour, d' en em skoulmañ, war ribl an tu all, ouzh un ailhedenn houarn, simantet er roc'h.

Klozet klenk e oa bet war ar c'helioù hag o fred peulioù min gant strapoù fetis, goloet gant ur pikol bach eoulet.

Ne c'hortozed mui, evit digaeañ, nemet tarzhan dichal.

Erru abred, Veig Trebern hag Ifig Korku — diskennet e oa Veig betek ti hemañ d' e gerc'hat... lakaomp, da vont d' ar skol gantañ —, ne gollent ket ur begad eus fiñvoù ha troioù martoloded o blev melen an teir-gwern veur.

Gortoz a raent ma touarje, ur wech c'hoazh, ar c'habiten bras, da lavarout dezhañ kenavo, bennozh Doue hag, ivez, beaj vat !

Kenavo !... Beaj vat !... Santout a rae Veig un taolig gwask en e galon... Feiz ! ya, 'vat. Edo ar vatimant-se o vont kuit. Kas a rae ganti e vignon estrañjour.

Edo, hag hep meizañ evit c'hoazh petra oa an anwaz-se, a lakae berr e anal, oc'h ober anaoudegezh gant « melkoni ar C'himiadoù bras ». En em gavout a reas tristik.

Treiñ a reas ouzh Paotr-Teo da c'houlenn digantañ hag eñ n' oa ket trist ivez. Paotr-Teo, avat, digor e c'henou, evel boaz, evit gwelout gwelloc'h, hag ur biz sanket gantañ en e fri, a oa re zalc'het e evezh gant an daolenn evit santout estreget bam.

Eno e oa, pep hini gant e gefridi, moarvat, ar gabitened, a oa fichet ken kaer, gant o galoñsoù aour war o milginoù ha war o c'hasketennoù, ha p' o doa dilestret, ar wech kentañ, da vont e kêr. Hag eno oa ivez paotr e founilh mentek, prest da huchal e urzhioù, d' ar c'houlz ha d' ar mare. Sellout a raent, pep an amzer, ouzh an oabl hag ouzh an dour.

Stlakal a rae ur banniel splann — hini Bro-Norvej, anat eo —, ouzh e fust, war benn a-dreñv al lestr, a-us d' an dour.

Ouzh e sav, war an dunetez, dirak ar rod-stur, e oa paotr ar vaol, ar roñfl e vlev hag e varv melen. En e gichen, e oa un den all, bihanoc'h, aotennet pizh e zremm rouz, muzelloù hag all, ha dic'hoarzh. Marteze oa gant an droug dent, rak koeñvet oa unan eus e jodoù. Bez' en doa, war e benn, ur gasketenn den-a-vor e mezher glas-du, hep galoñsoù, gwisket e oa gant dilhad mezher glas-du ivez hag ur stammenn c'hloan, a starde e c'houzoug. Sokoù du lufrus a wiske e dreid.

Ha, ken habask ha landreant ha biskoazh, gant e sigarenn en e veg, ar c'habiten bras, o tiviz gantañ.

D' ur mare a voe, e oa pignet war an dunetez, dre an diri serzh, ar c'homandant kofek e vale prim. Sellet en doa ouzh an dour hag an oabl, ha dalc'het ur pennad kaoz ouzh ar c'habiten bras hag an den all. Neuze en doa ar c'habiten bras lavaret dezhañ un dra bennak, en ur ziskouez gant e chink an daou gantolor plantet war an hent. Ur skruz en doa graet ar c'homandant d' e zivskoaz, graet ya ! gant e benn, en ur c'hoarzhin, ha diskennet en-dro.

Nijellet en doa ivez ur mousc'hoarzh moan war vuzelloù an den dic'hoarzh, dre ma rae ya ! eñ ivez, gant e benn, da asantiñ mechañs. Bremañ, e lec'h e jod kleiz, e jod dehou an hini eo a oa koeñvet. Hennezh a chike butun karot.

Hogen petra 'rae ar c'habiten bras, pa ne ziskenne ket war ar c'hae ? Karet ervat en dije Veig lavarout dezhañ kenavo hag, evel just, hervez gourc'hemennou e vamm, mil bennozh-Doue bras evit e vadelezh. Mechañs ne yafe ket kuit ar vag, a-barzh m' en dije lavaret kenavo d' ar c'habiten bras, a oa bet ken mat en e geñver !...

Nann ! Setu ma tevale hemañ gant e gerzhed brañsellek ha dibres davet aspled houarn an dunetez. Ober a rae sin gant e viz d' ar baotredigoù.

« *Come ! Come here !* » eme ar c'habiten bras.

« Deus 'ta ! Paotr-Teo », a zielec'he Veig, peget ar derzhienn en e wazhied. « Larout a ra deomp pignat er vatimant. »

« Nann ! » eme Baotr-Teo.

« Quickly !... Petite promenade... Lok-Tudi !... » Sailhet en doa an ofiser da c'hoarzhin mao, gant ar fentus en doa kavet, sur a-walc'h, distagañ daou c'her gallek.

« Deus buan 'ta, « frai » ! »

Ne bade bet Veig gant ar mall pignat er bourzh.

« Yan ket 'vat ! » eme Baotr-Teo, ur moulbenn moñs stag ouzh e fas brizhoù ; hag e turie an hent gant beg e votez koad.

« Evit petra ?

— Me 'm eus aon. »

Ne yeas ket hiroc'h ar vreutadenn etre an daou bihan. Tarzhet he doa un harzhadenn diouzh ar foulín mentek.

« Largañ bos ar penn a-raok ! »

Diskregiñ a rae ar martolod al lagadenn fetis a rae tro ar maen-bonn, ha kuit kerkent ar fun davet pont al lestr goude ur spluiadenn en dour, tra ma c'haloupe ar martolod d' e vourzh, dre an dreuzell.

Ha Veig d' e heul. E-unan. Chomet oa Paotr-Teo, sonnet, war an hent.

Ar mor, goude un astal, a zalc'has e c'horre difiñv ha lenkr e-giz melezour ul lenn, en em lakae bremañ da gas

goustad war-du ar c'hal Fereg ha meilh Porzh-Moro, duhont, dirak korn-tro koad Menez-Bihan. Edo o trec'hiñ.

Kollet e oa Veig, un tamm, war bleñchod ar vatimant bras-divent-se, e-touez kemend-all a ramzed melen, holl war c'hed. Ken uhel e oa ar speurenn, ma skoache outañ ar c'hae ha Paotr-Teo.

« *Here, boy !* »

Stouet war aspled an dunetez, e rae ar c'habiten bras dezhañ krapat da laez, e harzhe paotr e founilh, sko en ruilhenn houarn sanket er garregenn, war ar ribl all. e skouarn :

« *Hala !* »

N' ouie ket Veig ouzh pe du treiñ e zaoulagad... Paotr-Teo, war an hent !... Ya !... Ya ! sur... Mes ivez fiñv, striv ha difrae ar vartoloded diarc'hen ha war gorf o rochedoù divañch !

Er penn a-raok, e oant un nebeut reoù, bec'h warno, o tibordiñ ar vatimant bonner diouzh ar c'hae gant bidevioù hir. Paotred ar gwindask, c'hwec'h anezho, o voutañ kalonek war bep a sparl, o doa en em lakaet da dreiñ, da dreiñ en-dro d' an traouilh, e-giz roñsed ur mekanik-dornañ. Hag e kanent, en o yezh, war donioù, n' oant bet klevet biskoazh gant diskouarn ar paotrig.

Hag an dortisenn, un dortisenn kanab ken teo ha penn Veig, dre m' en em rolle en-dro da bellenn ar gwindask, a 'n em stigne, reutoc'h-reut, dreist ar stêr, an dour o tiverañ puilh diouti, eus penn a-raok ar vag betek ar ruilhenn houarn sanket er garregenn, war ar rible all.

Drasket he doa an *Inga Harner* en he fezh : staoñ, kloreñn ha gwernioù. E-giz izili un den yac'h, o 'n em zic'hourdañ, da heul un diskuizh re hir. Ha setu an dolzenn ramz anezhi o loc'hañ gorrek. dre gaer, dre he fenn a-raok, halet gant ar fun, war sribourzh. Mont a rae, war he fouez, a-dreuz d' ar ganol, evel o vont da vroudañ moger kae an tu all gant beg he gwern valouin. Mes kenderc'hel a rae da dreiñ goustad, sentus ouzh ar fun, ken en em gavout e-kreiz ar stêr, graet tro ganti penn evit penn. hag o kregiñ da vont divall gant kas an dour.

Maouez he bronnoù fonnus hag he lost pesk a bare bremañ he sell goullo, eeun dirazi, war veilh Porzh-Moro ha korn-tro koad Menez-Bihan.

A-benn neuze e oa bet larget ar bos diwezhañ, war ar c'hae. Dilammet e oa ar martolod er bourzh, dre an dreuzell skañv. Ha frapet e oa bet an dreuzell war e lerc'h. Ar martolod all, diskoulmet gantañ an dortisenn diwar hec'h ailhedenn houarn, en doa lammet en e blatenn, hag e oa deut davet an *Inga*, en ur bolinat ken e ouie.

Ha pep embregadenn kaset da benn, ha prim, diouzh ma chalpe : « Aou !... Aou ! » paotr e founilh, da heul ur ger lavaret dezhañ gant ar c'habiten bras. Treiñ-distreiñ a rae ar rod-stur etre pikolioù daouarn blevek ar roñfl melegan.

« Taol e laez al lien-kastell !... ar gouelioù bras !... ar fokoù !... »

Pebezh dispac'h, war veno Veig atav, ha pebezh dispak !

Krapet o doa paotred ar gwernioù penn-da-benn ar skeulioù-kerdin. Krapet ? Nijet.

Edont — e-giz gwennilied war o neud orjal — pintet a-hed an delezioù ; ha, harpet o zreid noazh war ar stleugoù, ar c'herdin-se, a ya dre zindan ur penn eus pep delezenn d' ar penn all, e tifretent da ziskoulmañ ar rabankoù, a zalc'he ar gouelioù paket start. Hag ar gouelioù o tifarleañ, gant trouz ha nij. Ha martoloded all o tapout peg er skoudoù d' o skoulmañ prim-ha-prim e pep a ailhedenn. Hag e terkent, reut kofoù o divhar spalc'het en o oteier hanter-droñset. Tiouital a rae ar poleoù, e-giz filiped. Hag an avel reter, evel m' en dije klevet galv paotr-e-founilh, ha deredet eus ar maezioù don, a-dreist ar parkeier tommheoliet, ha 'n em deurel a-benn-herr, ha drev, war al lien dispak, ha c'hwezhañ, ken na wigoure ar gwernioù.

N' oa ket diaesoc'h eget se. Hag an *Inga Harner*, al lestr gwenn ha lorc'hus, e oa bremañ ur c'haer dezhi mont war-raok, dre he hent dour, kalz uheloc'h he fenn ganti eget kribenn an torgennoù.

Pa stouas e fri, Veig a voe e gentañ sell evit Paotr-Teo, kement a c'hoant a oa ennañ truchañ e gamarad, ur wech muioc'h, da grapat ivez er bourzh. Tripal a rae gant ar

blijadur, hag e heje e zivrec'h, e-giz da ober dichou ! d' ar brini.

Ma ! Sell aze ur souezh ! Pellaat a rae Paotr-Teo. Hep fiñval diwar e blas !...

Evel-se, diwar laez dunetez ar vatimant uhel-se, Paotr-Teo a oa bihan, avat ! N' oa ket brasoc'h mui eget ur c'hwil-derv, gant e sac'h-skol war e gein, hag e zivrec'h a-istribilh. Pep an amzer, e torche e fri gant e vañch, hag e leze e zaouarn da gouezhañ en-dro a-hed e gorf.

Ya, feiz ! Tra ma chome ar vatimant en he flas, hag eñ, Veig, ivez, a-dreñv ar rod-stur, ur rod-stur a yae en-dro, hi, etre douarn blevek paotr ar vaol, Paotr-Teo a bellae goustadik a-zirazañ, hag eñ stag e votoù ouzh an hent. Ha pellaat a rae aspled houarn ar c'hal Fereg, hag ar c'hal Fereg e-unan, hag ivez serzhennig Keratur, gant he dirioù mein ledan hag he bochad gwez evlec'h, a-us da hent ar c'halaj. Ha war hent ar c'halaj, ar gwez evlec'h hag ar bankeier evit ar bourmenerien a yae e-biou, an eil da heul egile, dirak e selloù.

Pa daolas kont en ur ragaj ingal, a save diouzh traoñ al lestr, eus kostez ar stur. Dañsal a rae an dour, aze, dindan e dreid, gant ur ganaouenn drant, ha lezel a rae war e lerc'h ur roudenn o vourboulhat, a yae he gwagen-noùigoù eonennek war ledanaat betek mont da lipat traoñ ar chaoser pavezek, en daou du d' ar stêr.

Ha setu, o vont e-biou, Feunteun ar Skudell, e kev he mein strouezhek !

Anat e voe neuze da Veig n' eo ket ar c'hae an hini a dec'he, nag ar ribloù, en daou du dezhañ. Ar vatimant bras *Inga Harner* an hini a yae war-raok, douget gant an dichal hag ouzh c'hwezh an avel en he gouelioù dispak-kaer.

Kas a rae ar paotr ur sell sabatuet davet ar pevar den, m' en em gave ganto war an tilher : paotr ar rod-stur, paotr e founilh, den e sokoù du, hag ar c'habiten bras.

« Joli... promenade... Enjoyed ?... » eme hemañ, tra ken, en ur vousec'hoarzhin. Moarvat, n' en doa ket kavet tu da zeskiñ kalz galleg pe saozneg na, gwazh a se, brezho-

neg zoken, e kêr Bont-'n-Abad. N' oa ket ken puilh e gaoz, war bell, hag hini ur vigoudenn.

Moursc'hoarzhet o doa ivez ouzh ar paotrig an daou Skandinaviad all. Den e sokoù du n' en doa ket.

Neuze 'ta, edo Veig o vont da veajiñ, e bourzh ar vatimant vras-se!... Betek ar mor don!... Betek bro an Añglichen, marteze!... Biken ne gredo ar baotred!...

Kavout a reas da Veig, bremañ m' edo o vont kuit e wele, evit ar wech kentañ, kae hir e gêr c'hinidik, gant e listri, hag, en tu all d' an hent, savenn koad Karmez, gant he gwez kozh, ha pradenn c'heotek koad Sant-Lorañz, glas he deil ken e oa glas, tour, toet gant mein sklent, iliz e vadeziant, toennoù kêr o lintrañ en heol!... Na brav!...

Stêr Bont-'n-Abad a zo anezhi, e-giz div zousenn stêrioù all eus arvor Breizh, — re an Alre, Landreger, Dinan, Kemperle, — ur wazhredenn, a doull, davet ar mor, he naoz leun a gammtroioù, etre torgennoù izel ha roc'hek, gant gwaremموù lann ha brug, ne gresk warno ervat nemet gwez pin, o fustoù hir ha moan.

Hep ar mor, ne vefe eus ar stêr nemet ur c'houer enket etre daou bikol lec'hideg louet ha re vlot.

Gant al lanv, avat, o tont div wech bemdeiz, d' he leuniañ muioc'h pe nebeutoc'h, hervez al loarioù, e c'helle listri-samm, ur vent kaer dezho, evel an *Inga Harner*, sankañ en douaroù, tre betek porzh Pont-'n-Abad, tost ul lev hanter diouzh ar mor, da zegas pe da gemer fred.

Peul-linennet eo naoz kildroennek ar stêr, a dra sur. Mes, ken anat all eo ne vefe ket diriskl avañturiñ, pa vez uhel ar mor, war an hent-dour-se, ledan mes trais e c'houeledoù d' an neb n' anavez ket ervat an ardremez. N' eo ket ur vad chom sac'het el lec'hid.

Setu perak e weled aze, war an dunetez, e-kichen ar rod-stur, an den all-se, a lakae nec'het Kristof Kolomb an xx^{vet} kantved, en hent war-du an Inizi. Loman ar stêr e oa hennezh — pezh n' ouie ket hor C'hristofig, eveljust —, ar garg dezhañ bleniañ al listri, adalek Lok-Tudi hag adalek Pont-'n-Abad, dre gildroennoù ar ganol, diwelus pa veze bras ar mor.

Merzet en doa Veig n' oa ket heñvel an den-se, tamm ebet, ouzh ar veleganed vras all o jodoù roz hag o daoulagad glas. Tennañ a rae, memes, da vartoloded ar vro, pa vezont gant o dilhad sul ; an hevelep javedoù askornek dezhañ, daoulagad du-polos, muzelloù moan, kroc'hen rous liv an amzer, ha blev du o vont louet, e-kichen an div-skouarn, dindan e gasketenn mezher glas-du. Hag ar chik-butun-se, o vont, pep ar mare, eus ur jod d' ar jod all, hag ar memes mod mont da grañchat en dour, ur wech an amzer.

Nemet, ur mod dezhañ en doa ivez, pa gaozee gant ar c'habiten bras, da sellout ouzh ar mous-se ambarket hep roll — e kave da hemañ, d' an nebeutañ. Gwir eo ne c'heller ket plijout d' an holl. Setu pezh a soñje Veig.

Un taolig-brañsell, ul livardenn, ha setu banniel ha stur al lestr tal-ouzh-tal, da stokañ outo, gant meilh-mor Porzh-Moro hag he rod-balek, hanter veuzet en dour, chaoser ar veilh gant e skluz du, hag al lenn, war an a-dreñv. Edont e korn-tro ar Menez-Bihan.

Diwar neuze, ken a Baotr-Teo. Aet Paotr-Teo diwar wel, war un dro gant ar c'hal Fereg, bagoù ar porzh, ar gwez bras ha tour iliz Karmez. Ha gwasket adarre kalon Veig. Perak ivez n' oa ket deut ar « goi » -se gantañ da bourmen war ar mor ? Na brav, ma vijent bet o daou !

A-daol-trumm e teue dezhañ, neuze, soñj e vamm, ha Gaidou, e ziv c'hoar vihan, ha Gwenole bihan mignon, chomet, du-hont, er gêr, war ar Waremm-Mên.

N' en devoe ket amzer da deneraat. Ur sach war lerenn e sac'h-skol. Treiñ a rae e benn. Edo ar c'habiten bras o tennañ e sac'h digantañ. E zibouezañ a rae gant an ezvan da grediñ e oa gwall-bonner ar samm-se da skoaz ur skoliad, ha didalvez hiviziken. Ober a rae an ezvan da deurel anezhañ dreist bord, en ur c'hoarzhin. N' oa ket da nac'h, den fentus e oa ar c'habiten bras-se, pa droe en e benn.

Deredet e oa ur mous d' e c'halv — ur mous gwirion, hennezh, hini an *Inga*, trizek vloaz bennak, ha melegan, ken na oa ur vezh —, hag eñ kuit gant sac'h ar paotr Herve dre ar skeul, dindan an tilher. Hag ar paotr Herve war e lerc'h.

« Here ! Here !... » a gemenne an ofiser, hep ehanñ da c'hoarzhin. Komprenet en doa Veig. Ne felle ket da hemañ ez aje da gantren dre ur vatimant ken bras, gant aon en em gollfe.

Edont erru e korn-tro ar c'hal bihan, en ur hedañ gwaremmoù karregek, war an tu kleiz, ha, war an tu dehou, fustoù hir diniver gwez pin koad Menez Bihan. Mont a rae ar c'hoad pin betek lennig Travenneg, rannet diouzh ar stêr gant chaoser ar c'halaj. Ha, goude-se, koadoù pin, en daou du, war an torgennoù, ha lennoù bihan, e gwasked ar gwez, a-dreñv o chaoser. Oufig Rozkerno, e-kreiz ar gwez evlec'h, gant saout oc'h evañ dour, e poull ur feunteun, hag un ebeul gell o tenañ d' e vamm kazeg. An Ti-Gwenn war dirienn e veg-douar digenvez.

Trumm, hep gouzout dare da Veig, e tibouke al lestr, en ur sklêrijenn drellus, war ul lenn bras, bras, a lintre he gorre, dindan an heol, e-giz kant mil melezour. Kelc'hiet-kloz e oa al lenn gant douaroù izel, stank warno ivez ar c'hoadoù pin, heñvel ouzh ur voger voulouz glas.

E-lec'h mont war-eeun, a-dreuz an dachenn dour, a oa n' ouie ket pet gwech ledanoc'h eget lenn Pont-'n-Abad — ul lenn vras anezhi, koulskoude —, evel m' en dije graet Veig, merdead a zaou wenneg ma oa anezhañ, e troe al lestr war vabourzh, penn war un aber ledan, riblet gant parkeier a rez an dour. Dre eno, e krede da Veig e oa an hent. N' oa ket. Harzet e oa an tremen, du-se, gant ur chaoser, a vire da vont en tu all.

Forzh penaos, a-benn nemeur, da izel-vor, an doureier-se, fiñv-difiñv, ha ken brav d' al lestr kantren war o gorre, a reno al lec'hideg en o lec'h, ul lag louet ha spegus, ne c'hell na bag, na pesk, na troad mab-den daremprediñ he domani. Neb na sent ket ouzh ar stur, ouzh ar garreg e ray, sur. Heñvel : neb ne sent ket ouzh ar ganol, ouzh al lec'hid e ray, sur !... Ne ouie ket Veig ar vicher. Al loman, eñ, a ouie, hag anavezout a rae ar c'hrenn-lavar, hag an hent a ranked heuliañ.

Hedik-hedañ a rae, bremañ, ar ganol, hag an teir-gwern, eveljust, un aod grouanek strizh-strizh a oa hini enez Sant-Mark — an enezenn —, dianav da Veig, evit c'hoazh. Gwelout a rae ar saout o peuriñ, ar verjeoù gant o gwez-avaloù, ar c'hêrioù diwar ar maez e-touez ar gwez evlec'h.

Mes ne welas ket kañval ar maner. Ne ouie ket, a-hend-all, e c'helle bevañ eno un aneval ken dic'hiz. Ar c'hañvaled a vev er Sahara, ha n' eo ket en ur c'hoad pin...

Saflikat a rae an tarzhiouigoù, un dudi, ouzh staoñ al lestr hag e voñselloù gwenn, trouzal a rae an avel er gouelioù, gregachat a rae al laboused-mor en-dro hag a-us d' ar gwernioù, ha lintriñ a rae al lenn divent-se, ken e trelle, dindan un oabl dizolo ha ken trellus all. Gouel-lid evit Veig !...

Ha setu ma souezhe adarre. Ar gourizad koadoù pin, a grede dezhañ e oa hep ur frailh, a oa toull e-giz ur sil ; enezennoù e oa eus an douaroù-se, a rae tro al lenn : Sant-Mark, Keffen, Ar Razhed, Haro. Tizh a rae ar mor dre an digoroù-se, en e red kompez ha diharzus, war-du mulgul Lok-Tudi hag an Enez, a skede du-hont, pell, pell, mogerioù gwenn o ziez hag o zoennoù mein-glas.

« Oi ! Ma vije bet Paotr-Teo ganin !... Mont a rin da vartolod, ha Paotr-Teo a vo ivez martolod ganin. »

Ya ! Paotr-Teo !... Hama ! Gwashoc'h eget mont da redek mor, diaviz e-giz e skañvbenn a gamarad, en doa graet Paotr-Teo o chom en aod. Pezh a oa bezañ fur, koulskoude. Nemet, n' eus justis ebet war an tamm douar-mañ. Ar paotrig fur an hini eo a c'hoarvezas droug gantañ. Pa 'z eo gwir eo da bep hini e blanedenn.

Paret e zaoulagad ront war an teir-gwern, a gase ganti e gamarad brasañ, e chomas ar paotrig istonet, a-dreñv aspled houarn ar c'hal Fereg. Gwelout a reas al lestr bras o troc'hañ an dour dirazañ, o pellaat war e bouez, war-du-meilh-mor Porzh-Moro ha korn-tro Menez-Bihan, tra ma tispake ar gouelioù, en o gloar, an eil re war-lerc'h ar re all, uhel ha ledan.

Gwelout a rae, a-zioc'h ar speur, war an dunetez, e-kichen an ofisourien, penn ha brec'h pe vrec'h Veig o firbouchal, hag o vont war vihanaat. Krediñ a reas dezhañ zoken klevout e vouezh skiltr oc'h hopal : « Deus ivez 'ta ! Paotr-Teo. » Mes n' oa ket sur ; re wasket oa e galon. Ne welas ket re vat, gant an dour a zeue d' e zaoulagad, ar vatimant veur o vont diwar wel a-dreñv torgenn ar c'horn-tro, ha, da c'houde, beg ar gwernioù o vont da guzhat d' o zro, a-dreñv gwez pin koad Menez-Bihan.

Chom a reas en alvaon, ur reuziad mat, plantet war an hent, dirak barrinier houarn aspled ar c'hal Fereg, mantr o sevel en e galon, d' he diwaskañ.

Aet e oa kuit Veig Trebern war ar mor. Morse james ne welfe mui e « frai » nemetañ. Biken mui ne zeufe hemañ en-dro. Penaos e kavfe e hent, da zont en-dro, war ar mor bras, kaer en doa bezañ fin, ken e oa ?... Aet e oa kuit, hep lavarout ger d' e vamm, na kenavo na tra !...

Ha petra a responto, eñ, Ifig Korku, da vamm Veig, pa c'houlenno digantañ petra en doa graet eus he mab ?

N' oa ket, e Pont-'n-Abad, hiziv, ur paotr bihan gwall-eürusoc'h egetañ, ha muioc'h digompagnun.

Kenderc'hel a rae ar mor da ziskenn. Dispennet e oa bet gantañ, pell e oa, ar roudenn wagennek, a oa savet war-lerc'h ar vatimant gwenn. Ha chom a rae Paotr-Teo da vagañ e dristidigezh, ouzh e sav, war ar c'hae.

Neuze ez eas da azezañ war an dirienn geot glas, dindan ar gwez evlec'h, e traoñ an diri mein ledan, a gas d' ar Vanell-Zu. Kollet e sell war veilh-mor Porzh-Moro, hep gwelout netra. Morse mui n' en dije plijadur en e vuhez.

Ur mare ' voe koulskoude, e soñjas en doa klevet youc'hadegoù bugale ar skolioù.

« Marteze n' eo ket pell diouzh kreisteiz », emezañ.

Poent e oa mont da glask merenn. Arabat ankounac'haat ar c'hof, war zigarez e vez poan.

« Sell 'ta ! » he doa souezhet Chann Grall, o welout hec'h Ifig, o tegouezhout gant e sac'h-skol war e gein. « Hemañ zo e soñj deskiñ e gentelioù en ur zebriñ e voued ?

« Sell 'ta ! » a responte Paotr-Teo, gant un neuz souezhet ivez, ar pilpouzig anezhañ. « 'M oa ket taolet kont em oa degaset va levrioù ganin. »

Gouzout a rit mat ne oa ket o vont da anzav ne oa ket bet tost ouzh Sant-Gabriel.

Ne voe grik ebet, e c'hellit krediñ, diwar-benn Herveig Trebern, e-kerz ar pred.

Ha, kuit da gaout kaoz hiroc'h, e save ar paotrig, kerkent ha skarzhet e volennad stlipoù berv, da lakaat lev etrezañ hag e di.

« Gortoz ac'hanon, Ifig », eme Lan Gorku, « hag e raimp hent, asamblez, e-giz daou gamarad, betek dor an uzin. »

War hent karter ar skolioù e oa, evel a ouzomp, ar stal aozañ ludu bezhin, m' en doa ar C'horku e labour enni.

« Ya ! tad. Mont a ran da c'hoari, da c'hortoz, dirak al lenn. »

Dres a-walc'h, e kleved reuz, e penn ar vanellig, e-giz e foar ar moc'h bihan, gant ar baotred oc'h ebatiñ, a-raok mont d' ar skol.

Uhel e oa ar mor, el lenn, pa zeue an dour betek ar Poull-Bihan hag a-rez moger-harz ar chañter-heskennerezh. Ne voe ket lezet amzer, avat, gant Paotr-Teo, da gas e spered, en tu-all da bont ar Veilh-Vras, etrezek e gamarad war vordo war ar stêr, ha rentet, a-benn neuze, gant e vatimant, n' oar den e pe gorn eus ar bed.

« Deus buan ! Paotr-Teo. Un « a-dreñv » a vank deomp ! »

Un dousenn hanter a ziaouled bihan, eus traoñ ar Waremm-Mên, a oa o tispac'hañ, o redek, o tornata, o 'n em vountañ, en ur youc'hal a-bouez o fennoù, en-dro d' ur voull graet gant pilhoù ha bonedoù kozh gwasket reut gant pennoù fisel ; en ur ger berr, o « tisputañ un diael a bartiad football », ur c'hoari nevez-degaset er vro, ha n' oa ket divalo tamm ebet, war veno ar yaouankizoù.

Reolennoù strizh a oa d' ar jeu-se, eveljust, ret doujañ dezho rik.

Va stourmerien-me, d' an ampoent, n' anavezent nemet ul lezenn : disvantañ botezadoù, gant o holl nerzh, er volotenn bilhoù reuzeudik, d' he c'has er-maez « dre an nor ». An nor — unan a bep tu eus an dachenn-c'hoari — a oa merket gant div gailhenn, a-hed daou vetr bennak an eil diouzh an hini all, ha diwallet gant ur « gwardian ».

Ha Paotr-Teo er veskadeg, evit degas sikour e nerzh da unan eus ar c'hampoù, e poent hag e koulz evit dastum war e ufern dehou ur makez taol botez-koad digant un « enebour » pe, ken buan all, digant ur c'hoarier eus e strollad.

Ne voe klevet netra. Ne voe graet van ebet, pa zisac'has Paotr-Teo ouzh e sav, krog en e droad gant e zaou zorn. Tapout a raed lamm evit un netra. Ha ne voe digemmesket,

er vlejadeg, « aiou, va zroad ! » ar paotr paour, nemet pa 'n em lakaas da dorc'hwenial, en ur grial forzh e vuhez :

« Aiou ! va zroad. Aiou ! va zroad. Aiou ! va zroadig paour. »

Torret war o saouzan kentañ, tri pe bevar baotrig a c'haloupe, dre ar vanell, betek ti o c'hamarad bihan.

« Moereb Chann ! Moereb Chann !... Deuit buan ! » a hopent diwar al leur. « Kouezhet eo Ifig war an hent, ha n' eo ket kad da sevel. »

Klevet en doa Lan Gorku. Hag an den-se, a vije bet diaes da dangwall pe da zour-beuz e strafuilhañ, a rae ur pezh lamm war e skabell. E vab ! Droug a oa c'hoarvezet gant e vab !... Laosket en doa war an daol, e-kichen e blad, yalc'h - butun, paper sigaretez, mechenn - dir... Primoc'h eget e wreg, e oa erru war an hent, houpet ar paour-kaezh Ifig war ur vrec'h ha deut, buan-buan, en-dro d' an ti da lakaat ar paotrig war ur gwele en e c'hourvez.

« Lazhet ho peus din va mab », a hirvoude Chann Grall. « Piv 'n eus skoet an taol ? »

Ne ouie den, eveljust, al « lazher » e-unan n' en doa « santet » netra. Mantret an holl, ha liv ar marv war o dremmoù.

N' oa ket Paotr-Teo ul leñver. Mes ober a rae : « Aiou ! me 'm eus droug ! » bep tro ma veze touchet ouzh e ufern, memes gant dorn e vamm. Ha, koulskoude, petra 'zo flouroc'h, war ur bleñs, eget dorn ur vamm ?

A-viskoazh — gwir 'ta, n' oa ket ken oadet-se c'hoazh —, e ouie Veig e oa dispar buhez an dud-a-vor, o veajiñ dre ar bed-holl war o listri herrus. Lennet en doa meur a levrig skeudennet-brav. Mes biskoazh n' en dije kredet e oa ken kaer gwelout ar vartoloded, skañv e-giz kizhier, o krapat gant ar skeulioù-kerdin, hag o tifretañ war an delezioù, dibilhoc'h kalz eget paotred ar jimmastik.

Aet oa penngamm o sellout outo o tispakañ, uhel-uhel en nec'h, ouzh stlak taer o lien, ar gouelioù-se, a zeue reut kerkent gant an avel.

Ha tizh war al lestr ! Treuzet oa bet moger c'hlas an enezennoù, ha lezet a-dreñv e roudenn o virviñ, an enez Haro, gant e vaner kran, enezig ar Razhed, ront ha bihan, gant he strobadez gwez pin hir ha treut, ha beg enezenn Sant-Mark. Klipenn a rae, bremañ, war ul lenn all, kalz ec'honoc'h c'hoazh, penn eeun war-du tiez gwenn Lok-Tudi, du-se, pell, en tu-all d' al lenn.

Biskoazh n' en doa gwelet Veig kement a zour, ha bep seurt liv d' an dour : glas-oabl, glas e-giz ar foeneg, damwenn, louet, rous... diouzh ma oa traezh, lec'hid, kerreg bezhin ha me oar ? er stradoù. Ha ragach d' e heul.

Nann ! Biskoazh n' en dije kredet Veig e oa ken kaer navigañ. Sur, e yafe da vartolod, pa vije brasoc'h. Sur, avat, e yafe da vartolod.

N' oa ket bet hep merzout bagoù all, o vont ivez dindan lien rous pe c'hlas. Mes bagoù du bihan e oa eus ar re-se, gant ur wern nemetken, bagoù martoloded an enez Tudi, pe re Lok-Tudi, bet o pesketa pe o vont da besketa, mechañs. N' o doa gobari ebet, ken dister e oant,

e-skoaz e vatimant-eñ, an *Inga Harner*, gant he zeir gwern uhel, taolet ganti, a-benn neuze, kement tamm lien, a c'helle bezañ dispaket en avel. Ha lorc'h em martolodig, o 'n em gavout e bourzh ur vatimant ken tonius ! Lorc'hus Veig Trebern, evel Kado, Roue ar Mor !

Deut e oa unan eus ar bagoù bihan, goude loveal, d' en em lakaat moñsell-ouzh-moñsell gant al lestr ramz.

Ha Veig, hanter-drelatet, pa n' oa tamm en gortoz eus ar pezh a c'hoarveze, en doa gwelet den e sokoù du, o stardañ o dorn d' an ofisourien ha da baotr ar rod-stur, o tiskenn a-ziwar an dunetez, o pignat dreist bardell al lestr da ziskenn er vag vihan, dre ur skeulig-kerdin, goude bezañ tapet, en ur dremen, sac'h-skol Veig, hag hep gouzout da hemañ, a-dre zaouarn ar mous melegan.

Ha Veig, ivez, e oa bet stardet, hag hejet zoken, an dorn dezhañ, e-giz d' ur gwaz. Ar c'habiten bras en doa graet dezhañ, ouzhpenn, un allazig dindan e chink, ha mousc'hoarzhet outañ, chichant-tre, en ur lavarout :

« *Finish... promenade... sorry !* »

Ha goude :

« *Go now... to school !...* »

Sell aze kenavoioù graet prim ! Hep bouch, na leñv, na komz goulo !...

Sammet e oa bet, dindan e gazel, gant ur pikol Viking, melen-ruz, diarc'hen, ha kaset d' ar c'haloup betek bardell al lestr, ha diskennet, e-giz ur pakad war skotilh ar vag vihan. Bag an treizhour e oa. Dañsal a rae kement, ma kouezhas Veig war e reor.

Tec'hout a rae an *Inga* lark-kaer davet ar mor, a zigore bremañ dirazi e zomani glas diharz en tu all da vulgul an Enez ha Lok-Tudi.

Graet he doa penn ar vagig dre lien war-du kae Lok-Tudi, ha, kent pell, ez ae da stokañ he fri, e dour sioul, ouzh traoñ un diri mein serzh ha strizh stag ouzh un dik berr, krenn e-giz ur fri-hoc'h.

« Pign da laez ! va niz », en doa lavaret den e sokoù du da Veig. « Ha gortoz ac'hanon war ar c'hal. Mes diwall da gouezhañ er mor ! »

Ha Veig d' an nec'h, souezhet gant e zivesker o vrallañ dindanañ, e-giz ma vije bet un tammig mezv. Ha souezhetoc'h c'hoazh o klevout brezhoneg o tont gant an den yen-se, tavedek ha dic'hoarzh. N' oa ket hennezh ur Saoz eta, hag eus ar vro e oa ! Ha setu perak ne yae ket pelloc'h. Kompren buan a rae Veig.

« Netra da ziskleriañ, paotr yaouank ? »

Ur maltouter a oa dirazañ, gant ur biz-meud en e c'houriz ler, moustachoù groz dezhañ, ha grosoc'h mouezh c'hoazh. Farsal a rae, eveljust. Karout a ra ar re vras añjinañ ar vousetaj.

« Hañ ! » eme ar paotrig, en ur c'hourlammat. « Va sac'h !... Aet eo va sac'h gant ar vatimant !... »

— N' eo ket, n' eo ket, paotr bihan », a lavare den e sokoù du, en ur lakaat troad, d' e dro, war bavez ar c'hal. Stardañ a rae e zorn d' ar maltouter. « Ganin emañ da sac'h. »

E-keit-se, taolet e lien en traoñ ha staget e vag ouzh ur ruilhenn houarn gant ur bos, e goudor an dik krenn, e oa pignet ivez an treizhour. Ha kuit o zri : maltouter, sturier, treizhour, d' an ostaleri dostañ, e penn-laez plasennig ar c'hal.

« Pa 't o sellet trawalc'h ouzh an *Inga* », en doa lavaret den e sokoù du da Veig, « e teuy d' am c'haout en ti aze. »

Diskouezet en doa gant e chink, hep diskregiñ diouzh sac'h ar paotr, an ti-ostaleri, gwennrazet e dalbenn, a-dreñv ur steudad karradoù avaloù-douar. Rak, dres e-giz e Pont-'n-Abad, edod o tiskargañ eno sac'hadoù avaloù-douar e korf don div c'holetenn saoz ereet ouzh ar c'hae.

Ne oa ket bet morse Veig e Lok-Tudi, n' emañ, koul-skoude, nemet ul lev, dre an hent bras, diouzh Pont-'n-Abad. Ur viken — peder eur ? pemp eur ? c'hwec'h eur ?... — e kave dezhañ he doa padet beaj ar vatimant vras, penn-da-benn kildroennoù ar stêr ha, da c'houde, a-dreuz al lennoù-mor, dre greiz an enezennoù.

Ne ouie ket e pelec'h e oa bet kaset d' an aod. Mes sur oa e oa erru pell ; pell kenañ diouzh ar gêr. Forzh penaos, avat, n' eo ket e bro an Añglichen an hini e oa bet taolet, na war un enezenn digenvez, e-giz Robinson Kruzoe.

Ar merc'hed a oa ur vigoudenn war o fenn, hag ar baotred a-ziwar ar maez, e-kichen o c'harradoù patatez, o zogoù du ront teir bouloutenn. Ha brezhoneg gant an holl. Dres e-giz e Pont-'n-Abad.

Hogen, dres e-giz gant Paotr-Teo, chomet plantet du-se, a-dreñv aspled houarn ar c'hal Fereg, e c'hoarveze gantañ, Veig. Sonnet aze war ar sav-maen, heñvel ouzh ur pondalez uhel a-us d' an dour, dilezet d' e dro, hag outañ e-unan, paourkaez Lazar, sellout a rae ouzh « e » vatimant, an *Inga Harner* kaer ha galloudus, o klipenn war an hent fiñv-difiñv, digor frank dirak he staoñ, war ur mor glas-gwer, ne weled un harz dezhañ — ha ken izel ! — nemet e rez an dremmwell pellañ, war e zorn dehou. Biskoazh bravoc'h ne vransellas uhel, uhel, he gouelioù gwenn, war oabl skedusoc'h. Sailhañ ' rae, skañv ha sart, e-giz ma ra al loened yaouank, eürus e peuriñ glas o foenneg, hag e sanke he fri en houlennouigoù, hag an eon a lakae dezhi moustachoù gwenn-kann. Stlakal a rae ar banniel splann, a-us d' ar stur, e-giz m' en dije bet diwaskell. Diwaskell ?... Ne vije ket bet bametoc'h Veig, m' he dije dibradet an « Inga », ken prim e yae, ha loc'het kuit war nij davet an neñvoù don.

Brav, sur, e oa an teir-gwern ramz o pellaat war ar mor. Mes kas a rae ganti, war he bourzh, e vignon bras, ar c'habiten estrañjour. Ne zeuio ket hennezh morse mui da Bont-'n-Abad...

Chom a rae Veig, e-unan, e penn ar sav-maen uhel evel ur pondalez a-zioc'h dour. En alvaon. Ne ouie ket mat ha ne oa ket glac'har, kerse ha nec'hamant o sevel en e galon. Dreist-holl, pa n'em lakaas an *Inga*, moñsellet flour war strbourzh, da dreiñ war an tu dehou ha da lakaat penn war ur beg-douar goloet gant ur pezh bodad banal Spagn. Mont a reas da gentañ diwar wel, a-dreñv ar banal Spagn, ar wern-valouin ha maouez he bronnoù fonnus hag he lost-pesk, da c'houde, korf gwenn divent al lestr a-bezh gant e lien dispak-kaer war e deir gwern, ha, neuze, ar banniel splann o stlakal sart en avel-vor, a-us d' ar stur.

Kuit oa aet ar vatimant vras. Ne chome mui, du-hont, nemet ar mor ha bolz dizolo ar neñv. Distreiñ a rae ar paotrig e zaoulagad a-ziwar ar beg-douar da sellout en-dro dezhañ. A-dreñv e gein, e oa ur ru ledan, gant un nebeut ostalerioù gwennrazet, e-giz du-mañ. Karradoù ha karradoù

avaloù-douar, gant daou varc'h, alies, ouzh ar stern, a-heul-da-heul evel greun ur chapeled, o c'hortoz o zro da vezañ diskarget er bagoù saoz. N' eo ket gant seurt taolenn e oa e breder ; kemend-all a wele e Pont-'n-Abad.

Ha dirazañ ?... Du-hont, pell, a-gleiz da ziez gwenn an Enez Tudi, war ribl all al lenn, a oa bet treizhet bremaik gant e vatimant, moger voulouz glas ar c'hoadoù uhel, ne weled enni adarre na toull na digor. N' ouie ket dre belec'h e oa deut betek ar c'hal-se, en ur porzh dianav, ha n' ouie ket dre be hent mont en-dro d' ar gêr.

Ne zivate ket. Sonañ a rae e benn, un tammig, gant ur vadinell gwrezus. Re vuan e oa troet an traoù. War an taol, e soñjas e vije bet kalz gwelloc'h dezhañ chom war ar c'hae, du-se, da c'hoari gant Paotr-Teo. Kollet e oa. Ha tristik.

Treñ a reas kein d' ar mor, hag e treuzas ar chapeledad kirri, etre fronell stouet ur gazeg kozh ha lost ur c'harr, da vont da gaout den e sokoù du en ti-ostaleri.

« A ! setu va c'hantolor pavier goulou rousin », en doa lavaret an den tavedek ha dic'hoarzh, p' en doa Veig astennet e benn, lentik, e toull-dor an ostaleri. « Deus da azezañ amañ, ouzh korn an daol ! » Diskouezet en doa dezhañ ur gador en e gichen.

Azezet e oant o zri : ar sturier, ar maltouter hag an treizhour, ouzh un daol vihan, e-tal ar prenestr, gant pep a vanne gwin gwenn. Dastum a rae ar maltouter ar paperennoù a oa ledet dirazañ. Stoket e voe ar gwerennoù : « Yec'hed mat ! » hag ar maltouter a savas da vont, an treizhour ouzh e heul.

« Tudina ! » eme an den tavedek ha dic'hoarzh, « degasit un dra bennak da zibriñ d' ar paotr-mañ. Pelloc'h e tle mogañ gant an naon. Naon 't eus, va niz ?

— Ya ! contr », a responte Veig.

Debret en doa gwastell ar c'habiten bras, e-doug ar mintin ; mes ar vugale o deve atav ur vouzellenn laosk.

« Che ! ar c'hrouadur paour », a drueze Tudina, ur vigoudenn he divjod mirzin, n' o doa netra da rebech d' an dienez.

« N' eus netra anezhañ. Petra ' gavez gwelloc'h, paotr bihan, bara amann, pe bara koñfitur ?

— Koñfitur », eme Veig.

« Neuze out deut da Lok-Tudi gant ur vatimant ? » a lavare an ostizez, en ur droc'hañ ur mell felpenn vara gwenn eus an dorzh. « N' out ket bet klañv gant an droug-mor ?

— O ! nann », eme Veig. Hag e c'hoarzhaz.

« Ha da vamm n' he deus laret dit netra, pa out aet kuit ?

— 'M eus ket laret dezhi », eme Veig. Hag e soñjas e oa kurius merc'hed ar vro-mañ, e-giz ma oant en e di.

« Kuit out aet gant ur vatimant, hep larout netra da da vamm, va Doue benniget Jezuz ! »

Diwar hec'h estlamm, e leze ar vigoudenn he loa er sailhad koñfitur.

« N' en em chalit ket gant ar paotr-se, Tudina. Fiziet eo bet ennon gant eil-kabiten an *Inga Harner*, ar vag norvegiat on bet o kerc'hat, e Pont-'n-Abad. M' el lakay en-dro war hent ar gêr, p' en do debret e walc'h... ha p' en do klevet diganin un tamm katekiz a-berzh ar c'habiten Olafsen. »

« Petra ' vez roet dit da evañ, er gêr, gant da voued, paotrig ?

— Dour », eme Veig.

« Hama ! Amañ, evit ur wech, ez evi limonadez. »

N' eus ket par da aer ar mor da lakaat ur galon yac'h da zigeriñ. Ur blijadur e oa sellout ouzh Veig Trebern o tirouestlañ e damm bara koñfitur.

« Peseurt micher a ra da dad ? » a c'houlenne ar sturier, a-benn ur pennad.

« Mañsoner, eontr.

— War e gont ?

— O ! nann. War chañterioù ar Struilhoù. O sevel tiez nevez, eus kostez Fouesnant.

— Eus kostez Fouesnant. Bremañ e komprenan gwelloc'h. Pa vez da dad pell diouzh ar gêr, ez aez da skol al louarn.

— Hi ! hi !

— Pe seurt micher a ri, te, pa vi bras ? Mañsoner, e-giz da dad ?

— Ha ne vin ket », eme Veig, a greiz e galon. « Ne fot ket din mont da vous-pri. Me ' fot din komandiñ ur vatimant e giz ar c'habiten bras.

— A ! ya, va niz. Setu pezh en doa komprenet ar c'habiten bras, e-giz a larez. Mes, kred ac'hanon, komprenet en doa gwelloc'h c'hoazh en dije pradet dit da reor, ma vijes bet dezhañ. Rak ur mab eus da oad en deus, du-se, en Norvej, ha setu perak e oa deut dezhañ mignoniezh vras evidout. Mes gwall-souezhet e oa, ouzh da welout o lavagnonañ war gae Pont-'n-Abad, e-lec'h mont d' ar skol. N' ouie na brezhoneg na galleg, ha, gant-se, n' oa ket evit displegañ dit e soñj. En ur mod ivez, an dra-se ne selle ket outañ — ken nebeut ha ma sell ouzhin, peogwir n' omp na kar na par —, ha kontant e oa o kaout ac'hanout da ober dezhañ e gefridioù. Echu c'hoari, bremañ, avat ! Gourc'hemennet en deus din lakaat ac'hanout da brometiñ din start ez i, bemdez, d' ar skol, hep mank, ha kerkent ha 'benn arc'hoarzh vintin.

— Eontr, n' eo ket dre va fot...

— Komandiñ batimantoù bras a fot dit, e larez. 'T eus ket echu, neuze, dastum deskadurezh. Hag hep skol, deskadurezh ebet. A-boan e vefes mat da ober ur martolod-pont. Kompren a rez ?

— Ya ! eontr.

— Larout a rae ar c'habiten Olafsen e oas ur paotrig speredek, da welout. Krediñ ervat a rafen, hervez da zaoulagad. Mes, ur wech c'hoazh, ne servijo dit da spered da netra, ma ne 't eus ket, war ar marc'had, an deskadurezh, ne vez kavet nemet er skol. Er skol ! Kompren a rez ?

— Ma ! » a soñje Veig, leun e gof, ha disammet n' ouie ket re a be seurt enkrez. « N' eo ket an den-se ken mut ha ma krede din. Sur eo, ivez, e lar ar wirionez. »

Mat e kavas e zour limonadez da evañ, gant ar pikoùigoù farsus, a hillige dezhañ e staoñ.

« A !... Da sac'h-skol », eme ar sturier, en ur lakaat war an daol ar sac'h, n' oa bet biskoazh ken c'hwezhet, memes gant kistin, pe avaloù « falziget » el liorzhoù.

« Lakaet en doa ar c'habiten Olafsen en e benn e oa paour da gerent.

« Gwir 'ta, ne vez ket morse re binvidik tiad ur mañsoner. Karget en deus dit da sac'h gant traoù da gas da da vamm, eus e berzh. Da c'hopr eo evit ar c'homisionoù a raes evitañ. »

Neuze, e lakae war an daol, dirak daoulagad Veig o tispourbellañ, ur pezh ugent real, gwenn ha lintrus.

« Ha setu, ouzhpenn, ur pezh ugent real, a roi, hep mank, klevout a rez ? da da vamm, da brenañ traoù da servijout dit.

— Mersi ! » a lavare Veig. « Mersi, eontr ! »

Ugent real ! tud paour !... Ur pezh ugent real a oa bet lezet gant ar c'habiten bras evitañ !...

Ne zeuas da Veig, nemet da c'houde, pa voe re ziwezhat, ar soñj goulenn digant ar sturier, chomlec'h ar c'habiten bras en Norvej, da skrivañ dezhañ, war ul lizher, mil ha mil bennozh-Doue, ha prometiñ dezhañ ne rafe biken mui e skol-louarn.

« Pakadoù 'z eus evit Pont-'n-Abad, Tudina vray ? », en doa taolet ur gwaz yaouank drev, en ur vont war-eeun d' an daol-ostaleri. « Ur banne gwin, buan ! N' emeon ket abred.

— Amañ 'z eus unan atav », eme ar sturier gant e vouezh parfet. « Te gemero ar paotrig-mañ en da charabañ, betek Pont-'n-Abad. Pegement eo ? »

Ha setu penaos e oa tremenet e zevezh gant Veig Trebern. Aet kuit, d' ar mintin, hep ma oa en gortoz, e bourzh ul lestr teir-gwern, e tistroe da Bont-'n-Abad, dre an hent bras, a-raok an noz, e charabañ ar *c'hourrier*, azezet e-kichen ur charretour drant, ne rae nemet kanañ pe c'hwitellat, hag hopal war e varc'h : « Hei 'ta, tamm koad !... »

En ur sevel laezenn ar Suler, en doa c'hoarzhnet gant ur soñj plijus-dreist, a oa deut dezhañ en ur ober bekez — en ur vreugeudiñ, salokras ! — diwar e zour limonadez.

« Pa c'houlo M. Karadeg, 'benn arc'hoazh vintin, e pelec'h e oan chomet, abaoe ar geit, e larin dezhañ e oan aet da veajiñ e bourzh ur vatimant vras. Hag e kredo, peogwir eo gwir. »

« Mamm ! n' on ket bet er skol, hiziv. Divunit a belec'h emañ o tont ! »

Ne c'helle ket Veig kontañ bidennoù, an taol-mañ. N' oa ket deut da glask e verenn, da greisteiz, ha ret-mat e oa, evit ur wech, komz heñvel ouzh ar wirionez ha diskargañ e sac'h. E pep feson.

Kentañ tra a welas Gaidou hag ar c'hoarezed vihan e voe ar pochad klok, boestadoù boued-mir, tablezennoù chokolad ha traoù ken talvoudus all. Div segalenn ! Ur soñj a oa bet evit an tad mañsoner.

Birvilh a oa e gwad Veig. E vamm, avat, he doa graet un dic'hwezhadenn, hag hejet he fenn div pe deir gwech, e-lec'h c'hoarzhin gant ar blijadur, evel m' en dije Veig kredet he dije graet.

« Lar din ar wirionez penn-da-benn, Herve. Ne gavan ket ac'hanout gwall-gatolik, abaoe ur reuziad.

— Ni ' soñje deomp e oas bet dalc'het e pinijenn », eme C'haid.

Dont a reas soñj da Veig eus e bezh ugent real.

« Sed ! mamm. An dra-mañ 'm eus bet ivez digant ar c'habiten bras.

— Ur pezh ugent real, siwazh ! Da dad a c'hounez a-boan ur skoed bemdeiz !

— Arc'hant va c'homisionoù, mamm !

— Ya ! ya ! Degaset 't eus ganit ur fortun ha peadra sevel ur stal espisiri. War goust da skol eo, evit-se. Perak n' out ket aet d' ar skol ? Sed aze ha ne blij ket din, e mod ebet.

— Hama ! mamm. Pa on aet, e-giz ho poa laret din, da larout mersi ha kenavo d' ar c'habiten bras, eñ 'n eus

graet sin din da vont d' e gaout e bourzh ar vatimant, hag ar vatimant a zo aet kuit, hag on bet kaset ganti betek Lok-Tudi.

— Hep goul koñje diganit ? » a c'hagouilhe Gaid, reut he jod gant ur voñboñienn.

N' oa ket bet seizhdaletoc'h ar plac'hig o regiñ ur poch, ha kargañ begig an div vihan, hag he hini, eveljust.

« Hennezh ne oar ket brezhoneg, c'hwil, na galleg... Forzh penaos, aet eo kuit, bremañ.

— Domaj eo », eme C'haid. « Mat eo e voñboñioù.

— Nann ! N' eo ket domaj », a responte ar vamm. « A-barzh pell, ma vije chomet ar vatimant-se er porzh, n' en dije ket tennet hemañ e dreid diwar ar c'hae, betek koll soñj e voued hag ar skol, war zigarez ober kefridioù. Re vihan out c'hoazh, Herve, evit mont da vevel. Afer da dad eo gounit boued d' ar vugale. Ha, forzh pegen mat eo bet an den-se evidout, arabat dit fiziout re en estrañjourien. Ne welez ket e vijes aet betek Bro-Saoz ?...

— Me vije bet kontant, 'vat ! » eme Veig, kalonek.

« Drochig paour !... Ur chañs eo dit n' emañ ket da dad er gêr, na da voereb Katell. Desket o dije da da reor mont da bourmen war ar mor, e-lec'h bezañ er skol ; kred hardizh !

— Aet eo kuit ar vatimant », eme Veig en-dro. « Ha bremañ e yan diouzhtu da gontañ da Baotr-Teo... da Ifig Korku...

— Da da wele, ya ! emaut o vont. 'Benn arc'hoazh ' vo deiz, hag amzer a-walc'h da uzañ teod gant Ifig. Hiziv out skuizh-lazhet gant ar bourmenadenn... villiget-se.

— 'Vin ket pell, mamm. Mont ha dont ken, evit gouzout petra 'n eus laret M. Karadeg.

— Sed ! gwir !... Penaos n' eo ket deut c'hoazh da gamarad bihan da c'houl war da lerc'h ? »

Filet he doa ar vamm, sempl, ur wech ouzhpenn, gant he lavagnon.

N' oa ket bet skandalet !... Skandal, hep ur c'houblad flac'hadoù, d' an nebeutañ, pe an torch gleb war ar feskinier, se n' eo ket skandal.

« Feiz ! » a soñje va hinkin, « m' am ije gouezet, em ije diwallet ar pezh ugent real. Aze e vije bet traoù da brenañ, avat, gant Paotr-Teo ! »

Bremañ e oa dav mont da lakaat Paotr-Teo da skodegiñ — « kecha » anezhañ — gant danevell ar veaj vurzhudus betek penn ar bed. C'hoari chilgamm ha piklammat a rae, en ur ziskenn gant ar Waremm-Mên, hag a-hed al lenn, betek penn ar vanell, ha tonigenniñ a rae evitañ e-unan :

« Da biv out mab ? D' ar Pab. Peseurt Pab ? Pab Rom. Peseurt Rom ? Rom vi. Peseurt vi ? Vi yar. Peseurt yar ? Yar velen. Peseurt melen ? Melen... »

Erru oa dirak ti Paotr-Teo, ha Chann Grall, mamm Paotr-Teo, a oa war al leur, dirazañ, diswalc'het he dremm dreut. Dic'hoarzh ha koumoulek. Merzout a rae Veig, ker-kent, e oa c'hoarvezet ur gwall-daol. Tapet Paotr-Teo, marteze, oc'h ober skol-louarn !... Dastum a rae ar paotrig ar mousc'hoarzh chichant a oa ledet war e fas. A-barzh m' en doe gallet rannañ grik, e lavare Chann Grall gant un huanad :

« Emaout degouezhet eus ar skol ? Herve bihan. Da gamarad, siwazh d' e galon, 'n eus ket gallet mont. C'hoarvezet 'z eus droug gantañ, goude e verenn. Un droug spontus, Herve baour. N' am eus ket bet amzer da gas keloù betek da di, kement a strafuilh a oa warnon. Torret, drailhet e zivisker, an aelig Doue !... Lazhet-mort eo bet din ganto.

— Oi ! va Doue... » eme Veig, o strafuilhañ d' e dro.

« Deus da welout anezhañ en e wele ! Diwall da ober trouz ! »

Hag hi d' an ti, Veig d' he heul, war vegoù e votoù.

« Marv eo, moereb Chann ? »

— N'eo ket, Doue ra viro ! Kousket. »

En ur gwele bras e oa Paotr-Teo, astennet war e gein, loñchet betek e chink, dindan an dilhad-wele, ha kousket dous. Hag un tres dezhañ da vezañ ken klañv ha ma vezen, em yaouankiz, pa vezen paotr-enor er frikoioù-eured.

Skuizh e oa ar c'habiten Veig. Rak kerkent ha kuitaet ar stêr gant al lestr, ha gwasked an torgennoù gant o gwez pin, ha treizhet bae kloz Lok-Tudi ker sioul all, ha kaer e-giz ur baradoz, echu an amzer vrav.

Kerkent ha sanket da greiz, e oa en em gavet e vatimant e-mesk torgennoù all, torgennoù, avat, a fiñve, a sailhe, a winke, a zisac'he, dirollet hag aet gouez. Youc'hadoù d' o heul, e-giz ma vezer bet o tarc'haouiñ ouzh mil ha mil potouarn. Distaget chas ar seizh avel war ar mor, o klask ober aon d' al lestr ha d' ar c'habiten Veig. Hag, ouzhpenn, ur glav da veuziñ ar Gêr-Is.

Mes n' en doa ket aon al lestr, ha klipenn a rae lark-kaer, eeun gant e hent, a-dreuz an tarzhioù fuloret, war-du Bro-Saoz pe... an Amerik.

Ha n' en doa ket aon ar c'habiten Veig. Dispont e oa, mestr nemetañ, gant Doue, war an teir-gwern lorc'hus. Mes skuizh e oa.

Pebezh micher, ivez, redek d' ar penn-a-raok da welout hag-eñ ne oa ket skilfoù yud ar c'herreg o tivorañ dres dirak fri al lestr; pignat dre ar skeulioù kerdin betek kastell ar wern vras — an neizh pig —, e riskl gwelout e gasketenn galoñset aour o nijal kuit — avel a oa da zislostañ ar saout —; hopal e urzhioù er founilh mentek; kemer ar rod-stur a dre daouarn paotr ar vaol; klask, du-hont, en dremmwel, an douar bras, e penn e lunedenn hir-wel; diskenn er c'halioù don da welout ha chom a rae ar varc'hadourezh klenk ha klok en he flas; sellout alies ouzh an nadoz-vor...

Ha Paotr-Teo ebet da reiñ an dorn dezhañ. Aet e oa Paotr-Teo da geginour. Gwelloc'h e kave bezañ er gegin domm, o tebriñ boued mat — kig rost ha kaletéz —, kement ha ma kare, ha pa gare. N' eo ket souezh e oa anezhañ ur « reor-bonner ».

Nann ! Ne oa ket plijadur tout bezañ komandant war ur vatimant ken bras, kaout ul lagad dre holl ha war bep tra.

Skuizh oa eta ar c'habiten Veig, ha lavarout a reas d' al letanant yaouank :

« Tra-walc'h e-giz-se, evit hiziv ! Poent din ober ur pennad kousked. C'hwil, letanant, beilhañ !... Ha ma c'hoarvez tra pe dra...

— Ya ! kabiten Veig », eme al letanant, sentus ha doujus.

En em gluchañ a rae ar c'habiten Veig, en ur c'horn, da reiñ un tammig repoz d' e izili, a oa soret, e gwirionez. Sachet en doa e gasketenn c'haloñset war e zaoulagad.

Pa gredas klevout, dre e vorenn :

« Dihun 'ta ! kabiten. Sav alese ! »

Hej-dihej ar vatimant. War washaat, an amzer fall. Lamm a rae an tarzhoù dreist ar bardelloù, ha tapout a rae ar c'housker melloù beradoù dour sall war e fri. Muioc'h eget un tamm banne dour evel-se a oa ezhomm, avat, da zihuniñ un den-a-vor ken dispont hag ar c'habiten Veig. Ha ken skuizh, war ar marc'had.

« Sav 'ta ! kabiten », a hope ar vouezh adarre. « Douar !... An Inizi !... »

Deredet oa ur martolod, ha frapañ a rae, ken e ouie, war vrec'h e ofiser. Ma tamzigoras hemañ e zaoulagad, en diwezh ; n' am eus ket lavaret : hep grozmolat.

Edo e vamm, krog en e vrec'h, oc'h ober dezhañ un hej, evel ur wezenn-bilhoù ; ha Gaidou, gant ur volenn en un dorn, o stlabikat dezhañ dour, gant beg he bizied, war e figur. Hag e c'hoarzhe, ar vopenn-se. Skoachañ a rae Veig dindan e liñserioù, en ur dermal :

« Ne fot ket din mont d' ar skol. Me zo skuizh.

— A ! Skuizh out, va loen ? » C'hoarzhin a rae e vamm, evel ar c'hagn a C'haid. « N' oas ket skuizh, dec'h, o vont da c'haloupat, war ar mor, e bourzh ar batimantoù, hep en em chalañ gant ar re a chome war da lerc'h. Te ' ziskuizho er skol, Trebernig va ene, azezet brav war da skabell, en ur selaou kentelioù M. Karadeg. Sav eus da wele, gwionig traoñ an aod ! »

Aet e moked an huñvre mezevennus. Steuziet an Inizi Glas, dres p' edont o vont da flamminañ dirak e lestr lorc'hus, gant o gwez avaloù kokos hag ar palmezenned kribellek leun a varmouzien farsus.

Dipitus ! Atav e tihuner, pa vez an huñvre en e vravañ.

Pezh a chome, avat, ken gwir ha ma oa reut e gorf, e-giz un tamm koad, a oa droug-dargreiz, hag un doare glizi e kofoù e zivhar, hag, en e benn, daoulagad c'hwezhet gant ar c'housesed, ha ken pikouzet, ma n' oa ket evit distagañ e valvennoù. Menegomp ivez ur yac'h a daol-heol war e fri togn. Gwall-zevezh e oa bet an derc'hent, hag hir.

« Me zo skuizh, mamm », a glemmiche adarre va leozenn. « Bez' em eus ivez e-giz tan war va fri. »

« Mamm », a c'hoapae Gaidou — n' he doa ket truez, honnezh, eus skuizhder he breur paour —, « gwelloc'h e kav Veig chom en e wele da c'hortoz ma teuy Ifig Korku, gant e vazh-loaiek, da gerc'hat anezhañ da vont d' ar skol.

— Ya ! 'vat », eme e vamm. « Paour-kaezh Ifig Korku !... Gwall-vac'hagnet eo bet, war am eus klevet. Rezon muioc'h sevel diouzhtu. Dao 'vo dit mont da ober ur weladenn da da gamarad bihan paour, a-raok mont d' ar skol ! Diloñch alese ! gwionig traoñ an aod. »

Veig n' oa ket gwall-sonn e glipenn, pa zegouezhas e ti Paotr-Teo. Ne c'helle e « frai » paour bezañ nemet hanter-varv, pe an dri-c'hard zoken, da heul ar seurt taol botez-koad. Ha dec'h, p' en doa gwelet anezhañ en e wele, marteze n' eo ket kousket e oa, mes semplet...

Tad Paotr-Teo a oa ouzh e sav, e-kreiz al leur-zi, o c'hortoz n' ouie re vat petra, e vije bet lavaret, a-raok mont d' e zevezh, d' an uzin soud, ha Chann Grall, troet he c'hein ganti, e korn an oaled, o lakaat dour da dommañ war an trebez.

« Boñjour ! » eme Veig, lentik. « Hag Ifig ?...

— Oi !... Veve !... » a youc'he ur vouezh skiltr, a-dreñv ridojeier ar gwele bras. Amañ emañ, Veve ! Deus da welout va zroad ! Me zo klañv !... »

Anavezet e oa bet gant an Ifig mouezhig e gamarad, ha prouiñ a rae, kerkent ha diouzhtu, n' oa ket marv c'hoazh, na tost da vezañ, ha nerzh dezhañ zoken da frapañ kuit ar ridoj-gwele da ziskouez da Veig e fas loar, gwenn, un tammig, dindan e vrizhoù gell, hogen bev-mat.

« Che ! ivez. Che ! va c'hrouadur. Na ziswink ket e-giz-se. N' eo ket pareet da droad paour, war zigarez eo degouezhet Herve bihan da welout ac'hanout. Te oar eo bet difennet ouzhit fiñval gant ar froter.

— Ha neuze, Herve », a lavare Lan Gorku. « Deut out da welout Ifig, a-raok mont d' ar skol ?

— Ya ! toñtoñ Lan.

— Te zo ur paotrig mat. Petra 'n eus laret ar mestr-skol, dec'h goude kreisteiz, pa 'n eus ket gwelet Ifig, er c'hlas. »

Ha Veig :

« N' on ket bet er skol, dec'h, toñtoñ Lan.

— N' out ket bet er skol, dec'h ? » a souezhe Chann Grall. Blazig ar rebech a oa en he mouezh.

« Ac'ha !... Skol-louarn ?... » a skandale Lan Gorku, dre fent.

« Hi ! hi ! » a rae Veig, en ur darlaskat.

Kaset en doa ul luchadenn da Baotr-Teo, a oa bet kemeret gantañ un tres sabatuet o klevout e gomper o werzhañ ar vechenn, ken difoultrc ha tra, dirak e dad hag e vamm.

« Va mamm a ouie », eme va lakez.

N' he doa gouezet nemet da c'houde, mes n' eus forzh.

« Ya ! » eme Veig. « Ur c'habiten bras 'n oa prometet din en ije kaset ac'hanon gantañ d' ober un dro betek Lok-Tudi, pa vije aet kuit e vatimant. Dec'h vintin, eo aet

kuit, ha me zo aet gantañ. Na brav ! moereb Chann... Mes va mamm a ouie.

— Te 't eus chañs 'vat », eme Baotr-Teo. « Ma 'm ije gouezet, e vijen aet ganit. »

Tennañ a rae Chann Grall ur pezh huanadenn.

« Ha me », emezi, « dre an dorn eo e vijen aet da gas ac'hanout betek ar vatimant-se, skol-louarn pe get, ma 'm ije diouetet an droug a oa da c'hoarvezout ganit. Anaout a ran mat-tre bordoù ar stêr, betek an Ti-Gwenn ha Penn-Laouig, hag an Dourdi, ha Pennaveur, ha Lok-Tudi. N' eus ket kaeroc'h pourmenadenn, dindan lagad an heol. Padal, setu te mac'hagnet, va faour-kaezh Ifig, ha blijet, marteze, da vont gant bizhier-loaiek, da vuhez-pad. »

Taerñ a rae, a-daol-trumm :

« Mes petra an diaoul a zo peg e reor ar gisti-paotred a hiziv ? N' int ket evit chom peoc'h, ur munut, pa n' emañ ket lagad unan warno. Kerkent ha troet kein unan, ale ! bec'h dezhi ! ha skeiñ, ha dic'hastañ, hag en em zrailhañ. N' eo ket c'hoari a reont mui, mes en em zrailhañ. E-giz chas gouez. A-barzh pell, e vint degaset deomp d' ar gêr e tammoù. Ha te, ken fur ha ken trankil, va faotrig bihan paour, petra 't oa ezhomm mont da lakaat da dreid e c'hoarioù ar chas gouez-se !

— A ! oac'h ! » eme Lan Gorku gant e vouezh digas. « A-viskoazh eo bet evel-se. Ar baotred a rank dispign o nerzh, hag en em zifretañ. A-wechoù, sur, e c'hoarvez un taol-fall...

— Perak gant Ifig, avat, gant ur c'hrouadur ken trankil ?

— Ma ! maouez paour. Ar gwellañ ho peus da ober, ma ne fot ket deoc'h e c'hoarvezfe droug gantañ ken, eo difenn outañ kompagnunezh ar frioù-kreien eus e oad, ha prenañ dezhañ ur verc'hodenn ha nadozioù stamm.

— Nann ! 'vat », a daole Paotr-Teo eus e wele. « Ne fot ket din bezañ ur plac'hig. Me ' varvfe gant ar vezh. »

Hardizh e oa Paotr-Teo en e di, e-giz person an ifern, etre e dad hag e vamm, ha teod en doa. Pezh a ziskoueze, ouzhpenn, n' oa ket ken klañv ha m' he dije... karet e vamm e vije bet. Rak digarez eo d' ur vamm da voumounañ,

a-raok ma vo diwezhat, ar poñsined a zo pluñv o tont d' o divaskell, ha prest da nijal diwar he zro.

« Gast ! 'vat », a fuc'he Chann Grall. « Kement ha selaou, e klevin bremaik n' eo c'hoarvezet gant ar c'hrouadur-mañ nemet chañs hag eurvad, p' eo bet hanter-lazhet din.

— Klevet 'p eus ar froter koulz ha me », eme Lan Gorku, hep sevel e vouezh. « Ur skarr a netra en e ufern. Tener eo c'hoazh eskern ar paotr-se. Seurt bleñsoù a bare buan, gant ar vugale. A-benn pemzektez, e c'haloupo adarre ken gren ha ken digamm ha m' eo bet morse. N' eo ket gwir, Ifig ? »

Loc'hañ a rae e gorf pounner da vont war-du an nor.

« Poent tostaat d' al labour », emezañ. Treiñ a rae ouzh tu Veig.

« Ha te, « frai », petra 'rez ? Poent eo dit ivez mont d' ar skol. Mar karez, e raimp hent asamblez betek dor an uzin.

— Nann ! Veve. Chom amañ ganin ! »

An Ifig-se !... Eñ an hini a lezenne er gêr — war zigarez e oa klañv ! — hag e vamm a save a-du gantañ. Hag, evel ma lavarar, morse daou hep tri. Asantiñ a rae Veig chom da zerc'hel dezhañ kompagnunezh, disoñjet-krenn gantañ e bromesaoù m' hen-tou-ruz d' ar sturier dic'hoarzh.

Ur wech ouzhpenn, e c'hortozo M. Karadeg en aner e skoliad diank.

Ha neuze, pouezusoc'h, un tamm mat, ha bourrusoc'h, e vije klevout dre ar munud istor an taol-troad ha kontañ e bourmenadenn betek Lok-Tudi.

Digêret Lan Gorku d' e labour aozañ al ludu bezhin, ha Chann Grall da varc'had ar pesked.

« Lar 'ta ! Paotr-Teo, a daole Veig. Me 'm eus bet aon ganit, avat ! Me ' grede din ' oas marv.

— N' on ket, 'vat !

— Me ' grede din e vije bet troc'het da c'har ouzhit...

— Añ ?

— ... Hag e vije bet lakaet dit ur pav-koad. Hi ! hi ! hi !...

— Te c'hoarzh gant an dra-se ? Veve.

— Ya ! te. Me 'm ije kavet ac'hanout rigolo o pourmen gant branelloù, e-giz Per Stroalleg, eus penn-hent Ploneour.

— Te zo furzod, Veve.

— Me bari 't eus bet ur bern droug, pa 't eus tapet ar votezad.

— N' ouzon ket. 'M eus ket yudet, atav.

— Feiz ! Me 'm ije blejet 'vat.

— 'M eus bet droug, ken nemet pa eo deut ar froter. Tapet 'n eus din peg em zroad, ha va zroad a oa koeñvet ken tev ha da feskenn. — 'Rin ket droug dit, paotr bihan, a lare din an den, en ur frotañ din va zroad. Memes tra, e rae droug din, mes ne yuden ket. Goude-se, en deus lakaet din eoul ha n' ouzon ket petra c'hoazh war va zroad, ha lienet anezhañ gant un torch gwenn. Sell, Veve ! »

Tennañ a rae Paotr-Teo e dammig gar a-zindan al liñserioù, d' he diskouez da Veig. Ha, feiz ! paket fetis e oa troad dehout va abostol gant lienaj gwenn dalc'het gant spilhoù krok.

« Mailhuret eo da droad e-giz va breur bihan Gwenole », eme Veig.

— Ya ! » a responte Paotr-Teo.

Lavaret e vije bet e vage ourgouilh diwar e vleñs ha gant e vailhurenn. Ha Veig... avi.

« Te 't eus chañs 'vat », eme Veig. « An taol-mañ 't o ur rezon vat da reiñ da M. Karadeg, evit ar skol.

— Ya ! » eme Baotr-Teo. « Ha te, Veve ?

— O, me. Pa gontin dezhañ va beaj betek bro an Añglichen, e bourzh batimant ar c'habiten bras, me gred ne vin ket kredet gantañ, hag e vin dalc'het gantañ e pinijenn ken ac'han vakañsoù Nedeleg.

— Te gred, Veve ?

— M. Karadeg zo kozh. Mes morse ne gredo on bet oc'h ober ur veaj ken brav. »

Paotr-Teo, eñ, n' eo ket M. Karadeg e oa, da lavarout eo, ur mestr-skol kintus, diskredik, ha ne dalve ket klask tennañ dezhañ karotez. Paotr-Teo a grede. Bamiñ a reas gant an danevell, gwir e-keñver an danvez, hogen ken kaeraet, rikamanet, kresket, amplaet, ken splann-livet, ken touellus, ma tapas glazig en e javedoù, o terc'hel digor e c'henou, betek kreisteiz pe dost, o selaou ar Scheherazada e bragoù berr.

TI-MOULEREZH SIMON

ROAZHON

1972

AL LIAMM, 2, Venelle Poulbrikenn, Brest.

Diskleriet hervez lezenn : eil trimiziad 1972.

